

HENT

JOSEMARIA ESCRIVA

IMBOURC'H

HENT

JOSÉMARIA ESCRIVA

IMBOURC'H

AN OBEROUR

Sant Josémaria Escriva de Balaguer a zo bet ganet d'an 9 a viz Genver 1902 e Barbastro (Bro- Aragon - Spagn). War-dro e bemzek pe c'hwezek vloaz e verzas en e vuhez sinoù ur c'halvadenn a-berzh Doue, hag e reas e soñj mont da veleg. E studi-beleg a grogas e 1918 e kloerdi Logroño ha goude-se ez eas da gloerdi Sant Frañsez-a-Baol e kêr Zaragoza. E 1923, gant aotre e superioed e reas studioù war ar Gwir e Skol-Veur Zaragoza, ha beleget e voe e 1928.

E eskobva Zaragoza e labouras da gentañ. Da Vadrid ez eas da chom en nevezamzer 1927 gant aotre e arc'heskob. Eno e kasas da benn ul labour dizehan en holl gendereoù, pergen war-dro ar baourion hag ar geizh er c'harterioù digenvezetañ, ar glañvourion dibareadus o vont da vervel. Kemer a reas war e choug aluzenerezh Ensavadur ar re Glañv, obererezh-skoazellañ Itronenez Abostolek ar Galon-sakr. Kelemm a rae en un akademiezh prevez tra ma kendalc'he gant e studioù war ar Gwir.

Hor Salver a lakaas anezhañ da welout ervat, d'an eil a viz Here 1928, ar pezh ne rae nemet rakwelout betekhen. Neuze e savas sant Josémaria Escriva an Opus Dei. Bepred dindan atiz Hor Salver e voulc'has, adalek ar 14 a viz c'hwevrer 1930 gant abostolerezh an Opus Dei war-dro ar merc'hed. Un hent nevez a zigore en Iliz, gant ar pal aesaat da dud an holl gendereoù mont war-du ar santelezh hag an abostolerezh, dre santeladur al labour ordinal, e kreiz ar bed, hep kemm o stad-buhez.

Adalek an eil a viz Here 1928, ha gant kalz a gred abostolek evit an holl eneoù, e kasas da benn diazeour an Opus Dei ar gefridi a voe fiziet ennañ gant Doue. E 1934 e voe anvet rektor Ensavadur Santa Isabel. E-pad brezel-diabarzh bro-Spagn e reas e labour beleg - war-var e vuhez a-wechoù - e Madrid ha goude e Burgos. Diwar neuze hag e-pad pell e rankas talañ gant sederni hag ur spered dreistnatur, ouzh eneplavaroù kalet.

D'ar 14 a viz C'hwevrer 1943 e tiazezas Kevredigezh Beleion ar Groaz-Santel. Unanet-rik ouzh an Opus Dei, e oa he fal gellout belegañ izili-laik an Opus Dei, n'eo ket hepken evit reiñ dezho kargoù e servij an Obererezh hogen ivez, diwezhatoc'h, evit

lodennañ speredelezh hag askezerezh an Opus Dei gant beleion-
eskopti, da lavarout eo mont war-du ar santelezh o kas war-raok o
deverioù beleion, bepred e dalc'h rik o eskibien ordinal.

E 1946 e reas e annez e Roma, hag eno e chomas betek dibenn e
vuhez. Ac'hano e roas lañs hag e heñchas an Opus Dei en e
ziorroadur dre ar bed-holl, hep damantiñ d'e nerzh a-benn reiñ da
wazed ha merc'hed an Obererezh ur stummadur don war ar
gelennadurezh, an askezerezh hag an abostolerezh kristen. Pa
varvas e save da 60.000 niver izili an Opus Dei, eus 80 bro.

An Aotrou Escriva a voe kuzulier Bodad ar Pab evit deveziadur
gwiriek Lezenmaoueg ar Gwir Kanonek, hag ivez evit Bodad-Santel
ar C'hloerdiou ha Skolioù-meur. Prelad a Enor ar Pab e oa hag
ezel ad honorem Akademiezh ar Pab war an Doueoniezh e Roma.
Kanseller-meur skolioù-meur Navarra (Spagn) ha Piura (Perou) e
oa ivez.

D'ar 26 a viz Mezheven 1975 ez eo aet sant Josémaria d'an Anaon.
Abaoe bloavezhioù e kimmige e vuhez da Zoue evit an Iliz hag evit
ar pab. D'ar 15 a viz Gwengolo 1975 e voe diuzet an Aotrou Alvaro
del Portillo (1914-1994) a-unvouezh da zont war e lerc'h. e
genlabourer tostañ e oa abaoe pell. Prelad an Opus Dei a zo
bremañ an Aotrou Xavier Echevarria, en doa labourer eñ ivez e-
pad bloavezhioù niverus gant sant Josémaria ha goude-se gant e
warlerc'hiad kentañ.

Adalek ar penn-kentañ he doa bepred gallet an Opus Dei en em
harpañ war aotrouniezh an eskoptioù, hag ivez, adalek 1943, e voe
degemeret gant ar Sez-Santel, hag ar pab Yann-Baol II a lakaas
anezhi da vezañ Preladiezh personel d'an 28 a viz Du 1982, ar pezh
a glote gant an diazez gwiriel a oa bet rakwelet ha goulnnet gant
sant Josémaria Escriva.

Brud ar santelezh a oa war diazezer an Opus Dei pa oa bev
c'hoazh. Aet eo betek pennoù pellañ ar bed goude e dremenvan pa
seller ouzh an testenioù niverus-tre a c'hrasoù speredel ha danvezel
a vez lakaet war e anv. En o-zouez, un nebeud parañsoù
digomprenus diouzh ar savboent mezegel. Niverus-tre eo bet ivez al
lizhiri, o tont eus ar pemp kevandir - ha pergen a-berzh 69 kardinal
ha tost da vil tri c'hant eskob, un drederenn eus eskibion an Iliz - a
c'houlenne ma vefe digoret Kaoz gwemvidikadur ha kanonizadur an

Aotrou Escriva de Balaguer. Gwemvidikaet eo bet Josémaria
Escriva gant Yann-Baol II d'ar 17 a viz Mae 1992, ha lakaet war
roll ar sent gantañ d'ar 6 a viz Here 2002. Kantmiliadoù a dud a
oa deuet war leurgêr sant Pêr Roma evit an daou lid-se.

Abaoe an 21 a viz Mae 1992 emañ bez ar sant dindan aoter iliz bre-
ladel Santez-Mari-ar-Peoc'h, a zo sez-kreiz an Opus Dei, ha di-
baouez e vez pedet eno gant fideled niverus anaoudek, o deus, dre
ar bed-holl, tostaet ouzh an Aotrou Doue, sachet gant skouer ha ke-
lennadurezh diazezer an Opus Dei, hag ivez gant fideled all, dre
zeoliezh, hag a zeu da c'houlenn e erbedenn.

E-touez ar skridoù a zo bet embannet dindan e bluenn e c'heller
menegiñ ur studiadenn war an douenoniezh hag ar gwir, La Abade-
sa de Las Huelgas, levrioù a speredelezh a zo bet troet e yezhoù ni-
verus : Hent, Rozera Santel, Pa dremen ar C'hrist, Mignoned
Doue, Hent ar Groaz, Karout an Iliz, Ervenn, Govell (ar pemp di-
wezhañ-mañ a zo bet moulet goude e varv). Al levr gallek
« Entretien avec Monseigneur Escriva » (Emziviz gant an Aotrou
Escriva) a zo un dastumadenn eus pennadoù-kaoz 'zo, bet graet
gantañ gant kazetennerien.

(skrid aozet gant Embannadurioù « Le Laurier »)

Ali d'al lenner, gant an oberour :

« Ar c'huzulioù-mañ a zo da vezañ lennet gorrek.
Gant sederni, laka da breder en evezhiadennoù-se.
An traoù-se a lavaran dit e pleg da skouarn,
kuzhutadennoù ur mignon, ur breur,
un tad.

Ar c'huzhutadennoù-se, Doue o c'hlev.
Ne zisklêrin netra nevez dit.

Emaon o vont da hejañ da eñvorioù,
lakaat ur soñjezon bennak da ziflukañ diwarno
a bistigo ac'hanout,
evit ma vo gwellaet da vuhez,
ha ma'z i war hentoù a bedenn
hag a Garantez

ha ma tizhfes lakaat reizh da ene ha da spered. »

YOULEGEZH

- 1.- Arabat d'az puhez bezañ difrouezh. Bez talvoudus ; lez ul louc'had war da lerc'h. Ro sklerijenn, gant goulaouenn da feiz ha da garantez.
Diverk, gant da vuhez abostol, ar roud gludek ha lous o deus lezet haderion hudur ar gasoni ! Hag enaou holl hentoù an douar gant tan ar C'hrist a zougez ez kalon.
- 2.- Salv ma vo da emzalc'h ha da gaoz seurt ma c'hello an holl lavarout pa welint ha pa glevint ac'hanout o komz : hemañ a zo o lenn buhez Jezuz Krist.
- 3.- Parfeted. Lez ar jestroù hag an ardoù-se a zo re ur vaouezig pe ur c'hampinod ; bezet da emzoug diavaez an dameuc'h eus peoc'h hag urzh-vat da spered.
- 4.- Na lavar ket : evel-se emañ va zro-spered ; se a zo traoù diwar va ijin ; nann, se a zo traoù diwar da ziouer a ijin : bez ur gour.
- 5.- Kemer ar pleg da lavarout "nann" !
- 6.- Tro kein ouzh an divalav pa hiboud e pleg da skouarn : laosk an traoù da vont.
- 7.- Arabat dit soñjal hepken e tour da iliz-parrez ; laka an iliz-se da greskiñ, ken na vo kevhollet : 'katolik'.
Na nij ket evel ur yar pa c'hellez dibradañ evel un erer.
- 8.- Sederni. Perak kounnariñ, ma c'hloazez Doue dre gounnariñ, ma trubuilhez da nesañ, ha ma tremenez da-unan ur mare fall,... ha ma rankez digounnariñ a-benn ar fin.
- 9.- Dres ar pezh ac'h eus lavaret, lavar se war un ton all, hep kounnar ; gant seul vuioc'h a nerzh e tiskouezi da soñj, ha dreist pep tra, ne c'hloazi ket Doue.
- 10.- Arabat dit gourdrouz unan pa santi ez kreiz ez out fuloret gant ar gwall a zo bet sevenet. Gortoz an devezh war-lerc'h, pe zoken, diwezhatoc'h c'hoazh. Ha goude-se, sioul ha glanaet da vennad, na chom ket hep reizhañ. Tizhout a ri muioc'h gant ur gomz karantezus hepken eget teir eurvezh tabut : mestroni da natur.
- 11.- Youl. Nerzh-kalon. Skouer-vat. Ar pezh a zo d'ober a rank bezañ graet... Hep termal... hep damant.

Anez-se, Cisneros(1) ne vije ket Cisneros, na Tereza de Ahumada, santez Tereza... nag Inigo de Loyola, sant Ignad.

Doue ha kalonegezh ! "**Regnare Christum volumus**".(2)

12.- Sav da gein dirak ar skoilhoù. Gras an Aotrou ne c'hell ket mankout dit. "**...Inter medium montium pertransibunt aquae**." Tremen a ri a-dreuz ar menezioù.

Petra 'vern maz eo dav dit krennañ war da obererezh e-pad ur mare, ma savez goude-se, evel ur winterell bet gwasket, kalz uheloc'h eget na'z poa huñvreet bis-koazh.

13.- Kas diwar da dro ar soñjennoù didalvez-se, az laka da goll da amzer, da lavarout an nebeutañ.

14.- Na goll ket da nerzh-kalon ha da amzer, -a zo da Zoue, - o stlepel mein ouzh kement ki a vez o harzhal war an hent ; dispri-iz-int.

15.- Na c'hourzez ket da labour betek warc'hoazh.

16.- Leuskel da vont ? Ha te a yafe da heul an tropell ? Ha ma vefes ganet da vezañ ur blenier ? En hon touez n'eus ket lec'h d'ar re glouar. En em izela, hag ar C'hrist a raio dit leskiñ gant tan ar Garantez.

17.- Na gouezh ket er c'hleñved-se eus da dro-spered, a zo azonet gant an diouer a zalc'hegezh evit pep tra, ar skañvennegezh en ober hag er gomz... ar verboellegezh... an distervez, en ur ger.

Hag an distervez-se, - na zisoñj ket, - a ra dit kaout bemdez ar mennadoù-se ken goulo, - ken karget a c'houllo, - ma ne stourmez ket pa vez poent (ha n'eo ket warc'hoazh, bremañ soudan avat !); hama, an distervez-se a raio eus da vuhez ur verc'hodenn, marv ha didalvez.

18.- Derc'hel a rez da vezañ un den eus ar bed, avelet ha skañvbenn, dre maz out digalon. Petra eo se, ma n'eo ket digalon ez eo, an nac'h-se da dalañ ouzhit da-unan ?

19.- Youl. Ur merk pouezus-tre ez eo. Na zispri-iz ket an traoù bihan, rak, war-bouez en em c'hourdoniñ da zilezel an traoù-se (ha n'int ket disterdraoù na netraigoù) ha d'ober an dilez ac'hanout en o sigur, e teuio da youl

da vezañ nerzhus, hini ur gour : da gentañ e servijo dit an traoù bihan-se da vezañ mestr warnout da-unan ; ha goude-se, e teuio da youl da vezañ hini ur blenier, hini ur penn,... hini ur rener, ma vi gouest da rediañ, da vountañ, ha da gas war-raok, dre skoueriañ kement ha dre brezeg, dre'z skiant kerkoulz ha dre'z peli.

20.- Stekiñ a rez ouzh tro-spered hemañ pe egile ; dre ret e rank an traoù bezañ evel-se ; n'out ket ur skoed aour a blijfe d'an holl.

Ouzhpenn-se, hep ar stokadennoù-se a c'hoarvez oc'h ober war-dro an nesañ, penaos e vefe plaenaet ha kuñvaet begoù, kribelloù ha baliroù - sioù ha mankoù - da dro-spered. Penaos e tizhfes klokter ha luf, gwevnded start ar garitez hag an eswelled ? Ma vefe da dro-spered hag hini ar re a vev war da dro madigoù tener e-giz bizioù-dienn, ne vefes ket santelaet.

21.- Digareziou. Biken ne vankint dit evit chom hep seveniñ da zleadoù, hag ur bern a abegoù diabeg !

Na goll ket amzer o teurel evezh outo. Argas-int, ha gra pezh ac'h eus d'ober.

22.- Bez nerzhus. Bez ur gour. Bez un den. Ha da c'houde, bez un ael.

13- Petra ? Ne c'hellez ket ober muioc'h ? Daoust ha ne vefe ket kentoc'h... dre ma ne c'hellez ket ober nebeutoc'h.

24.- Uhelvennadoù ac'h eus : ...gouzout,... ren,... kaout hardizhegezh.

Mat, mat-tre. Hogen... ra vo evit ar C'hrist, dre garantez.

25.- Arabat tabutal. Peurvuiñ ne darzh ket ar sklerijenn eus an tabut, rak ar gred a lakaez ennañ a lazh anezhi.

26.- Ur sakramant santel eo ar briedelezh. Pa ranki degemer anezhañ, e koulz, d'az rener speredel pe d'az kofezour e vo aliañ dit lenn ul levr talvoudus bennak. En em gavout a ri gouestoc'h da sammañ, evel ma tere, kargoù an tiegezh.

27.- C'hoarzhin a rez pa lavaran dit ez out galvet d'ar briedelezh. Hama, galvet out. Hag ur galv ez eo, e gwirionez.

En em erbed ouzh sant Rafael, evit ma'z kaso, diantek, betek penn an hent, evel ma reas evit Tobias.

28.- Bez' ez eo ar briedelezh evit ar soudarded razh, ha n'eo ket evit izili kadvod ar C'hrist. Evel-se, tra maz eo an debriñ un dra ret-holl evit kement hini a zo, ez eo an engehenta un dra ret-holl evit ar ouenn hepken ; bez' e c'hell an dud a-hiniennoù, enta, tec'hout diouzh ar retvez-se.

C'hoant da gaout bugale ? Bugale, kalz bugale, hag ur roudenn sklerijenn na vo diverket biken a lezimp war hol lerc'h, maz aberzhomp emgarouriezh ar c'hreud.

29.- Eurvad dister ha paour an emgarour en em serr e-barzh e dour-olifant, en e grogen... n'eo ket diaes tizhout anezhi er bed-mañ ; hogen eurvad an emgarour n'eo ket unan badus.

Daoust ha koll a ri, evit ar vrizh-skeudenn-se eus an neñv, Eurvad ar C'hlod ha na vo dezhi fin ebet.

30.- Ur paotr mat da jediñ ez out. Na lavar ket ez out un den yaouank. Ar yaouankiz a zo kement a c'hell reiñ ; en em reiñ a ra hep muzul ebet.

31.- Emgarour. Atav e vezez gant da draoù. Lavaret e vefe ez out dic'houest da santout breuregezh ar C'hrist ; n'eo ket breudeur a welez ez nesañ, - derezioù da sevel drezo, ne lavaran ket !

Drouksantout a ran e ri tro-wenn, a-grenn. Ha pa vezez diskaret, e c'hedez e ve diskouezet ez keñver ur garitez hag a nac'hez lakaat da dalvezout evito bremañ.

39.- Ne vi ket ur rener ma ne welez er yoc'h nemet ur skabell da uhelaat da vent ; ur rener e vi m'ac'h eus da uhelvennad salviñ an holl eneoù.

Ne c'hellez ket bevañ o treiñ kein ouzh an engroez ; pezh a vank dit eo bezañ gredus da glask e eurvad.

33.- Nepred ne glaskez kas ar wirionez betek ar penn. A-wechoù, dre sevended ; a-wechoù, an aliesañ, evit tec'hout diouzh ur gwall dro bennak ; pe c'hoazh, evit henn espern ouzh ar re all. Ha dalc'hmat, dre laoskentez !

Evel-se, o toujañ kas an traoù betek penn, biken ne vi un den gouest da varn.

34.- Arabat dit kaout aon rak ar wirionez, goude ma

vefe ar wirionez kiriek d'az marv.

35.- Ne blij ket din kement-se al lavarerezh-kaer : ober a rit 'evezhiegezh' eus al laoskentez ; hag hoc'h 'evezhiegezh' a ro an tu da enebourion Doue, rouez ar mennozioù en o empenn, d'en em dremen da furion, ha da sevel betek staelioù na zlejent ket bezañ savet betek enno.

36.- Tu a zo da wellaat d'ar gwallvoaz-se. Un diouer a nerzh-kalon ez eo asantiñ e padfe ar gwallvoaz-se da viken, evel pa ne vije spi ebet d'e lemel na tu ebet d'e reizhañ.

Na dec'h ket diouzh da zevel ; dit d'e seveniñ didro, goude ma vanfe lod hanter-hent ouzh henn ober.

37.- Bez' ac'h eus, evel ma lavarez a-wechoù, kalz kaozioù da gontañ. Hogen gant an holl c'hlabouerezh-se, ne zeui ket a-benn da reizhabegañ pezh n'eo ket da vezañ reizhabeged, hag a zo, gouez dit, "diwar Ragevezh-Doue".

38.- Daoust hag ar wirionez e vo - se ne gredan ket na ne ran, - n'o deus an dud war an douar nemet ur c'hof, traken !

39.- "Ped evit na glaskin biken chom e bevennoù an aedded" : sed ar bedenn am eus graet. Bremañ, pezh a vank dit eo poaniañ evit seveniñ ar mennad taer-se.

40.- Feiz, sederni, gwellwelouriezh, met hep bezañ ur beulke hag a serr e zaulagad evit chom hep gwelout an traoù evel m'emaint.

41.- Nag ur stumm dreist da vevañ an abuzetez c'houllo, ha nag un doare da glask bezañ un dra bennak er vuhez, o sevel, o sevel, hep derc'hel netra a-hend-all, nag ez empenn, nag ez kalon !

42.- Perak e vez da spered o kemm-digemm bepred evel-se ? Pegoulz e stagi da youl ouzh un dra bennak ? Dilez 'albac'henn' ar 'mein kentañ' ; hag e kement a raktresez, soñj hepken er 'maen diwezhañ'.

43.- Arabat dit bezañ ken feukidik ! Hirisñ a rez evit n'eus forzh petra, ken e rank unan muzuliañ e gomzoù o tivizout ganit war an disterañ kraf.

Arabat dit broc'hañ ma lavaran dit ez out... dic'houzañ-vadus. Ma n'en em reizhez ket, ne vi biken mat da netra.

44.- Goulenn digarez en un doare hegarat, evel ma tere

ouzh ar garitez kristen hag ar vuhez er gevredigezh. Ha goude-se, kae war-raok gant da hent, gant un divergontiz santel, hep chom a-sav, ken n'az po krapet penn-da-benn gant krec'h an dlead sevenet.

45.- Perak e vezez doaniet paz ijiner tezennoù faziak o komz diwar da benn ? Un tamm mat gwashoc'h eget pezh a ijiner war da zivoud a rafes, sur, ma'z tilezfe Doue. Kendalc'h gant ar pezh a zo mat en ur ober ur c'hruz da'z tivskoaz.

46.- Daoust ha ne gav ket dit ez eo an 'ingalded', evel m'he meizont, ur ger all evit 'direizhded' ?

47.- Ar seurt stambouc'herezh hag ar seurt kamambre ne zereont ket mat ouzhit. Gwelout a reer ez int diwirion. Klask, da vihanañ, da dremen hep o implijout, na gant Doue, na gant da gariad-ene, na gant da vreudeur : etrezo ha te da-unan e vo ur gloued nebeutoc'h.

48.- Disterik eo da nerzh-kalon ; d'ober petra en em lakaez e pep tra ? Klask a rez bezañ an hollen da sallañ an holl veuzioù ! Ha - arabat dit bezañ feuket ma komzan ouzhit didro : n'out ket donezonet evit bezañ an hollen : ne vi gouest biken da deuziñ ha da steuziñ a-ziwar ar selloù, kerkoulz ha ma ra an temz-se a-ziwar ar meuzioù a vez bet sallet gantañ.

Mankout a ra dit ar spered a emaberzh ; trec'h eo dit ar spered a ranellder hag a emziskorezh.

49.- Ro peoc'h. Na c'hoari ket ar c'hrouadur ; arabat dit bezañ mibilus ; arabat dit bezañ ur glabouser, ur mesker, un toupiner. Gant da goñchennoù ha da varvailhoù ec'h eus klouaraet ar garitez. Ar pep gwashañ ac'h eus graet... Ha maz eo dicheñset dit reiñ brall da vogerioù-kreñv dalc'husted ar re all dre'z teodadoù, e paouez da zalc'husted-te ivez a vezañ ur c'hras a-berzh Doue, dre maz out-te deuet da vezañ ur benveg treitour etre daouarn an Enebour.

50.- Ranell ez out, bepred oc'h ober goulennoù ha bepred emañ e toull ar prenestr. Ne ro ket mezh dit chom hep bezañ ur gwaz, pe ken nebeut ! Ma vije gourel da berzhioù-fall, da vihanañ, met n'int ket ! Bez ur gwaz 'ta ! Hag ar c'hoant-se da anavezout traoù ar re all,

treuzfurm-eñ en ur c'hoant d'en em anavezout da-unan, ha ro e walc'h d'ar c'hoant-se !

51.- Da spered gwaz, reizh ha didro, a vez brumennet er velkoni o santout e'z luzier e korvigelloù ha kaozioù, ha na dizhez ket kompren a belec'h e teuont, ha na felle ket dit bezañ mesket enno.

Tremen dre an dismegañs a zo stag ouzh ar soñj ez eus estrenion o sevel marvailhoù diwar da benn ; ha diwar ar brenadenn-skiant-se, striv da vezañ avizetoc'h hiviziken.

52.- Pa vezez o varn da nesañ, perak e lakaez ez purutel-ladennoù ar c'hwervoni a dennez diouzh da c'hwitadennoù da-unan ?


53.- Ar spered-burutellañ, - lakaomp n'eo ket hiboude-rezh, -arabat ober gantañ e sigur da abostolerezh, nag e sigur da vreudeur. Ar spered burutellañ-se, pa vez anv eus hoc'h embregadenn dreistnaturel (va fardoniñ a ri p'en lavarint dit) a zo, e gwirionez, ur skoilh bras ; rak, tra m'emaout oc'h ensellout ouzh labour ar re all - pa n'ac'h netra da ensellout ! - (uhel-meurbet eo da savboent, se a anzavan ouzhit !), hama, ne gasez da benn oberenn c'hounidus ebet, ha war ar marc'had, e c'hennet an ardivink penn-da-benn dre ar skouer a ziegi a roez, en ur virout ouzh ar re all a vont reizh war-raok.

"Neuze," a c'houlennet, nec'het, "ar spered-burutellañ-se, a zo diazev va spered, koulz lavaret... ?"

Sell'ta, - emañ o vont d'az tinek'hiñ, - krog en ur bluenn ha kemer ur follenn-baper ; skriv didro ha fiziak, ha berr-ha-berr, gant petra out trubuilhet ; lez an notenn-se gant da holour, ha ne soñji mui enni. Hemañ, - dezhañ eo ren an traoù, ha grasoù-stad en deus evit-se, - a glenke an notenn pe he zaolo er gest. Evidout, o vezañ ma n'eo ket da spered-burutellañ ur spered a zroukprezegerezh, e vo dres ar memes tra.

54.- Amzeriñ ? Setu un dro-lavar - "ret eo amzeriñ !" - ha na gejer ganti nemet e-barzh geriadur ar re o deus diegi da stourm, pitouilh, gwidreüs pe laosk, dre ma ouzont ez int faezhet en a-raok.

55.- Va faotr, bez muioc'hik didro (daoust dit bezañ tre dres evel ur c'hrouadur, ha setu pezh ez out e gwirionez dirak Doue), ha na ra ket eus da vreudeur un danvez fars dirak estrenion.



(1) Cisneros (1436-1517): Kardinal a Spagn, lez-rener ar rouantelezh eno, kofesour ar rouanez Izabella, ar Gatoligez. Emstrivañ a reas ar C'hardinal Cisneros da adreizhañ an Iliz e Spagn, o kas da benn en a-raok ar pezh a zlee seveniñ Goursened Trento meur a vloaz war-lerc'h. Brudet e oa evit bezañ un den dibleg ha nerzhus-dreist e dro-spered.

(2) "Fellout a ra deomp e renfe ar C'hrist". Pelloc'hik : "Dre greiz ar menezioù e raio an dourioù o zrezuz..."



BLENIEREZH-ENE

56.- "Danvez ur sant". Sed pezh a lavarer eus tud 'zo : enno ez eus danvez ur sant. Hogen, ouzhpenn ma n'eo graet ar sent gant danvez, kaout danvez n'eo ket a-walc'h.

Ezhomm ez eus kalz sentidigezh ouzh ar blenier-ene, ha kalz plegusted d'ar c'hras. Rak, ma ne lezez ket gras Doue hag ar blenier-ene d'ober o labour, biken n'en em ziskouezo ar c'hizelladur, skeudenn Doue, m'en em dreuzfurm enni an den santel. Ha danvez ar sant m'emaomp o komz anezhi, ne zeuio da vezañ nemet un tamm koad disneuz, hep danvez ennañ d'al labour, mat d'ober tan... un tan mat, ma oa koad mat anezhañ.

57.- Darempred hep astal ar Spered Glan, an Hini Dianavrik, an Hini en deus d'az santelaat. N'ankounac'ha ket ez out Templ Doue ; emañ ar Parakled e-kreiz da ene ; selaou-eñ, hag heuilh, hep herzel, kement kemenn a roy dit d'anaout dre e Awen.

58.- Na drubuilh ket oberenn ar Parakled ; en em unan ouzh ar C'hrist, evit en em c'hlanan ha gouzañv gantañ ar c'hunujennoù, ar skopadennoù, ar flac'hadoù hag ar spern, ha pouez ar groaz, hag an tachoù o trailhañ da gig, hag anken ar marv en estrenvan.

En em laka e-barzh kostez digor Hor Salver Jezuz, ken na gavi ur repu asur en e galon c'hloazet.

59.- Dereat eo ez anavezfes ar gelennadurezh diogel-mañ : gwall alies ez eo ar Spered e-unan gwell sturier evit leviañ an ene er barroù-avel hag er c'horventennoù, e-mesk skoilhoù ar vuhez diabarzh.

Dre se ez eo youl Doue e ve kemeret stur al lestr gant ar Mestr a gaso ac'hanomp d'ar porzh asur, gant ar sklerijenn hag ar ouiziegezh a zo dezhañ.

60.- Ma ne savfes ket un ti mat hep skoazell un adella-dour, penaos e klaskfes sevel hep blenier-ene da santelidigezh evit bevañ ar beurbadelezh en neñv ?

61.- Pa sav ul laik da renk ur mestr speredel, e fazi alies ; diskibion hepken e c'hell bezañ al laiked.

62.- Ur blenier-ene... Un dra ret-holl eo. Dit eo en

em reiñ dre sentiñ... Ur blenier-ene a anavezo da abostolerezh, a ouezo ar pezh a fell da Zoue ; evel-se e harpo en un doare efedus labour ar Spered Santel e-barzh da ene, hep sachañ ac'hanout er-maez eus al lec'h m'emaout ; peoc'h a skuilho ez kreiz avat ha kelenn a raio dit pe vod e vo frouezhus da drevell.

63.- Kalz personelezh ac'h eus, a soñj dit, da studioù, da labour, da embannadurioù, da savlec'h er gevredigezh, da vrud, da obererezh politikel, ar c'hargoù a zalc'hez, da beadra, da oad ; gwir eo : n'out ket ur paotrig.

Dres, evit kement-se holl ec'h eus muioc'h ezhomm eus ur blenier evit da ene.

64.- Na guzh ket ouzh da vlenier-ene ar pezh a sil an enebour ez spered. An trec'h tizhet ganit war-bouez diskargañ da galon a c'hounezo dit brasoc'h gras digant Doue ; hag ouzhpenn, bremañ, evit kenderc'hel da drec'hiñ, ec'h eus donezon ar C'huzul ha pedennoù da Dad speredel.

65.- Perak seurt diegi d'en em welout da-unan ha da lakaat da vlenier speredel d'az kwelout dres evel maz out e gwirionez ?

Gounezet az po un emgann bras ma kollez an aon d'en em reiñ da anaout.

66.- Ar beleg, - peseurt bennak e vo, - a vo atav ur C'hrist all.

67.- Ne fell ket din, - daoust ma ouzout se ervat, - paouez a gounañ ur wech ouzhpenn ez eo ar beleg ur "C'hrist all", hag en deus lavaret ar Spered Santel : "Nolite tangere Christos meos..." : "Arabat eo deoc'h stekiñ ouzh va C'hristed..."

68.- Beleg, e gresianeg, e talvez ar ger-se 'henaour' ; ma tellez an den kozh bezañ kehelet, soñj pegement muioc'h e rank ar beleg bezañ kehelet ganit.

69.- Pegen dister e tle bezañ da gizidigezh speredel, ha pegen diant da zoujañs, evit distignañ fentigelloù ha bourdoù e sigur ar beleg, peseurt bennak e vo hemañ, ha ne vern petore digarez az pefe d'henn ober.

70.- Distreiñ a ran war ar c'hraf-se : ar farsadennoù-se, ar goapadennoù-se e sigur ar beleg, gant an holl amplega-doù a seblant o dic'hrevusaat, a zo bepred, da vihanañ,

komzoù gros ha dizoare.

71.- Pegement e tleomp estlammif ouzh glanded ar beleg ! Un teñzor eo ar c'hlanded-se. Mac'homer ebet ne c'hello biken diframmañ ar gurunenn-se digant an liz.

72.- Na laka ket ar beleg war var da goll e barfeted. Kement-se a zo ur vertuz a rank-eñ derc'hel dezhi, hep koll nepred e vestroni warnañ e-unan.

Evel ma c'houlenne ar c'hloareg yaouank, hor mignon : Aotroù Doue, ro din pevar-ugent vloaz a barfeted !

Goulenn-hi, te ivez, evit an holl veleion gwitibunan, hag un dra vat az po graet.

73.- Graet en deus poan dit, evel un taol kontell ez kalon, e vije bet lavaret diwar da benn ez poa gwallgom-zet ; laouen on gant da boan : bremañ ez on sur ec'h eus ur spered mat.

74.- Karout Doue hep kehelañ ar beleg : se ne c'hell ket bezañ !

75.- Evel bugale vat Noha, golo gant pallenn ar garitez ar reuzeudigezh a welez ez tad, ar beleg.

76.- Ma n'ec'h eus ket ur steuñv evit da vuhez, biken ne vi un den urzhiet.

77.- Setu, sujañ d'ur steuñv evit da vuhez, d'un amzeria-dur, nag enoeüs ! Hag e respontan dit : enoe ez eus e-lec'h emañ diant ar Garantez.

78.- Ma ne savez ket d'an hevelep eur bemdez, biken ne gasi da benn steuñv da vuhez.

79.- Ur vertuz hep urzh ? Ur vertuz na welez ket alies !

80.- P'az po urzh, ez po dek gwech muioc'h a amzer ; hag en arbenn a se e c'helli rentañ muioc'h a glod da Zoue.

* * * * *

PEDENN

81.- An ober ne dalv netra hep ar bedenn ; gant an aberzh e kemer ar bedenn talvoudegezh.

82.- Pediñ, da gentañ ; dic'haou, da c'houde ; hag en trede renk, hag hepken en trede renk, an ober.

83.- Diazez an adeilad speredel ez eo ar bedenn ; hollc'halloudek eo ar bedenn.

84.- "Domine, doce nos orare." "Aotrou, desk deomp pediñ." Hag an Aotrou a respontas : "Pa stagit da bediñ, e tleit lavarout "Pater noster, qui es in coelis..." "Hon Tad hag a zo en neñv..."

Na pegement a bouez a zleomp reiñ d'ar bedenn a vouezh uhel !

85.- War-bouez. Taol evezh ouzh pezh a lavarez, peseurt out-te hag a lavar se, ha da biv e lavarez se. Rak komz a-herr, hep kemer amzer da brederiañ, se a zo storlok ha stirlink ur bodez-houarn kleuz !

Hag e lavar in dit, war un dro gant santez Tereza : ne ran ket eus an dra-se pediñ, daoust dit kefluskañ kalz da ziweuz.

86.- Litourgiezhel e tle bezañ da bedenn ; salv ma teufes da vourrañ o tibunañ ar salmoù ha pedennoù ar misal, e-lec'h pedennoù prevez pe hiniennel.

82.- "N'eo ket diwar bara hepken e vev an den, hogen diwar gement komz a zeu er-maez eus genou Doue." Bara ha komz ! Ostiv ha pedenn !

Anez se, ne vev ket ur vuhez dreistnaturel.

88.- Klask a rez kaout kompagnunezh mignoned a lakafe skañvoc'h dit, dre o divizoù, o c'houvrantiez pe o c'heneiliez, harlu ar bed-mañ, daoust ma vez ar vignoned o traisañ a-wechoù. N'eo ket un dra fall, d'am soñj. Hogen... Perak ne zarempredez ket stankoc'h c'hoazh bemdez ar C'heneil Meur ha na drubardo nepred, o klask e gompagnunezh hag e emziviz ?

89.- "Dibab a reas Maria al lodenn wellañ," a lenner en Aviel Santel. Aze emañ-hi, oc'h euvriñ komzoù Hor Salver (da welout, hep ober mann, o pediñ hag o karout

hepken); goude-se avat ez ambroug Jezuz pa vez o prezeg er c'hêrioù hag er bourc'hadennoù.

Hep pedenn, na start eo e ambroug !

90.- Ne ouzout ket pediñ, a lavarez. En em laka a-c'houez da Zoue, hag adal ma krog da lavarout : "Aotroù, n'ouzon ket ober ar bedenn a galon," bez sur ez po staget d'henn ober.

91.- Skrivet ec'h eus : "Pediñ a zo divizout gant Doue... Hogen diwar-benn petra ?" Diwar-benn petra ? Diwar e benn, diwar da benn : levez, tristidigezh, berzh-mat ha droukverzh, arveziou hael, prederioù pemdeziek... Gwanderioù, greadoù a drugaregezh ha goulennoù ; ha karantez ha digoll.

E daou c'her : e anavezout hag en em reiñ d'anavezout, da lavarout eo, en em zaremprediñ.

92.- "Et in meditatione mea exardescit ignis." "Hag a-greiz din meveriañ e stag an tan da leskiñ." Evit se emañ o vont da bediñ ; evit ober ac'hanout un tantad, ur flammenn vuhez, a ro gwrez ha sklaerder.

Rak-se, pa ne ouzout ket mont war-raok, pa santez emañ o vont da vougañ, met ne c'hellez ket teurel en tan kefiou frondus, taol ennañ briñsennoù ha kalavr ar pedennoù berr a vouezh uhel, pedennoù a-darzh-kalon, a roio danvez d'an tantad ; ha graet az po un implij mat eus da amzer.

93.- En em welout a rez ken reuzeudik, maz anzavez n'out ket dellezek da vezañ klevet gant Doue. Ha dellidoù Maria avat ? Ha goulioù Hor Salver ? Ha... daoust ha n'out ket mab da Zoue ?

Ouzhpenn-se, da selaou a ra "quoniam bonus... quoniam in saeculum misericordia ejus..." "peogwir ez eo mat, peogwir e peurbad e drugarez da viken..."

94.- Ken dister en deus en em c'hraet ! Sell 'ta : ur c'hrouadur, evit ma tenesai outañ gant fiziañs.

95.- "In te, Domine, speravi..." "Ennout, Aotroù, em eus lakaet va goanag." Hag arveret em eus, war un dro gant an araezioù denel, va fedennoù ha va c'hroazioù ; ha va spi n'eo ket bet aner. "Non confundar in aeternum."

96.- Komz a ra Jezuz : "Evel-se e lavaran-me deoc'h : goulennit, ha roet e vo deoc'h ; klaskit, hag e kavot ;

skoit ouzh an nor, ha digoret e vo."

Ped ! E peseurt afer denel e c'hellfed reiñ dit muioc'h a asurded d'ober berzh ?

97.- N'ouzout ket petra lavarout d'an Aotroù ez pedenn. N'ec'h eus soñj eus netra, ha koulskoude e karfes kemer kuzul digantañ a-zivout kalz traoù. Sell : kemer un nebeut kudennoù e-pad an deiz e sigur ar c'hudennoù a c'hoantaez arsellout a-c'houez da Zoue.

Ha goude, kerzh gant an notennoù-se da bediñ.

98.- War-lerc'h hini ar beleg hag ar gwerc'hez kensakret ez eo pedenn ar vugale ha pedenn ar re glañv an hini a blij ar muiañ da Zoue.

99.- Paz ez da bediñ, e tleez bezañ mennet start : na ro ket dezhi muioc'h a amzer dre ma kavez frealz enni, ha nebeutoc'h, dre ma chom krin ha sec'h da galon.

100.- Na lavar ket da Jezuz e klaskezh frealz o pediñ ; ma ro dit frealz, bez anaoudek evit se ; lavar dezhañ e klaskezh dalc'husted.

101.- Dalc'h krog er bedenn ; dalc'h krog, daoust ma hañval da striv bezañ difrouezh ; teurel frouezh a ra bepred ar bedenn.

102.- Morzet eo da vez, dilusk ; en aner e rez bec'h da genurzhañ da vennozioù a-c'houez d'an Aotroù : e gwirionez, badaouet-mik ez out !

Na ra ket bec'h ; n'en em chal ket. Klev mat pezh a lavaran : amzer ar galon ez eo.

103.- Ar c'homzoù-se o deus skoet da spered e-pad ar bedenn, garan-int ez eñvor ha dibun-int, war-bouez meur a wech, e-doug an deiz.

104.- "Pernoctans in oratione Dei." Tremen a reas an nozvezh penn-da-benn o pediñ. Setu pezh a lavar sant Lukaz deomp diwar-benn an Aotroù.

Ha te, pet gwech ec'h eus dalc'het keit all ? Neuze !

105.- Ma ne zarempredez ket Doue er Bedenn hag er Bara, penaos En roi da anaout ?

106.- Skrivet ec'h eus din, ha da intent a ran : bemdez e ran va 'lodennig' pedenn-a-galon... Anez se....

107.- Santel hep pediñ ? Ne gredan ket er santelezh-se.

108.- Lavarout a rin dit, en ur breizhañ ar frazenn-mañ

diwar oberenn ur skrivagner estren : talvezout a ra da vuhez abostol pezh a dalvez da bedenn.

109.- Ma n'out ket un den a bedenn, ne gredan ket ez eo reizh da vennad, pa lavarez e labourez evit ar C'hrist.

110.- Ur wech bennak ec'h eus lavaret din e tennes d'un horolaj direizhet a vez o seniñ digoulz ; yen ez out, krin ha sec'h pa vez poent pediñ ; hag er c'hontrol, pa vez an nebeutañ da c'headal, war ar straed, e-mesk an enkreziou pemdeziek, e-kreiz tousmac'h ha fourgas kêr, pe e sioulded da labour micher, en em gavez o pediñ. N'eo ket ar c'houlz ? Mat ! Na walleg ket ar sonriou-se eus da horolaj : e-lec'h ma kar e c'hwezh ar Spered.

111.- Graet ec'h eus din c'hoarzhin gant da bedenn, mall warni : "Ne fell ket din chom da gozhañ, Jezuz ; kalz ez eo gortoz evit da welout. Neuze, marteze, n'em befe ket ur galon bev-buhezek e-kreiz va c'horf, evel m'am eus bremañ. Kozhañ ? Diwezhat e vo, a gav din. Bremañ e vefe gredusoc'h va unvaniezh ganit, dre ma'z klaskan gant karantez ur paotr yaouank.

112.- Plijout a ra din a-walc'h e vevfes evit seveniñ un dic'haouadur a dizhfe pell-bras, keit hag ar Bed, ac'h eus lavaret. A zo mat ! Met, da gentañ, soñj ez tiegezh dreistnaturel, hini da ouenn, hag hini ar vroad a zo da genel.

113.- Lavarout a raes dezhañ : "N'az pezet ket fiziañs ennon... Me avat, eo, fiziañs am eus ennout, Jezuz. En em lezel a ran etre da zivrec'h ; ez parlenn e laoskfen pezh am eus : va reuzeudigezh." Ha se a seblant din bezañ ur bedenn vat.

114.- Pedenn ar c'hristen ne vez morse un unangomz.

115.- "Chom dilavar e-pad ur vunutenn !" Laosk kement-se d'ar re sec'h a galon.

Ni, katoliged, a gomz ouzh Hon Tad a zo en Neñv.

116.- Na lez ket a-gostez da lennadur speredel.

Al lenn en deus graet kalz sent.

117.- Diwar lenn, a skrivez din, e tastuman va mirad keuneud. Seblantout a ra bezañ ur bern dilusk, hogen alese, alies, e sach va eñvor, drezi hec'h-unan, an danvez

a vuhezeka va fedenn hag a entan va gread a drugaregezh goude keduniñ.

* * * * *

GLANDED SANTEL

118.- Ar c'hlanded santel a vez roet gant Doue p'he goulenner gant uvelled.

119.- Pegen kenedus eo ar c'hlanded santel ! Hogen n'eo ket santel na plijus da Zoue m'he disrannomp diouzh ar garitez.

Bez' ez eo ar garitez an had a gresko hag a roio frouezh saourus-kenañ gant ar wazh-dour ez eo ar c'hlanded.

Hep karitez ez eo difrouezh ar c'hlanded, hag he dourioù disperius a dregemm an eneoù e krenegelloù, e geunioù flaerius ma tarzh diouto gwallaezhennoù a lorc'hentez.

120.- Glanded ? a c'houlennont. Ha mousc'hoarzhin a reont. An hevelep re eo a zegouezh er briedelezh gant ar c'horf gweñvet hag un ene divoemet.

Deoc'h e c'hrataan ul levr a c'hello dougen an talbenn-mañ : "Dizimezded, dimeziñ, ha glanded."

121.- Ezhomm a zo eus ur groaziadeg a c'hourelezh hag a c'hlanded a skoilho hag a gaso da get labour gouez ar re a gred ez eo an den ul loen mut.

Ha bez' ez eo ar groaziadeg-se ho labour.

122.- Kalz a vev evel aelez e-kreiz ar bed. Ha te, perak ne rafes-te ket ?

123.- P'az po graet start da soñj ren ur vuhez dinamm, ne vo ket an diantegezh ur samm evidout : bez' e vo anezhi ur gurunenn a c'hourdrec'h.

124.- Skrivañ a rez din, medisin abostol : "Holl e ouzomp, dre skiant-prenet, e c'hellomp menel diorged, war-bouez bevañ war evezh, war-bouez pleustriñ ar sakramantoù, ha dre vougañ fulennoù kentañ ar c'hoantegezh hep lezel an tangwall da gregiñ da vat. Ha dres, e-touez ar re ziorged e konter ar wazed ar muiañ onest e pep keñver ; hag e-touez ar re c'hadal e kaver dreist-holl ar re abaf, ar re emgar, ar re souchet, ha kriz, perzhioù hag a zo azonus eus nebeut a c'hourelezh.

125.- "Me ' garfe," emezout, "en defe Yann, an den yaouank, un diviz a galon ganin-me, hag e rofe din kuzu-

lioù, ha e'm broudf e da dizhout glanded va c'halon."

Ma fell dit, e gwirionez, lavar dezhañ; broudet e vi, ha kuzul az po.

126.- Bez' ez eo al lontegezh an nor digor d'ar c'hadaliezh.

127.- Na glask ket emzvizout gant ar c'hoantegezh: dispriz-hi!

128.- Mezh-fur hag elevez a zo c'hoarezed yaouañ ar c'hlanded.

129.- Hep ar c'hlanded santel ne c'hell ket unan derc'hel gant e grog.

130.- Lam, Jezuz, a-ziwarnon an drouskenn-se a lizadurezh hudur a c'holo va ene, ma klevin ha ma heuilhin aes stokadennoù ar Parakled em ene.

131.- Na gomz nepred, evit siwadiñ zoken, a-zivout traoù pe zarvoudoù vil. Taol evezh penaos ez eo an danvez pegusoc'h eget ar peg. Distro ar gaoz, ha ma n'eus ket tu, kendalc'h ganti en ur venegiñ ar ret hag ar c'haer maz eo ar c'hlanded santel, briwerc'h ar wazed a oar petra a dalvez o ene.

132.- Na vez ket kouart a-walc'h evit bezañ kadarn: tec'h kuit.

133.- N'eus ket bet, gwech ebet, tud distummet eus ar sent, anezho 'degouezhioù' da studiañ d'ur mezeg moder-nour.

Bet int, ha bez' ez int tud reizh: tud a gig, evel da hini; ha trec'het o deus.

134.- Bout m'en em wisk ar c'hig gant seiz, e lavarint dit... p'az kwelin o horjellañ dirak an tentadur a guzh e zic'hlanded dindan digarezioù an arz, ar skiant... ar garitez!

Lavarout a rin dit 'ta, hervez komzoù un diskan kastilh-anek kozh: daoust ma vez ar c'hig gwisket gant seiz, e chom kig!

135.- Ma oufes petra a dalvezez! Sant Paol an hini eo a lavar dit: ker-ruz out bet prenet! "**Pretio magno!**"

Ha lavarout a ra dit c'hoazh: "**Glorificate et portate Deum in corpore vestro.**" "Klodekait ha dougit Doue en ho korf."

136.- P'az pezh klasket kompagnunezh ur moinadur gadal,...

na pebezh digenvez goude-se!

137.- Pa soñjan ec'h eus kollet an "hent" evit ur moinadur berrbad ha na lez war e lerc'h nemet ur ouelezenn a vestl hag a c'hwervoni!

138.- "**Infelix ego homo! Quis me liberabit de corpore mortis hujus!**" "Nag un den reuzeudik on! Piv am dieubo diouzh ar c'horf-mañ a varv?" a c'harm sant Paol. Kemer kalon: stourm a rae ivez.

139.- Paz erru mare an tentadur, soñj er Garantez a zo ouzh da c'hortoz en neñv; broud ez kreiz briwerc'h ar Goanag. Kement-se n'eo ket un diouer a haelled.

140.- N'en em chal ket: c'hoarvezet a c'hoarvezo, adal ma ne asantez ket; rak ar vennentez hepken a c'hell digeriñ dor ar galon, ha deren enni hec'h argarzhentezioù.

141.- E-kreiz da ene e vefe kredet e klevet, evit gwir: "Kement-se a zo rakvarn relijiel." Ha da c'houde, ur brezegenn-difenn a-du gant holl druegezhioù hor paour-kaezh kreud paket lamm gantañ: "E wirioù!"

Pa c'hoarvez an dra-se ganit, lavar d'an enebour ez eus ul Lezenn naturel, Lezenn Doue, ha Doue; hag ivez, un ifern!

142.- "Domine, si vis, potes me mundare!" "Aotrou, mar karez, e c'hellez va glanaat!" Nag ur bedenn gaer da adlavarout alies gant feiz ar paour-kaezh den lovr, pa c'hoarvezo ganit ar pezh a oar Doue, te ha me. Hep dale e klevi respont ar Mestr: "Volo: mundare!" "Me 'fell din: bez glanaet!"

143.- Evit difenn e c'hlanded en em ruilhas sant Frañsez en erc'h; sant Benead en em daolas en ur bod spenn; sant Bernez a splujas en ur stank skornet... Te, petra ac'h eus graet?

144.- Glanded rik sant Yann e-doug e vuhez a ro nerzh dezhañ dirak ar Groaz.

An ebistel all a dec'h diouzh ar Golgotha; eñ, chom a ra gant Mamm ar C'hrist.

Na zisoñj ket e teu unan da vezañ nerzhusoc'h gant ar c'hlanded, hag e demz-spered da vezañ gourelloc'h.

145.- Talbenn Madrid. Un ugent bennak a ofisourion, kamaladed balc'h ha laouen. Klevout a reer ur ganaouenn,

unan all, hag un all c'hoazh.

Al letanant yaouank-se, e vourrou gell, ne glevas nemet ar poz kentañ :

Eus kalonoù daourannet

N'em eus tamm ezhomm ebet,

Ha ma roan-me va hini

En he roan dit en he fezh !

"Na pebezh stourm evit reiñ ar galon en he fezh !"
Ha tarzhañ a reas ar bedenn, en he naoz, sioul ha ledan.

AR GALON

146.- Reiñ a rez din da soñjal e tougez da galon e-barzh da zorn, e-giz pa vefes o kinnig ur varc'hadourezh. Ha ma ne ro c'hoant da grouadur ebet, ez i d'he daskorifi da Zoue.

Krediñ a rez ez eo evel-se o deus graet ar sent ?

147.- Ar grouadurion a zo evidout ? N'int ket : da Zoue int ! Ha maz int dit, en arbenn a Zoue ez int.

148.- Perak kregiñ da evañ diwar lagennoù ar frealzou bedel, ma c'hellez terriñ da sec'hed en dourioù a darzh betek ar vuhez peurbadel ?

149.- En em zistag diouzh ar grouadurion, ken e chomi dibourc'het diouto. Rak, gouez d'ar Pab sant Gregor : an diaoul n'en deus netra en e biaou er bed-mañ, ha noazh eo e tered d'an emgann. Maz ez da stourm outañ, ha te gwisket, diouzhtu e paki lamm, peogwir en devo peadra da gregiñ ennout.

150.- Kavout a ra din ez eo e-giz pa lavarfe da ael mirer : ur galon ac'h eus hag a zo ken leun a gouvrantiezh denel ! Ha neuze : an dra-se eo e fell dit e virfe da ael mirer ?

151.- En em zistagañ ? Na koustus eo ! Piv a lavaro din ne'm eus ken d'am stagañ nemet tri zach, na santadur ebet ken em c'hig nemet ar Groaz.

152.- Ne santez ket ez eus ouzh da c'hortoz muioc'h a beoc'h ha muioc'h a unvaniezh p'az po lakaet da youl da glotañ gant ar c'hras dreistordinal-se a c'houlenn groñs diganit en em zistagañ penn-da-benn.

Stourm evitañ, evit plijout dezhañ, hogen kreñva da c'hoanag.

153.- Kerzh, gant kaloniezh, hag evel ur bugel, lavar dezhañ : petra emout o vont da reiñ din, peogwir e c'houlennez kement-se diganin ?

154.- Aon ac'h eus rak ober ac'hanout-te da-unan un den yen ha reut e-keñver an holl, kement e klaskez en em zistagañ ? Lez ar preder-se ! Maz out d'ar C'hris, penn-da-benn d'ar C'hris, evit an holl ez po, kerkoulz

hag ar C'hrist, tan, sklerijenn ha gwrez.

155.- N'eo ket a-walc'h da Jezuz kaout e lod : an holl a fell dezhañ kaout.

156.- Ne c'houlez ket sujañ da youl Doue... Hag en eskemm, en em gavez mat gant youl ne vern pe damm krouadur bennak !

157.- Na blant ket din an traoù war an tu-gin : M'en em ro dit Doue e-unan, d'ober petra derc'hel peg er grouadurion ?

158.- Setu daerou bremañ... Droug a ra, 'keta ? Sklaer eo, paotr ! Evit se dres ez out bet skoet aze !

159.- Horjellañ a ra da galon ha klask a rez un tamm harp war an douar. Mat. Hogen diwall na vo troet ar skor a gemerez evit chom hep kouezhañ, en ur pouez divuhez az sacho war-dreñv, - en ur chadenn az ereo.

160.- Lavar din, lavar din : kement-se, daoust hag ur vignoniezh ez eo, pe ur chadenn ?

161.- Forzh pegement e trouziviez da denerded... Ha dit e lavaran : karantez ouzh da nesañ, ya, atav. Hogen, selaou ac'hanon mat, ene a abostol : d'ar C'hrist ez eo, hag evitañ hepken an trivliad all-se a lakaas an Aotrou e-unan ez askre. Ouzhpenn-se, daoust ha n'eo ket sur penaos, o tigeriñ ur morailh bennak eus da galon, - eus seizh morailh he deus ezhomm, - meur a wech ez eus manet e-skourr war da zremmwel speredel ur gogusennig a arvar... Hag en em c'houlenn a rez, trubuilhet en desped da c'hlanded da vennad : "Daoust ha ne vijen ket aet re bell, en tu all d'ar muzul, oc'h erzerc'hañ a-ziavaez doug va c'halon ?"

162.- Ar galon, a-gostez ! An dlead, da gentañ. Hogen, o kefleuniañ da zever, laka er c'hefleuniadur-se ar galon, - a zo c'hwekted.

163.- M'az laka da lagad dehoù d'asoupañ, diframm-eñ ha taol-eñ pell. Paour-kaezh kalon, a zo an hini a ra dit asoupañ !

Stard-hi, gwask-hi etre da zaouarn ! Na ro ket frealz dezhi, ha pa c'houlenno anezhañ, lavar dezhi goustadik, leun eus ur gendruerz hael, evel ur segred : war ar groaz, va c'halon, war ar groaz va c'halon !

164.- Penaos emañ ar bed gant ar galon-se ? Na vez ket chalet ganti ! Ar Sent, a oa denion stummet mat ha reizh, evelout hag evelton, a sante ivez an dougoù naturel-se. Ha ma n'o dije ket o santet, - o ersav dreistnaturel da virout o c'halon, - ene ha korf, - evit Doue, e-lec'h he daskoriñ d'ur c'hrouadur bennak, n'en dije ket degaset dezho kalz a zellid.

Setu perak, ur wech gwelet an hent, e kredan ne zle ket gwanded ar galon bezañ ur skoilh evit un ene mennet start hag o karout da vat.

165.- Te... hag a zo tremenet dre gement a zismegañsoù evit un amourousted diwar an douar, daoust hag e kav dit e karez Doue da vat hep tremen, evitañ, dre an dismegañs-se ?

166.- Skrivañ a rez din : "Tad, droug-dent am eus em c'halon..." Ne gemeran ket ar c'homzoù-se evit farserezh, rak kompren a ran ec'h eus ezhomm eus un dantour mat evit tennañ diouzhit un nebeut dent !

M'en em lezfes d'ober ?

167.- "A, m'em bije torret an darempredoù er pennkentañ," ac'h eus lavaret din. Salv n'az po ket da leuskel en-dro seurt estlammadenn gwall ziwezhat !

168.- "Fent ac'h eus roet din p'ac'h eus komzet din eus ar c'hontoù a c'houlenno Hor Salver diganeoc'h... Nann, evidoc'h, ne vo ket ur barner, hervez ster strizh ar ger, met Jezuz, traken !"

Al lavarenn-se, skrivet gant un eskob santel, a frealzas meur a galon strafuilhet, a c'hell a-walc'h frealziñ da hini.

169.- Dre m'henn degemerez gant laoskentez eo ez out sammet gant ar glac'har ; henn degemer gant ur spered kristen, hag e brizout a ri evel un teñzor.

170.- Na sklaer eo an hent ! Nag anat eo ar skoilhoù ! Pebezh armoù mat evit o zrec'hiñ ! Ha padal, nag a gammdroioù, nag a zistroioù, nag a strebotoù ! Daoust ha n'eo ket gwir ?

An neudennig tanav-se, - anezhi, e gwirionez, ur chadenn, ur chadenn en houarn goveliet, - a zo anavezet mat ganit ha ganin, an neudennig-se ha na fell ket dit

terriñ, an hini eo az pella diouzh an hent, a ra dit asoupañ, ha kouezhañ zoken.

Petra a c'hortozez evit he zroc'hañ, ha mont war-raok ?
170.- Ar Garantez a dalvez a-walc'h... ur garantez.

EMWANEREZH

172.- Ma ne vezez ket emwanet, ne vi biken un ene a bedenn.

173.- Ar gomz paket mat-se, ar fentigell-se, na darzhas ket eus da ziweuz, ar mousc'hoarzh hegarat-se evit neb az hegas ; an dilavar-se o klevout un tamall direizh ; da ziviz damantus gant ar voroderion hag an hegaserion ; da zoare, pa dremenez bemdez dreist d'ur munud pe egile, enoeüs pe amzere, a-berzh an dud a vev war da dro... Kement-se, gant dalc'husted : ha setu un emwanerezh diabarzh solud.

174.- Na lavar ket : an den-mañ a zo borodus ; soñj : an den-mañ am laka da vezañ santel.

175.- Uhelvennad ebet ne zeu da wir hep aberzh ; en em nac'h da-unan, ken brav eo bezañ aberzhad.

176.- Nag alies e lakaez ez soñj servijout Doue en ur stumm bennak. Ha plegañ a rankez, ken reuzeudik ez out, da ginnig dezhañ da varradig kounnar, ar soñj n'out ket bet gouest da seveniñ ur devez ken aes.

177.- Na walleg ket an dro-vat az pez da zilezel da varn da-unan. Koustañ a ra se dit... Met pegen plijus eo da zaoulagad Doue.

178.- Pa weli ur groaz paour e prenn, hec'h-unan-penn, disprizet, didalvez, hep nikun stag outi, n'ankounac'ha ket ez eo ar groaz-se da groaz-te, hini ar pemdez, an hini guzh, hep sked hag hep frealz. Emañ o c'hortoz an hini a vo stag outi hag a ra diouer dezhi ; ha te an hini eo a rank bezañ stag outi.

179.- Klask emwanadurioù ha na wanint ket da nesañ.

180.- E-lec'h n'eus ket a emwanerezh, n'eus briwerc'h ebet.

181.- Emwanerezh diabarzh. Ne gredan ket en un emwanerezh diabarzh, ma welan e tisprizez, ha ne bleustrez ket, emwanerezh ar skiantoù.

182.- Evomp betek ar veradenn diwezhañ kaliriad ar glac'har er vuhez paour a-vremañ. Petra 'vern gouzañv dek vloaz, ugent vloaz, hanter-kant vloaz... Maz eus

goude-se ur baradoz evit atav, evit atav... evit atav.

Ha dreist pep tra, gwell eget an abeg meneget "**propter retributionem**", petra 'vern gouzañv, ma c'houzañver evit frealziñ Doue, Hor Salver, evit reiñ plijadur dezhañ, gant ur spered a zigollerezh, unanet gantañ war e Groaz, - en ur ger : ma c'houzañver dre garantez.

183.- An daoulagad ! Drezo e teu tre en ene kalz digevionderioù. Nag a vuhezadennoù diouzh giz David... Ma tiwallfes d'az selloù, e vefe diogelet difenn da galon

184.- Peseurt ezhomm ac'h eus da sellout en diavaez, ma tougez da ved ez tiabarzh ?

185.- Ne estlamm ar "bed" nemet ouzh an aberzh arvestus, rak dic'houzout a ra talvoudegezh an aberzh kuzh ha didrouz.

186.- En em reiñ a zleer penn-da-benn, en em zilezel a zleer penn-da-benn ; ret eo d'an aberzh bezañ kevan-losk.

187.- Diac'hinad : evit Bevañ e ranker mervel.

188.- Taol evezh ez eo ar galon un dreitourez ; dalc'h-hi serr gant seizh morailh.

189.- Skoilh eo kement n'az toug ket war-du Doue : diframm-eñ ha taol-eñ pell.

190.- D'un ene a oa dezhañ un holour dihanterat, brouezus ha gros, e rae an Aotroù lavarout : mil gwech trugarez, va Doue, evit an teñzor doueek-se, e gwirionez ; rak peur e kejin gant un all a responto da gement ger hegarat a lavarinn dezhañ dre gas ac'hanon da sutal.

191.- Bez trec'h bemdez adal ar pred kentañ, o sevel diwar da wele e koulz vat, d'an hevelep eur, hep lezel munutenn ebet da vont gant al leziregezh.

Ma vezez trec'h gant skoazell Doue, e vi aet kalz war-raok evit ar peurrest eus an devezh.

Ken digalonekaus eo santout ez eur trec'het adal ar c'hrogad kentañ.

192.- Atav e vezez trec'het a-benn ar fin. Kinnig dit da-unan salviñ an ene-mañ-ene, pe e santelidigezh, pe e c'halvedigezh a abostol. Evel-se on sur e vi trec'h.

193.- Arabat dit bezañ gwak, diek. Poent eo dit kas diwar da dro an druez iskis-se a santez evidout da-unan.

194.- Emaon o vont da lavarout dit pere eo teñzorioù mab-den war an douar, evit na forani ket anezho : an naon, ar sec'hed, ar wrez, ar yenijenn, ar boan, an dizenor, ar baourentez, an digenvez ; bezañ trubardet, labezet, prizoniet.

195.- Ar gwir a oa gant an hini a lavare ez eo ar c'horf hag an ene daou enebour ha na c'heller ket dispartiañ, pe daou vignon ha na c'hellont ket en-em welout.

196.- D'ar c'horf e ranker reiñ un tammig nebeutoc'h eget ar pezh a zo reizh. Anez, trubardiñ a ra.

197.- Maz int bet testoù d'az sempladurezh ha d'az reuzeudigezh, petra 'vern, - ma vezont testoù d'az pini-jenn.

198.- Ar re-mañ eo frouezh saourus an ene emwanet : kompren distervezioù an nesañ, ha damantiñ dezhañ, en ur chom dizamant-rik, er c'hontrol, e-keñver e zistervezioù e-unan.

199.- Ma ne varv ket ar c'hreunenn-ed e chom difrouezh. Ne fell ket dit bezañ greunenn-ed, mervel dre an emwanañ, ha reiñ tañvouez greuniet mat ? Benniget Jezuz da eost !

200.- Ne zeuez ket a-benn ac'hanout da-unan ? N'out ket emwanet, dre maz out lorc'hus. Sañset e renez ur vuhez pinijennus ? Arabat dit ankounac'haat e c'hell al lorc'hentez kembezañ gant ar binijenn... Arguzennoù all : an doan-se ez kreiz, goude ma vezez kouezhet, goude ma vez bet diank dit ar galoniezh, daoust ha bez' ez eus anezhi glac'har pe zesped diwar en em welout ken dister, hep nerzh ebet ? Na pell emañ diouzh Jezuz o chom hep bezañ uvel... ma lakaez bemdez, zoken, rozennoù nevez da vleuniañ gant pinijenn ar skourjez !

201.- Na pebezh blaz a vestl hag a winegr, a ludu hag a aloez... Ha da staoñ a zo ken disec'h, goachennek, ha skarnilet. Ar santadur korfel-se a seblant bezañ koulz ha netra, m'henn c'heñverier ouzh enkrezioù all da ene.

Pezh a zo eo e "c'houlenner muioc'h diganit, ha n'ouzout ket henn reiñ". En em izela ! Daoust ha menel a rafe

ar merzad c'hwerv-se a zisplijadur e-kreiz da ene ha da spered, ma rafes kement a c'hellez ?

202.- Emaout o vont da sammañ warnout, a-youl-gaer, ur c'hastiz evit da wanded ha da ziouer a galoniezh. Mat : hogen bezet ur binijenn avizet, evel unan sammet war un enebour a vefe war un dro ur breur.

203.- Levenez ar paour-kaezh denion, goude m'he defe un abeg dreistnaturel, a lez bepred war he lerc'h un advlaz c'hwerv. Petra e oas o krediñ ? Amañ, war-draoñ, bez' ez eo ar boan holen ar vuhez.

204.- Na stank eo ar re a asantfe da vezañ tachet ouzh ur groaz dirak selloù sebezet miliadoù a arvesterion, ha na ouzont ket gouzañv en un doare kristen broudadenou pemdeziek ar vuhez.

Dit da varn goude-se petra 'zo ar muiañ dellezek eus un haroz !

205.- Edomp o lenn a-gevret ul levr ma oa dezrevellet ennañ buhez pemdeziek, ken pemdeziek ma ranked bout un haroz d'he gouzañv, renet gant ar gwaz Doue-hont ; hag e welout a raemp o stourm, a-hed mizvezhioù ha bloavezhioù (na pebezh jederezh, hini e emarsellene !) : da goulz e lein, hiziv, e oa trec'h, antronoz e oa trec'het. Notañ a rae : "N'em eus ket kemeret amann !" "Kemeret em eus amann !" Salv ma vuhezimp ivez, te ha me, hon 'trajedienn' eus an amann !

206.- Pred an haroz eo : an eur eo, poent dit sevel. Hep termal : ur soñjezon dreistnaturel, ha sav ez sav. Pred an haroz eo : aze e kavi un dro d'en em wanañ hag a roio nerzhusted d'az mennentez, hep gwanaat da natur.

207.- Degemer gant anaoudegezh-vat, evel un aotre dreist d'ar re all, ar merzad-se a heug a santez ez keñver da-unan.

* * * * *

PENEDEREZH

208.- Bezet benniget ar boan ! Bezet karet ar boan ! Bezet santelaet ar boan ! Bezet klodekaet ar boan !

209.- Ur steuñv penn-da-benn a ro deomp an Abostol evit heuliañ gant un tamm gounid kelennadurezh ar boan : "spe gaudentes..." "o laouenaat er goanag..." ; "in tribulatione patientes..." "habask e-kreiz an trubuilh..." "orationi instantes..." "o padout er bedenn..."

210.- Dic'haou : setu ar wenodenn a gas d'ar vuhez.

211.- Taol gant ar binijenn, er foz don digoret gant da uvelded, da daolioù-gwallegezh, da zismegoù ouzh Doue, da bec'hedoù ; evel-se e vez plantet en douar gant al labourer, e-harz ar wezenn he deus o zaolet end-eeun, ar frouezh brein, ar barroù sec'h, hag an delioù kouezhet ; hag ar pezh a oa difrouezh, pe kentoc'h zoken, ar pezh a oa noazus, a servij da vat da skoazellañ ur frouezhusted nevez.

Desk tennañ lañs eus al lammoù a bakez : eus ar marv e teu ar vuhez.

212.- Ar C'hrist-se a welez n'eo ket Jezuz ; er gwellañ degouezh e vo ar skeudenn drist a vez stummet dindan da zaoulagad koc'hennet ; dit eo en em c'hlanaat ; spisa da selloù dre an uvelded hag ar binijenn. Goude-se... ne vanko ket dit sklerijenn voull ar Garantez, ken ez po ur gweled disi ! Ar skeudenn ac'hanout a vo, e gwirionez, e hini-Eñ.

213.- Gouzañv a ra Jezuz evit seveniñ youl an Tad... ha te hag a glask ivez seveniñ youl santel Doue, o tispenn roudoù ar Mestr, daoust hag e c'helli klemm ma kejez gant ar boan d'az ambroug war an hent ?

214.- Lavar d'az korf : gwell eo ganin da gaout da sklav eget bezañ da hini.

215.- Pebezh aon a zo krog en dud pa vez anv a zic'haouadur ! M'o dije, en ur reizhañ o mennad, graet evit Doue ar pezh a reont evit en em ziskouez er bed, na santel e vije hemañ pe hounnezh !

216.- Daerou a skuilhez ? Arabat dit kaout mez ! Skuilh

daerou! Ya, daerou a skuilh ar wazed ivez, eveldout, o-unan-penn dirak Doue. "E-doug an noz," eme ar Roue David, "e kargin va gwele gant va daerou."

Dre an daerou-se, loskus, daerou ur gwaz, e c'hellez glanaat da dremenet, ha reiñ ur vent dreistnaturel d'az puhez a hiziv.

217.- Me 'fell din e ves evurus war an douar. Ne vi ket, ma ne gollez ket an aon-se rak ar boan : keit ha maz eomp gant "an hent", er boan end-eeun emañ an evurus-ted.

218.- Na kaer eo koll ar vuhez evit ar Vuhez !

219.- Mar gouzout ez eo ar poanioù-se, korf ha spered, glanidigezh ha dellezidigezh, bennig-int !

220.- Daoust ha ne zegas ket blaz fall er genou ar c'hoant-se da hoal-vat ar c'horf ? "Doue da reiñ deoc'h yec'hed, breur," : an hetadenn ma trugareka lod peorion ganti evit an aluzen, pe m'he gouennont ganti.

221.- Mar bezomp brokus o tic'haouiñ hor gwalloù a-youl-vat, en hor c'hargo Jezuz a c'hras, deomp da garout an dic'haouadurioù a c'houlenno-eñ diganeomp.

222.- D'az youl eo goulenn groñs digant da skiantoù, dre hanterouriezh an dic'haouerezh, ar pezh a nac'h ar galloudegezhioù all pa vezez o pediñ.

223.- Na didalvez eo ar binijenn hep un emwanerezh diastal !

224.- Aon ac'h eus rak ar binijenn ? Ar binijenn az skoaz-ello da dizhout ar vuhez peurbadel. En eskemm, evit mirout ar paour-kaezh buhez a hiziv, daoust ha ne welez ket penaos an dud a suj d'ar mil jahinadur a zo stag ouzh un oberatadenn bennak ?

225.- Da vrasañ enebour ez eo te da-unan.

226.- Gra ouzh da gorf gant damant, met hep muioc'h a zamant eget az pefe oc'h ober war-dro un enebour treitour.

227.- Ma ouzout ez eo da gorf da enebour, hag un enebour da glod Doue, peogwir ez eus anezhañ un enebour d'az santeladur, perak e vezez ken gwak oc'h ober war e dro ?

228.- "Tremenit un endervezh mat," o deus lavaret

din, evel maz eur kustum da lavarout, ha setu addispleg un ene tost da Zoue : peseurt hetou a vefe skortoc'h eget ar seurt-se a hetou ?

229.- Gant Jezuz, na plijadurus eo ar boan, ha pegen sklerijennus an deñvalijenn !

230.- Gouzañv a rez ? Neuze, sell : kement a lec'h a zo, sur-mat, en E galon hag en hon hini. Gouzañv a rez : reizh eo kement-se.

231.- Ar yun garv a zo ur binijenn a blij kalz da Zoue. Hogen, kement a zo ac'hanomp, an eil re koulz hag ar re all, a zo aet war ziekaat ha war laoskaat. N'eus droug ebet avat, er c'hontrol, - gant ma vo kavet mat an diviz-se gant da gariad-ene, o pleustrin ar yun alies.

232.- Peseurt arbennoù d'ober pinijenn ? Paeañ dic'haou, goulenn, trugarekaat, un tu da vont war-raok, evidout, evidon, evit ar re all, evit da diegezh, da vro, an liz, ha mil arbenn all ouzhpenn.

233.- Na ra ket muioc'h pinijenn eget a vez aotreet dit gant da gariad-ene.

234.- Na pebezh haelled a roomp d'ar boan en ur aotren dezhi al lec'h a zere outi, evit dic'haouiñ, e kenaoz ar spered.

* * * * *

EMARSELL-ENE

235.- Emarsell. Ul labour pemdeziek. Ur c'hontaouerezh ha na vez gwalleget nepred gant neb a zalc'h un afer. Daoust hag ez eus un afer a dalvez muioc'h eget afer ar vuhez peurbadel ?

236.- Da goulz an emarsell, diwall diouzh an diaoul mut.

237.- En em arsell, war-bouez, gant kalonegezh. Daoust ha sur out ne zever ket da imor fall, da dristidigezh, - ha n'eus abeg mat ebet dezho, da welout atav ! - diouzh da zivarregezh da derriñ an ereoù tanav, fetis avat, bet steuet, dre zindan, war-bouez digareziou toull, gant da c'hoantegezh ?

238.- An emarsell dre vras a zo un emzifenn ; an emarsell dre ar munud, un tagañ ; an hobregon ez eo an hini kentañ ; an eil a zo ur c'hleze, kleze Toledo !

239.- Un taol-sell ouzh an tremened ? Ha goude-se, leñvañ warnañ ? Nann, ne servij da netra. Deskiñ ? An dra-se hepken a zoug frouezh.

240.- Goulenn sklerijenn ; ha na ziskrog ket, ken na ziguzhi ar wrizienn ; taol warni neuze an araez-emgannañ ez eo an emarsell dre ar munud.

241.- Gant an emarsell dre ar munud e rankez, war-eeun, piaouañ ur briwerc'h bennak, pe ziframmañ ar perzh-fall a zo mestr warnout.

242.- "Gant ar pezh a zlean da Zoue evel kristen, - dre ma n'on ket bet gouest da daliñ, evel ma tere, ouzh an dle-se, - ec'h eus graet din gouelañ gant ar glac'har, - ar glac'har diwar ar garantez... **Mea culpa !**"

Mat eo e krogfes da anzav da zleoù ; hogen na disoñj ket anzav penaos e vezont paeet : gant daeroù,... ha gant oberoù.

243.- "Qui fidelis est in minimo, et in majori fidelis est..." "Neb a zo feal en un disterdra, a zo feal ivez en un dra vras..." Ar re-mañ a zo komzoù diwar bluenn sant Lukaz ; gra un emarsell a zizoloio dit pelec'h emañ

orin da zihentadurioù.

244.- Ersav ! Klev ar pezh a lavar ar Spered Santel. "Si inimicus meus maledixisset mihi, sustinuissem ubique..." "Lakaomp en dije va enebour gwallgomzet ouzhin, ouzh se em dije reuziet a-walc'h..." N'eo ket iskis, hag aesoc'h eo se da c'houzañv. Te avat... "Tu vero homo unanims, dux meus et notus meus, qui simul mecum dulces capiebas cibos..." Te avat, un den a un galon ganin, va blenier, ha va nesaeg, a gemere war un dro ganin meuzioù c'hwek..."

245.- D'an deizioù emdred, e tle an emarsell kaout muioc'h a zonder hag a ledander eget an hini a renez da noz peurvuiañ ; anez, e kolli un dro vat da adkavout an hent reizh.

246.- Echu an emarsell bepred gant ur gread a garantez, glac'har diwar garantez, evidout, evit holl bec'hedoù an dud. Hag arvest ouzh damant tadel Doue, a lam ar skoilhoù a-zirazout, evit na streboti ket.

MENNADURIOU

247.- Bez fetis ! Arabat d'az mennadurioù bezañ gouleier-bengal a lugern e-pad ur pred evit lezel, evel ur gwirvoud c'hwerv, un ibilh du didalvez a vez taolet kuit gant dispriz.

248.- Ken yaouank ez out ! Seblantout a rez din bezañ ur vag a zo o vont er-maez. Ar gwariadur dister-se a hiziv, ma ne reizhez ket anezhañ, a raio dit chom hep tizhout ar porzh en diwezh.

249.- Gra nebeut a vennadurioù. Gra mennadurioù fetis. Ha kas-int da benn, gant sikour Doue.

250.- Lavaret ec'h eus din : "ya, ya, ur sant a fell din bezañ..." ha da selaou a ris dilavar, petra bennak ma hañval din ar seurt diogeladenn, ken koumoulek all, ken diredis, bezañ, peurvuiañ, ur amoedaj.

251.- Warc'hoazh ! A-wechoù ez eo furnez ; alies ez eo an adverb-mañ hini ar re drec'het.

252.- Gra ar mennadur-mañ, termenet mat ha start : dalc'h soñj, pa vo roet dit enor ha meuleudi, eus kement a ra dit mezh ha dismegañs.

Kement-se a zo dit ; ar veuleudi hag ar c'hlod a zo da Zoue.

253.- En em zoug mat "hiziv", hep kaout soñj eus "dec'h", a zo tremenet seulabred, hag hep en em chalañ gant warc'hoazh, ha n'ouzout ket hag e tegouezho betek ennout.

254.- Bremañ ! Distro d'az puhez a enor bremañ ! Arabat dit faziañ : bremañ ned eo na re abred... na re ziwelzhat.

255.- Fellout a ra dit e lavarfen dit petra a soñjan-me eus "da hent" ? Hama, setu : ma respontez d'ar galv, e labouri evit ar C'hrist evel an hini a ra ar muiañ ; ma rez ac'hanout un den a bedenn, e roi ar respont am eus komzet anezhañ a-ziagent, hag e klaski, gant ar sec'hed d'an aberzh, seveniñ ar c'haletañ labourioù.

Hag evurus e vi amañ, ha neuze, evurus-meurbet er Vuhez.

256.- Droug a ra ar goul-se, hogen emañ o vont war

En em zouget mat ec'h eus : dibradet out bet diwar al leur. "Surge !" ("Sav ez sav !") a lavar adarre ar vouezh c'halloudus o tregerniñ : "... et ambula !" ("... ha kerzh !") Ha bremañ, krog el labour !

* * * * *

BEZAÑS DOUE

265.- Ar vugale... Pegement e tiwallont d'en em zerc'hel en un doare dereat p'en em gavont dirak o zud.

Ha bugale ar rouaned dirak o zad, ar roue, pegement e tiwallont da virout dellezegezh ar roueelezh.

Ha te... daoust ha ne ouzout ket emañ bepred dirak an Doue Meur, a zo da Dad ha da Zoue.

266.- Na ziviz netra hep kemer amzer da sellout ouzh ar gudenn a-c'houez da Zoue.

267.- Rekis eo da unan lakaat en e benn emañ Doue e darempred ganeomp dalc'hmat. Bevañ a reomp evel pa vije an Aotrou o chom war-laez, e-lec'h ma lugern ar stered, ha ne daolomp ket meiz emañ ivez en hor c'hichen.

Hag evel un Tad karantezus ez eo ; ha pep hini ac'hanomp a gar muioc'h eget na gar an holl vammoù er bed o bugale, -o skoazellañ ac'hanomp, oc'h awenañ ac'hanomp, o vennigañ ac'hanomp, hag o pardonañ ac'hanomp.

Na pet gwech hon eus lakaet hor c'herent da vousec'hoarzhin o lavarout dezho, goude bezañ graet ur bourd bennak : "Ne rin ket mui !" Ha marteze, en deiz-se end-eeun ez eo dichenet deomp kouezhañ en-dro en hor si. Hag hon tad, oc'h ober van da gomz gant ur vouezh kalet, sirius e zremm, hor gourdrouze, teneraet e galon avat, dre maz anavezze hor blinder, o soñjal : "Nag a strivadennou a ra evit en em zougen mat !"

Ret eo deomp bezañ intret gant ar soñj-mañ, bezañ soubet ennañ, penaos ez eo Doue un Tad ; a zo muioc'h : ez eo hon Tad-ni an Arloz a zo o chom war un dro en Neñvoù war-laez, ha tostik-tre deomp, war-draoñ.

268.- Kemer ar boaz a zibradañ da galon war-du Doue, oc'h ober greadoù a drugaregezh lies a wech bemdez : peogwir e ro dit an dra-mañ hag egile ; peogwir out bet dismegañset ; peogwir n'emañ ket ganit ar pezh ac'h eus ezhomm, pe neuze, peogwir emañ.

...Peogwir en deus graet ken kaer e vamm, a zo ivez da vamm-te ; peogwir en deus krouet an heol hag al

loar, hag an aneval-se, hag ar blantenn all-se ; peogwir en deus graet da hemañ bezañ helavar... ha dit-te, am-lavar !

Rent gras dezhañ evit pep tra, rak mat eo pep tra.

269.- Arabat dit bezañ dall pe skañvbenn a-walc'h evit tremen hep dont da gichen pep nevedlog, pa verzez mურიო̀ pe douriò tiez an Aotrou ouzh da c'hortoz eno.

Arabat dit bezañ dall pe skañvbenn a-walc'h evit chom hep distignañ ur vannwezi* war-du Mari Krouet Dinamm pa dremenez e-biou d'ul lec'h maz ouzout e vez pec'het ennañ a-enep d'ar C'hrist.

270.- Daoust ha ne ro ket joa dit bezañ dizoloet war an hent a heuliez peurvuiañ, dre straedoù kêr, un nevedlog nevez ?

271.- Setu pezh a zo hetet gant un ene a bedenn : e kement dezев hor bez, bezet Doue hor finvez ; e kement kouvran tiezh hor bez, bezet-Eñ hor C'harantez ; e kement diviz hor bez, bezet-Eñ an danvez anezho ; e kement a reomp, bezet hor patrom.

272.- Gra gant an "troioù denel-se" am eus aliet dit implijout evit chom hep koll bezañs Doue : bannwezioù, greadoù a Garantez hag a zigollerez, kedunadoù dre ar spered, selladennoù ouzh skeudenn an Itron Varia.

273.- Da-unan-penn ! N'out ket da-unan-penn ! Da ambroug a reomp bepred a bell... Ouzhpenn, emañ ar Spered Glan o chom ez ene e stad a c'hras. Doue ganit : ro ul liv dreistnatur d'az holl soñjezonoù, c'hoantoù hag oberoù.

274.- "Tad," a lavare din ar mell paotr-se (petra ez eo deuet da vezañ ?), studier mat er 'Central"', "edon o soñjal er pezh hoc'h eus lavaret din... penaos ez on ur bugel da Zoue ! Hag en em gavet on war ar straed, c'hwezhet va c'horf gant ar fouge em c'hreiz : ur bugel e oan da Zoue !"

Aliet em eus dezhañ, asur va c'houstiañs, broudañ en e galon ar fouge-se.


275.- Tamm douetañs ebet e sigur da eeunded. Gouzout a ran ez oberiez o soñjal e bezañs Doue. Hogen, rak un "hogen" a zo : tud 'zo a verz da oberoù, pe a c'hell

o merzout, en ur varn anezho diouzh sellboent an dud ; ha rekis eo reiñ skouer vat dezho.

276.- M'en em voabez, pa ne ve nemet ur wech bep sizhun, da glask an unaniezh gant Mari evit mont da Jezuz, e weli penaos e tizhi muioc'h bezañs Doue.

277.- Goulenn a rez : perak ar Groaz prenn-se ? Ha restañ a ran kement-mañ, tennet diouzh ul lizher : "O sevel va daoulagad diwar ur c'horrgresker, ez a ar sell da blavañ war ar groaz du ha goull. Un arouezenn eo ar groaz-se hep kroazstagad : enni ez eus ur ster ha na vez ket merzet gant ar re all... Ha neb a oa aet divi ha prest da zilezel an trevell, en em laka en-dro da dostaat e zaoulagad ouzh ar seller, hag a gendalc'h da labourat, peogwir emañ ar groaz digenvez-se o kouviañ divskoazioù d'he sammañ.

278.- Bezet dit bezañs Doue, ha bez' az po ar vuhez dreistnatur.



Notennoù.

"Bannwezi" : pedenn a-darzh-kalon.

** "Central" : ur Benskoll e Madrid.



BUHEZ DREISTNATUR

279.- Bez' o deus an dud ur welidigezh plaen, peg ouzh an douar, divventek. Pa vevi ar vuhez dreistnatur, e tizhi kaout digant Doue an trede ment : an uhelled, ha gant houmañ, ar bos, ar pouez hag an ec'honad.

280.- Ma kollez skiant dreistnatur da vuhez, e vo da garitez, dengarouriezh ; da c'hlanded, dereadegezh ; da emwanerezh, amoederezh ; da skourjez, foet ; ha difrouezh e vo da holl oberoù.

281.- Bez' ez eo an dilavar evel porzhier ar vuhez diabarzh.

282.- Diac'hinad : primoc'h e tizhi bezañ ur sant eget ur gouiziad, met aesoc'h eo bezañ ur gouiziad eget ur sant.

283.- En em zidiñ. Ezhomm ac'h eus en em zidiñ ! O tigeriñ frank da zaoulagad evit ma teuio tre da vat ar skeudennoù eus an traoù ; pe neuze, o serriñ anezho, koulz lavaret, rediet maz out d'ober se dre maz out berrwel...

Serr-int penn-da-benn... Az pezet ur vuhez diabarzh, hag e weli marzhoù ur bed gwelloc'h, marzhoù ur bed nevez, dezho ul liv hag ur bos hep alberz ebet anezho ; hag emzvizout a ri gant Doue... Hag ez anavezi da reuzeudigezh ; en em zoueelaat a ri, diouzh ur seurt emzoueeladur hag a raio dit bezañ muioc'h breur d'az preudeur, an dud, dre ma tostai ouzh Doue.

284.- Hiraezh : ra vezin mat, ha ra vezo ar re all gwelloc'h egedon.

285.- Bez' ez eo ar gantroidigezh afer ur predig-amzer ; bez' ez eo ar santelidigezh ober ar vuhez penn-da-benn.

286.- N'eus netra gwelloc'h er bed eget bezañ e gras Doue.

287.- Mennad glan. Ganit e vo bepred, ma klaskez, bepred hag e pep lec'h, plijout hepken da Zoue.

288.- En em laka e-barzh goulioù ar C'hrist kroazstaget ; eno e teski derc'hel da skiantoù, ez po ur vuhez diabarzh, ha kinnig a ri dalc'hmat d'an Tad poanioù an Aotrou

ha re Vari, evit paeañ da zleoù hag holl zleoù an dud.

289.- Santel eo da vall da servijout Doue, ha se a blij dezhañ, met difrouezh e vo ar mall-se, ma ne zeu ket war un dro gantañ ur wellaenn wirion ez kundu pemdez-iek.

290.- Mont war wellaat ; bemdez un tammig. Setu da labour, ma fell dit dont da vezañ ur sant evit gwir.

291.- Da zeveer eo en em santelaat. Dit-te ivez. Piv a soñj ez eo un trevell a sell hepken ouzh ar veleion hag al leaned ?

D'an holl gwitibunan e lavar an Aotrou : bezit peurvat, evel maz eo peurvat va Zad eus an Neñv.

292.- Dres, da vuhez diabarzh a zle bezañ evel-se : kregiñ... hag adkregiñ.

293.- Er vuhez diabarzh, daoust hag amzer ac'h eus da verzout pegen kaer eo "servijout" gant ur youl bepred nevezet ?

294.- Ne weler ket ar plant goloet gant an erc'h. Ha setu addispleg laouen ar c'houer : "Bremañ e kreskont dre an diabarzh".

Soñjet em eus ennout, rediet da chom vak : lavar din-me, daoust ha kreskiñ a rez dre an diabarzh ?

295.- Ma n'out ket mestr warnout da-unan, goude ma vefes un den galloudus, e vin doaniet, hag e c'hoarzhin o soñjal ez kalloud.

296.- Kalet eo lenn goulenn Pilatus en Aviel Santel : "Piv a fell deoc'h e taskorfen deoc'h, Barabaz, pe Jezuz a lavar ez eo ar C'hrist ?"

Doaniusoc'h eo c'hoazh klevout ar respont : "Barabaz" !

Ha spontusoc'h c'hoazh en em rentañ kont penaos, alies-meurbet, dre bellaat diouzh an hent, em eus lavaret ivez : "Barabaz" ! Hag em eus ouzhpennet : "Ar C'hrist" ? "**Crucifige eum !**" "Stag-eñ ouzh ar groaz !".

297.- Kement a zo preder dit er mare-mañ, a vern mui pe vui. Pezh a zo pouezus a-grenn avat eo e vefes evurus, ha salvet.

298.- Gouleier nevez. Pebezh levenez ac'h eus dre m'en deus an Aotrou da lakaet da zizoleiñ ur mor kreizdouarek* all.

Gra da vad eus ar mareoù-se : deuet eo ar bed da ziskordañ da ganañ ur ganenn a drugaregezh ; ha pred eo ivez diboultrennañ kornioù distro da ene, da lezel a-gostez ur sodell bennak, da oberiañ gant muioc'h a spered dreistnatur, da ziwall diouzh ur wallskouer a c'hellfes reiñ d'az nesañ.

E berr gomzoù : diskouez a ri da anaoudegezh-vat dre ober da soñj war ur poent resis.

299.- Ar C'hrist a zo marv evidout. Ha te, petra a zleez ober evit ar C'hrist ?

300.- Da skiant-prenet da-unan, an doñjer, an tregas-se, ar c'hwervoni, - a ra dit buhezañ pegen gwir eo ar c'homzoù-se eus Jezuz : nikun ne c'hell servijout daou Arloz !

Notenn.

* "ur mor kreizdouarek" : da lavarout eo, "ur bed nevez".

MUIOC'H DIWAR-BENN
AR VUHEZ DIABARZH

301. Ur segred. Ur segred da c'harmiñ : an enkadennoù-se ledet penn-da-benn d'ar bed, a zo dleet d'an diouer a sent.

Doue a fell dezhañ kaout un dornad a dud a vefe 'dezhañ' e kement obererezh denel a zo. Goude-se : "**Pax Christi in Regno Christi**" : "Peoc'h ar C'hrist e ren ar C'hrist".

302.- Da grusifi. Evel kristen e tleves dougen ganit atav da grusifi. Ha lakaat anezhañ war da daol-skrivañ. Ha pokat dezhañ a-raok en em reiñ da gousket, hag o tihuniñ ; ha p'en em sav ar c'horf paour a-enep d'az ene, pok dezhañ adarre.

303.- Kas diwar da dro an aon rak gervel an Aotrou dre e anv, Jezuz, ha lavarout dezhañ en E gazez.

304.- Diwall mat da virout bemdez un nebeut munutennoù eus an digenvez benniget-se ez eus kement ezhomm anezhañ evit derc'hel da vale dre hentoù ar vuhez diabarzh.

305.- Skrivet ec'h eus din : "Bez' ez eo an eeunded evel holen an eswelled. Hag an dra-se eo a ra diouer din. Klask a ran he zizhout gant E sikour hag hoc'h hini.

Nag E hini na va hini ne vankint dit. Gra avat pezh a zo ret evit se.

306.- Ez eo buhez an den war an douar ur brezelerezh, - sed dres pezh a lavare Job kalz kantvedoù 'zo.

Bez' ez eus gwiskerion-gofignonoù ha n'o deus ket meizet an dra-se c'hoazh.

307.- An doare dreistnatur da vont war-raok a zo ur gwir gaderezh milourel. Ren a rez ur brezel, stourmadenoù pemdeziek da vuhez diabarzh, war savlec'hioù a staliez en tu-hont da ramparzhioù da greñvlec'h.

Hag an enebour a argad eno : war da emwanerezh dister, war da voaz da bediñ, war urzh-vat da labour, war raktres da vuhez ; ha diaes eo e teufe a-benn da dostaat betek tourioù, - dinerzh dirak an arsailh, -

da greñvlec'h ; ha m'o zizh, e ra se goude koll e efedusted.
308.- Skrivañ a raen, hag eilskrivañ a ran : "Va joa ha va feoc'h. Biken ne c'hellin kaout al levenez wirion ma n'am bez ket ar peoc'h. Ha petra eo ar peoc'h ? Ar peoc'h a zo e darempred strizh gant ar brezel. Bez' ez eo ar peoc'h heuliad an trec'h ; bez' e c'houlenn groñs diganin ur stourm diastal. Hep stourm ne c'hellin ket kaout ar peoc'h."

309.- Sell pebezh kalon a drugarez a zo e-barzh reizhded Doue ! Peogwir e kastizer neb a gofez e bec'hed e lezioù-barn an dud ; e lez-varn Doue avat e pardonner neb a gofez.

Benniget ra vezo ar Sakramant a Binijenn.

310.- "Induemini Dominum Jesum Christum". "Gwiskit hon Arloz Jezuz-Krist" a lavare sant Paol d'ar Romaned. E Sakramant ar Binijenn eo e wiskomp, te ha me, Jezuz-Krist hag e zellidoù.

311.- Ar brezel ! "D'ar brezel ez eus," emezout, "ur finvez dreistnatur, dianav da dud ar bed : ar brezel a zo bet evidomp..."

Ar brasañ skoilh dirak an hent aes ez eo ar brezel ; hogen bez' e rankimp henn c'harout, evel ma tle ul lean karout e skourjezoù.

312.- Galloud, da anv, Aotrou ! Kroget em boa da skrivañ va lizher evel boaz : 'Doue r'az miro !' Ha skrivañ a reer din : 'An droienn 'Doue r'az miro' eus ho lizher en deus servijet din evit va diwall diouzh an dañjer. Ra zivallo ivez an holl ac'hanoc'h gwitibunan !

313.- "Peogwir emañ an Aotrou ouzh va skoazellañ hep muzul, evel boaz, ez akedin respont ken klok all, war-bouez bezañ kizidikoc'h em ersavioù."

Se ac'h eus lavaret din. Ha me n'em boa netra da lavarout ouzhpenn.

314.- Skrivet em eus dit, hag e lavaret dit : "En em harpañ a ran warnout, dit da welout petra a raimp." Petra e oamp o vont d'ober, nemet en em harpañ war Egile* !

315.- Kimingad. Un huñvre hini bezañ ur c'himingad. Tridal a rez evel Zavier ; ha fellout a ra dit gounit un

impalaeriezh evit ar C'hrist : Japan, Sina, Indez, Rusia. Pbloù yen hanternoz Europa, pe Amerika, pe Afrika, pe Aostralia ?

Kenil an taniou-gwall-se e-barzh da galon, ar sec'hed-se d'an eneoù. Hogen na ankounac'h ket e vi muioc'h 'kimmingad' dre sentiñ. O vezañ m'emaout pell, e-keñver douaroniezh, diouzh an tachenoù a abostolerezh, e labourez amañ hag aze. Ne santez ket, evel Zavier, ez eo skuizh da vrec'h goude bezañ roet ar vadeziant da gement a dud ?

316.- Lavarout a rez din : eo, fellout a ra din. Mat. Met daoust ha fellout a ra dit, evel ma fell d'un den skragn e aour, evel ma fell d'ur vamm he mab, evel ma fell d'an tragerc'her an enorioù, pe evel ma fell d'ur paour-kaezh paotr hudur e blijadur ?

Ne rez ket ? Neuze, ne fell ket dit !

317.- Nag arloupet eo an dud en o aferioù douarel ! Seblant an enor, c'hoantegezh ar binvidigezh, preder an hudurniezh ; paotred ha merc'hed, pinvidion ha peorion, re gozh ha tud en oad, ha re yaouank, ha zoken, bugale : d'an holl ez eo hevelep tra.

Pa lakaimp, te ha me, an hevelep gred en aferioù hon ene, hor bo ur feiz bev-buhezek hag oberiant, ha ne vo skoilh ebet ha na zeufemp a-benn anezhañ en hon embregadennoù a abostolerezh.

318.- Evidout, hag a zo ur sportour, pebezh arguzenn ez eo hini an Abostol : "Nescitis quod ii qui in stadio currunt, omnes quidem currunt, sed unus accipit bravium ? Sic currite ut comprehendatis..." "Daoust ha ne ouzoc'h ket e kemer an holl, moarvat, perzh er redadeg war ar stad, nemet ez a ar maout gant unan hepken. Evel-se 'ta redit evit tapout krog ennañ..."

319.- En em soñj. Klask Doue ennout ha'selaou anezhañ.
320.- Kenil ar soñjezoù hael-se ; ar c'hoantaennoù santel-se a c'hell reiñ lec'h d'un tantad.

321.- Ene abostol ! An nesaegzh-se eus Jezuz ganit, ken tost ma vi dezhañ e-pad kement a vloavezhioù, hama, se ne lavar netra dit ?

322.- Ar wirionez eo e ran 'Betania' eus hon nevedlog.

Deus da vezañ ur mignon da vignoned Hor Salver : Lazar, Marta, Maria... Ha goude-se, ne c'houlenni mui ouzhin perak e ran "**Betania**" eus hon nevedlog.

323.- Gouzout a rez ez eus "kuzulioù an Aviel". Finvez ar Garantez ez eo o heuliañ. Lavarout a reer ez eo hent un nebeudig re. A-wechoù e soñjan e c'hellfe bezañ hini kalz.

324.- "Quia hic homo coepit aedificare et non potuit consummare..." Kregiñ a reas da sevel ti, ha ne c'hellas ket peurechuiñ."

Un addispleg doanius ha na vo ket graet diwar da benn ; rak bez' emañ ez kerz an holl araezioù a roy dit an tu da gabellañ savadur da santelidigezh : gras Doue, ha da vennentez.

* * * * *

KLOUARDED

325.- Stourm ouzh ar waked-se a ra dit bezañ lezirek ha gwallek ez puhez speredel. Dav eo dit gwelout e c'hell ar waked-se bezañ deroù ar glouarded, ha gouez d'ar Skritur, Doue a c'hwedo ar re glouar.

326.- Doaniet on o welout emañ en dañjer da gouezhañ er glouarded pa n'az kwelan ket o vont a-zevri war-du ar esweded e-barzh da stad.

Lavarganin : ne fell ket din ar glouarded. "**Configure timore tuo carnes meas**". "Intr a-grenn va c'hreud gant an aon razout..." Ro din, va Doue, ez keñver, un doujañs a vab a ray din herzel ouzh an dañjer-se.

327.- Me 'oar e tec'hez diouzh ar pec'hedoù marvel. En em salviñ a fell dit. Hogen n'out ket chalet o kouezhañ ingal hag a-youl-gaer er pec'hedoù hewalc'h, daoust ma klevet galv Doue ouzh da bediñ d'en em drec'hiñ e pep degouezh.

Da glouarded an hini eo a ra dit kaout hevelep youl-fall.
328.- Na dister eo ar garantez ac'h eus evit Doue, peogwir e plegez hep stourm, war zigarez n'eo ket ur pec'hed grevus.

329.- Kalz droug a ra d'an ene ar pec'hedoù hewalc'h. Rak-se "**Capite vulpes parvulas, quae demoliuntur vineas,**" eme an Aotroù e-barzh "**Kanenn ar C'hanennoù**" ! "Tapit krog el lern bihan a zistruj ar winienn..."

330.- Nag a boan a rez din dre ma ne santez glac'har ebet diwar da bec'hedoù hewalc'h ! Peogwir, betek-henn, ne'c'h eus ket staget da ren ur vuhez diabarzh gwirion.

331.- Klouar e vi ma rez gant diegi ha grad-fall an traoù a sell ouzh an Aotroù ; ma klaskez, war-bouez jediñ en a-raok, pe dre widre, penaos skañvaat da zleadou ; ma ne soñjez nemet ennout hag er pezh a zo aes evidout ; ma vez da zivizoù didalvez hag aner ; ma ne euzhez ket ouzh ar pec'hed hewalc'h ; maz oberiez diwar arbennoù denel.

* * * * *

STUDI

332.- Neb a c'hell bezañ ur gouizieg, ne bardonfemp ket dezhañ chom hep bezañ.

333.- Studi. Sentidigezh : "**Non multa, sed multum.**"

334.- Pediñ a rez, penediñ, labourat e kant tra abostolezh ; met ne studiez ket. Un didalvez e vi, ma ne gemmez ket.

Ar studi, ar stummadur war ar vicher, ne vern petra ez eo, a zo un endalc'hadur pouezus en hon touez.

335.- Un eurvezh a studi : evit un abostol, an amzer-mañ, a zo un eurvezh a bedenn.

336.- Ma rankez servijout Doue gant da spered, ez eo studiañ un lead grevus.

339.- Pleustriñ a rez ar sakramantoù ; ober a rez ar bedenn-a-galon ; glan ez out... Ha ne studiez ket... Na lavar ket ez out mat ; n'out nemet madek.

338.- Ergentaou, evel ma oa bevnet-tre an anaoudegezhioù denel, ar skiant, e seblante posubl e c'hellje un den gouizieg, en e-unan, sevel difenn hor feiz santel.

Hiziv, ken ec'hon ha ken doues ez eo ar ouezoniezh maz eo ret-holl d'an apologourion rannañ al labour kenez-trezo evit difenn an Iliz war an holl dachennoù en un doare skiantel.

Te, ne c'hellez ket chom diseblant ouzh an endalc'had-mañ.

339.- Levrioù : n'o fren ket hep goulenn kuzul digant tud hag a zo kristen, barrek ha fur.

Prenañ a c'hellfes un dra didalvez ha noazus.

Nag alies e kreder dougen ul levr dindan ar gazel, pa ne zouger nemet ur garg a vardoz.

340.- Studi. Studi gant aheurtterezh. Ma rankez bezañ hollen ha gouloù, ezhomm ac'h eus skiant, barregezh.

Pe e kredez e tizhi ar skiant 'enfennet', dre maz out lezirek ha diegus ?

341.- Mat eo e lakfes aheurtterezh er studi, gant ma lakai kement-all a aheurtterezh o klask tizhout ar vuhez diabarzh.

342.- Na disoñj ket e tleez oberiañ a-raok kelenn. "**Coepit facere et docere...**" a lavar an Aviel diwar-benn Hor Salver. Kregiñ a reas da oberiañ ha da gelenn.

Da gentañ oberiañ, evit ma teskimp, te ha me.

343.- Labour. Pa vi prederiet gant ul labour-micher ez ay buhez da ene war wellaat ; gourelloc'h e vi ; rak dilezel a ri ar "spered-se a bismigerezh" a grign ac'hanout.

344.- Diorroour : da vred, ha n'eus ket tu da nac'hañ, a implijez d'anavezout ha da lakaat er pleustr ar gwellañ reizh evit ma tizho da skolidi ar skiantoù douarel ; implij anezhañ ivez d'anavezout ha da bleustriñ an askezouriezh kristen, a zo ar reizh nemeti evit ma vint gwelloc'h, te hag int.

345.- Deskadurezh, deskadurezh ! Mat : ne vo den ebet en hor raog evit ober anezhi pal hor buhez hag he fiaouañ.

Hogen un araez eo an deskadurezh, ha n'eo ket ur finvez.

346.- Studier. En em stumm da-unan diouzh un deoliezh start hag oberiant ; bez dreist er studi ; broud ez kreiz ur c'hoant start d'ober abostolerezh war da vicher ; ha prometiñ a ran dit, bez' en em astenno da levezon prim ha pell gant an nerzh-se az po roet d'az stummadur relijiel ha skiantel.

347.- N'en em chalez nemet evit 'sevel' da zeskadurezh ; ha pezh a zo ret eo 'sevel' da ene. Evel-se e labouri evel ma tleez : evit ar C'hrist. Evit ma reno-Eñ er bed, ez eus ezhomm e ve lod stag o selloù ouzh an neñv, oc'h en em reiñ d'an holl obererezhioù denel en ur dapout enno ur brud dreistrenk, hag oc'h embreger a-ziwar an obererezhioù-se, didrouz hag efedus, un abostolerezh diazezet war ar vicher.

348.- Da wallegezh, da lezober, da ziegi a zo laoskentez ha koulzelouriezh ; setu ar pezh a ziskouez dit da goustiañs ; met kement-se n'eo ket "an hent".

349.- Bez dinec'h adal ma tifennez ur mennoz reizhkred, daoust ma vo douget da vezañ gwallskoueriet, en abeg d'e fallagriezh, an hini a vreuta ganit ; rak fariziat eo e wallskoueriadur.

350.- N'eo ket a-walc'h bezañ gouiziek, ouzhpenn bezañ

ur c'hristen mat. Ma ne reizhez ket doareoù garv da dro-spered, ma ne lakaez ket da c'hred ha da ouiziegezh da glotañ gant un diorroadurezh vat, ne soñj ket din e c'hellfes dont da vezañ ur sant. Ha maz out gouiziek, ha daoust maz out, e tlefes bezañ staget ouzh ur rastell, evel ur vulez.

351.- Gant an aer-se ac'h eus a vezañ bepred laouen ganit da-unan, e hegasez an holl hag e tisplijez dezho, ken e lakaez pep unan da c'hoarzhin diwar da benn ; hag ar pezh a zo gwashoc'h : koll a rez evel-se an efedusted ez labour a abostol.

Na disoñj ket e c'hell un den didalvez, zoken, pec'hiñ o tiskouez re a ouiziegezh.

352.- Da ziouer a skiant-prenet eo dres az toug d'ar re-emgred-se, d'ar randon-se, ha da gement a roio dit doare un den a-bouez, war a soñj dit.

En em reizh da-unan, mar plij. Sod, pe forzh petra, e c'hellez dont a-benn da gefleuniañ kargoù a renadurezh (meur a wech ez eo c'hoarvezet an dra-se). Ha ma ne lakaez ket ez penn e vank dit lod barregezhioù, e nac'hi selaou ar re o deus donezon ar c'huzul.

Ha reiñ a ra aon soñjal er gaou ma vi kiriek dezhañ gant da zirollerezh.

353.- Laikouriezh. Neptuegezh. Mojennoù kozh a glasker bepred neveziñ.

Daoust ha nec'het out bet o soñjal pegen diboell eo paouez a vezañ ur c'hatolig o tont tre er Skol-veur, pe en ur c'hevredad-micher, pe en ur vodadeg a ouizieion, pe en Dael, evel unan hag a lez e vantell e toull an nor.

354.- Tenn da vad eus an amzer. Na disoñj ket ar wezenn-fiez villiget. Padal e rae un dra bennak : dougen a rae delioù. Evel ma rez-te...

Na lavar ket din ec'h eus digarezhioù. Ne servijas da netra d'ar wezenn-fiez, a gont skrivagner an Aviel, arguziñ n'oa ket erru koulz ar frouezh, pa glaskas an Aotroù fiez ennañ.

Neb a zo difrouezh a van difrouezh da viken.

355.- Ar re a ya tre en aferioù ar bed-mañ a lavar e

talvez an amzer aour. Din-me e seblant se bezañ nebeut : evit ar re a ya tre en aferioù an eneoù, ez eo an amzer "klod".

356.- Ne gomprenan ket e rez ac'hanout-te ur c'hristen en ur zerc'hel d'ur vuhez vak didalvez. Disoñjal a rez ar vuhez a labour bet renet gant ar C'hrist.

357.- An holl bec'hedoù, - ac'h eus lavaret din, - a seblant gortoz an dro gentañ ma chomi vak ; bezañ vak eo a zle bezañ pec'hed.

Arabat eo da neb en em ouestl d'al labour evit ar C'hrist kaout tamm amzer vak ebet ; diskuizhañ ne dalv ket e chomer hep ober netra ; se a dalv hepken en em ziduer dre obererezhioù ha na c'houlennont ket ken bras strivoù.

358.- Chom vak a zo un dra ha na gomprenet ket pa vez anv eus ur gour hag a zo dezhañ un ene abostol.

359.- Laka un arbenn dreistnaturel d'az labour-micher ordinal, hag ez po santelaet da labour.

STUMMADUR

360.- Pebezh c'hoarzh fraezh a zo difloupet diganit p'edon oc'h aliañ dit lakaat bloavezhioù da vuhez dindan gwarez sant Rafael ! Evit m'az kasfe d'un dimeziñ santel, evel Tobiaz yaouank, gant ur vaouez vat, kaer ha pinvidik, a lavaren dit o farsal.

Ha neuze, na prederiek ez out manet, pa'm eus kendal-c'het oc'h aliañ dit en em lakaat ivez dindan paeroniezh an abostol, an den yaouank, Yann : kenkas e c'houlennfe an Aotroù muioc'h diganit.

361.- Evidout-te, a glemm ez kreiz peogwir e reer garv ouzhit, hag a sant ar galeted-se enebet-krenn ouzh emzoug tud da diegezh ez keñver, ez eilskrivan an dilinenad-mañ diwar lizher ur mezeg isletanant : "Dirak ar c'hlañavour, kemer emzalc'h an den-a-vicher onest, yen ha 'jedoniek', hogen ergorek ha talvoudus d'an hini diaezet (pezh n'eo ket randonerezh trivliadel an tiegezh). Petra a c'hoarvezfe en un arouelva e-pad an emgann, pa vez o kreskiñ niver ar c'hloazidi a vez lakaet bern-war-vern, peogwir ne c'heller ket o c'has war-dreñv prim a-walc'h, m'en em gave e-tal pep kravazh un tiegezh ? Koulz e vefe en em zaskoriñ d'an enebour.

362.- N'eus ket ezhomm burzhudoù. A-walc'h eo din ar re a zo er Skritur. En eskemm, ezhomm am eus e kefleugnfes da zlead, e klotfes gant ar c'hras.

363.- Kerseet. Distreiñ a rez, lostek. An dud a zo o paouez reiñ ur gentel dit. Krediñ a raent n'ez poa ket ezhomm anezho, hag e raent kinnigoù e-leizh. Ar soñj avat e oas o c'hortoz bezañ skoazellet gant o arc'hant, - un nebeut gwenneion a netra, - en deus kemmet o mignonezh e diseblanted.

Az pezet fiziañs e Doue hepken hag er re a zo unanet ganit en abeg dezhañ.

364.- Ma lakafes ez spered servijout Doue a-zevri, gant an hevelep aheurtterezh a lakaez e servij da arvez, da fougeoù, da c'hadaliezh !

365.- Ma santez ez kreiz c'hoantaennoù da vezañ ur

rener, klask bezañ an hini diwezhañ, pa vezi gant da vreudeur, an hini kentañ avat pa vezi gant ar re all.

366.- Deomp da welout : peseurt direizhder a reer dit 'ta, lavar din,, m'o deus an eil pe egile muioc'h fiziañs e tud o deus anavezet a-raok, pe m'en em santont muioc'h kennes dezho dre un doug-natur, dre vicher, dre dro-spered ?

Padal, e-touez da re, diwall aketus diouzh ur seblant a vignoniezh a-ziforc'h, pa ne ve ken.

367.- Ar boued ar muiañ blizidik ha dibabet, m'henn debrez evel ur pemoc'h (gant resped dit, va digarez !), en em dreuzfurm, evit ar gwellañ, e kig-moc'h.

Bezomp selez, evit reiñ dellid d'ar mennoziou, oc'h ober anezho hon danvez hon-unan ; da nebutañ, bezomp tud, evit treuzfurmiñ ar boued e kigennoù hael ha kaer... gouest d'empennañ ha d'azeuliñ Doue.

Hogen arabat deomp bezañ chatal, evel maz eus kement anezho.

368.- Hir e kavez an amzer ? Kiriek eo da se da skiantoù dihan ha da ene kousket-mik.

369.- Karitez Jezuz-Krist az tegaso da blegañ war veur a boent... evit abegoù hael-kenañ, ha karitez Jezuz-Krist az tegaso da vezañ reut he dibleg a-grenn war galz poentoù, evit abegoù ken hael all, kerkoulz.

370.- Ma n'out ket drouk, daoust ma seblantez bezañ, ez out ur beulke ; ha bezañ beulke en ur wallskoueriañ a zo gwashoc'h eget bezañ drouk.

371.- Pa gemer tud ha n'int ket brudet mat war o micher ar penn eus un diskeladeg relijiel, sur on ez po c'hoant da lavarout dezho : mar plij, ho pezet ar vadelezh da chom hep bezañ ken katolik.

372.- M'ac'h eus ur garg kefridiel, ec'h eus ivez gwirioù a ziwan eus kefleuniadur ar garg-se, hag un toullad dleadoù ivez.

Treiñ a rez diwar da hent a abostol pa chomez hep seveniñ an dleadoù a zo stag ouzh da garg, e skeud ha war zigarez un oberenn relijiel ; dre ma kollez evel-se an arwarzh a zo dit diwar da vicher, hag a zo dres da "higenn a besketaer tud",

373.- Plijout a ra din da sturienn a abostol : labourat hep diskrog ebet.

374.- Perak seurt difraeerezh ? Na lavar ket din ez eo se obererezh ; kentoc'h e vefe se difretezezh.

375.- Dibarfeted. Lezel a rez da skiantoù ha da c'hallou-dezioù-meiz da euvriñ dour ag ul lagenn bennak. Ha setu da c'hopr : hep stabiled, stlabezet da evezh a bep tu, kousket-mik da vennentez, ha diroll da c'hoantegezh.

Dit en em enderc'hel, en un doare sirius, da sujañ d'ur steufiv, a raio dit ren buhez ur c'hristen, pe ne ri biken netra talvoudus.

376.- "Kement a levezon a zo gant an amdro !" ac'h eus lavaret din. Hag e rankis respont : hep mar ebet. En abeg da se e tle ho stummadur bezañ seurt ma krouot, en un doare natur, hoc'h amdro hoc'h-unan, a-benn reiñ ho ton-c'hwil d'ar gevredigezh ma kenvevez emil.

Ha neuze 'ta, m'ac'h eus tizhet ar spered-se, ez eo sur e lavari din gant estlamm an diskibion gentañ oc'h arvestiñ ouzh preveudi ar burzhudoù a vez sevenet dre o daouarn en anv ar C'hrist : kement a levezon hon eus war an amdro !

372.- Ha penaos tapout hor stummadur ha penaos mirout hor spered ? Dre seveniñ ar reolennoù resis en deus merket dit da gariad-ene, hag en deus graet dit en em stagañ outo : seven-int hag un abostol e vi.

378.- Arabat dit bezañ gwazhwelour ; daoust ha ne ouzout ket penaos kement a c'hoarvez pe a c'hell c'hoarvezout, a zisoc'h war ar mad.

Bez' e vo da wellwelouriezh un heuliad d'az feiz.
379.- Bezañ natur. Ra vero ho puhez a wazed kristen, a wragez kristen, a zo hoc'h holen hag ho sklerijenn, distroñs-kaer, hep istrogellerezh na louaderezh : ra chomo ganeoc'h-c'hwil atav ho spered didro.

380.- En ur c'helc'hiadur deuet pagan pe bagan a-viskoazh, pa stoko ar c'helc'hiadur-se ouzh va buhez, daoust ha ne hafvalo ket va doareoù natur bezañ orbidek, a c'hourlennez ouzhin.

Respont a ran dit : stok a vo moarvat etre da vuez

hag o hini ; ar grennenediezh-se avat a roio dit an tu da gadarnaat da feiz dre an oberoù, a vo evidout koulz hag an doareoù natur a c'houlennan diganit kaout.

381.- N'en em chal ket ma lavarer ec'h eus ur spered-stroll. Petra 'fell dezho ? Ur benveg bruzunek a vez dispennet adal ma kroger ennañ ?

382.- War al levr-se eus "**Buhez Jezuz**", bet kinniget dit ganin-me, em eus enskrivet : "Klask ar C'hrist, kav ar C'hrist, kar ar C'hrist !"

Anezho ez eus tri fennad-hent diforc'h mat. Daoust hag arnodet ec'h eus, da vihanañ, bevañ an hini kentañ ?

383.- Ma'z kwelont o vrallañ... ha te ar rener, n'eo ket iskis ma freuzont ar sentidigezh.

384.- Droukveskerezh. Gouezet em eus e horjelle eeunded da skiant-varn. Hag evit m'am c'homprentes, em eus skrivet dit : un dremm divalav-kenañ en deus an diaoul, hag evel ma oar kement-se, n'en em laka ket e riskl da ziskouez deomp e gerniel. Ne zeu morse tal-ouzh-tal ganeomp.

Rak-se, nag alies ez erru gant dic'hizadur an haelled, ha zoken ar speredelezh.

385.- Lavarout a ra an Aotrou : ur gourc'hemenn nevez a roan deoc'h : m'en em garot an eil egile. E kement-se e vo gouezet ez oc'h va diskibion.

Ha sant Paol : douget an eil samm egile, hag evel-se e sevenot lezenn ar C'hrist.

Me, ne lavaran netra dit.

386.- N'ankoua ket, mab, n'eus evidout war an douar nemet un droug, ec'h eus da zougen ha da dec'hout dioutañ, gant gras Doue : ar pec'hed.

STEUÑV DA SANTELEZH

387.- Emañ termenet ar steuñv a c'houlenn an Aotrou diganeomp gant tri foent :

- An diblegusted santel, ar redierezh santel, an divergontiz santel.

388.- Un dra ez eo an divergontiz santel, hag unan all an divezh laik.

389.- Bez' ez eo an divergontiz ur merk-anaout eus ar "vuhez a vugaleerezh". Ar c'hrouadur ne vez nec'het gant netra. E davantegezhioù, e davantegezhioù natur, a zo roet da welout, didro-kaer, goude ma ve an holl oc'h arvestiñ outañ.

An divergontiz-se, dibrad-hi betek ar vuhez dreistnatur, diouzh an doare-poellata-mañ : meuleudi, dispriz, estlamm, goap, enor, dizenor, yec'hed, kleñved, pinvidigezh, paourentez, kened, vilded.

Mat, ha goude !

390.- C'hoarzh goap ouzh ar soñj ez out c'hoarzhus. Dispriz ar pezh a lavarer. Merz ha sant Doue ez kreiz hag e kement az kronn. Echuiñ a ri o tizhout an divergontiz santel-se m'ac'h eus ezhomm anezhi, - nag un diac'hinnad, -evit bevañ gant blizidigezh ur marc'heg kristen.

391.- M'ac'h eus an divergontiz kristen, petra 'vern dit ar pezh "o deus lavaret" pe "ar pezh a lavaro an dud".

392.- Bez sur ne vez ket lu neb a ra ar gwellañ.

393.- Un den, un aotrou a-zoare o treuzvarc'hata... a zeufe dezhañ barn Jezuz d'ar marv.

394.- Bez' ez eo an treuzvarc'had un arouez asur o tiskouez n'emañ ket ar wirionez gant unan. Pa glask unan un treuzvarc'had en un afer a uhelvennad, a enor pe a feiz, hama, an den-se a zo un den hep uhelvennad, hep enor, hep feiz.

395.- An den-Doue-se, gourdonet da stourm, a arguze evel-henn : daoust ha treuzvarc'hata a ran ? Sur, ne ran ket, sklaer eo, peogwir e ouzon ez eo gwirionez va uhelvennad. Er c'hontrol, te a zo prest-kenañ da

dreuzvarc'hata, 'keta. Lavar: daoust ha kavout a ra dit ez eo daou ha daou tri hanter ? Nann, ne ra ket, Pe, daoust ha war ur poent ken dister ne blegi ket dre vignoniezh ?

Ne vern: evit ar wech kentañ ez out sur a-grenn da zerc'hel ar wirionez...ha savet out a-du ganin.

396.- Ned eo ket an diblegusted unan gant an diemreiah.

397.- Bez dibleg war ar geiennadurezh hag ar vuhezgezh ; hoges bezet flour da soareod.

Bez dibleg, met na vez ket dizoare.

398.- An diblegusted n'eo ket an diblegusted hepmuiken ; bez' an eo an diblegusted santel. Na zisoñjomp ket ez eus ivez ur redierezh santel.

399.- Niz implijer an nerzh, hag an holl o stlakañ o danunn, evit mirout n'en em zistrufe unan bennak, daoust ha ne c'hellimp-ni ket implijout an hevelep redierenn, ar redierezh santel, evit saveteiñ Buhez (gant ul lizherenn vras) kalz tud a chom aheurtet, o tistrujañ o ene en un dicare diot.

400.- Nag a dorfedoù a vez kaset da benn en anv ar reizhded ! Ma werzhfes armoù-tan ha ma rofe unan bennak dit ar priz evit un arm seurt-se, evit lazhañ da vamm ganti, daoust hag e werzhfes dezhañ ? Padal, daoust hag en degouezh-mañ ne roe ket dit ar priz reizh ? Kelennerion, kelaouennerion, politikerion, rouinellerion : prederiù !

401.- Doue hag hardizhegezh. Hardishegezh n'eo ket dievezhiegezh ez eo ; hardizhegezh n'eo ket brizh-herrder ez eo.

402.- Na c'houlenn ket digant Jezuz hepmuiken pardon evit da walloù-te ; arabat dit E garout gant da galon-te hepken.

Digoll-Eñ evit an holl ofañsoù a zo bet graet dezhañ, a vez graet bremañ hag a vezo graet warc'hoazh... Kar-Eñ gant holl nerzh kalonoù an holl dud o deus en em staget ar muiañ outañ.

Bez hardizh ; lavar dezhañ emañout muioc'h e karantez anezhañ eget Mari-Madalen, muioc'h eget Tereza veur, muioc'h eget Tereza vihan, gant muioc'h a follentez

eget Eosten ha Dominig ha Frañsez, muioc'h eget Ignad, ha Zavier.

403.- Bez atav hardishoc'h, ha p'az po ezhomm un dra bennak, o loc'hañ hepred diouzh ar "Fiat", na ra goulenn ebet ; lavar hepken : "Jezuz, me 'fell din an dra-mañ pe egile, rak evel-se eo e c'houlenn ar vugale."

404.- C'hwitet ec'h eus. Ni evet, ne c'hwitomp gwec'h ebet. Lakaet ez poa da holl fiziata e Doue ; ha goude-se n'ec'h eus lezet netra a-gostez eus kement a c'hell un den ober.

Bez sur eus ar wirionez-mañ : ober berzh, evitout, en dro-mañ, a c'hoarveze dres eus ober tro-wenn.

Trugareka an Aotrou, ha stag ganti a-nevez.

405.- Setu, c'hwitet ec'h eus ? Ha te a oa sur a-grenn, koulskoude, ne c'helles ket c'hwitañ.

N'ec'h eus ket c'hwitet ; tapet ec'h eus sikiant-prenet. War-raok 'ta !

406.- Ur c'hwitadenn, un drouziwezh, e voe kement-se : peogwir ec'h eus kollet ar spered a zo deomp. Gounout a vez endeo penaos, gant ma'z po ur dezев dreistnaturel, n'en devezo disoc'h da oberiadenn (trec'hadenn pe zrouziwezh e ve, petra ' vern !) nemet un anv hepken : berzh-mat !

407.- Arabat droukveskañ gwirioù ar garg gant re an den e-unan. Ar re gentañ ne c'hellont ket bezañ dilezet.

408.- Bez' ez eo ar bigod e-keñver ar sant pezh ez eo an den pilpouz e-keñver an den deol ; ar skeudenn-la anezhañ.

409.- Ne gav ket deomp e talvezfe d'un dra bennak hor vertuz a sant, ma ne vefe ket stag hounnezh da vertuzioù boutin ar gristenion.

Kement-se a vefe kinklañ gant bragerizoù skedus krezioù truilhennek.

410.- Arabat d'az vertuz bezañ ur vertuz trouzus !

411.- Kalz a falsebestel, daoust dezho o-unan, a ra vad d'ar yoc'h, d'ar bobl, dre nerzh ha kelennadurezh Jezuz end-eeun, hag a vez prezeget ganto, bout ma ne lakaont ket er pleustr evito ar gelennadurezh-se.

N'eo ket digollet gant ar mad-se avat an droug divuzul

a gasont da benn dre lazhañ eneoù danvez-renerion, danvez-ebestel, a vez o pellaat, heuged, diouzh ar re na reont ket ar pezh a gelennont d'ar re all.

Rak-se, ma ne fell ket da unan ren ur vuhez reizh, arabat eo dezhañ pe dezhi en em lakaat war ar renk kentañ, e-giz pa vijent e penn ar bagad.

412.- Arabat eo e vefe tan da garantez ur sklaerderig-noz, ur seblant, ur gaouiat a dan, un tan ha na laka ket da flamminañ ar re a vez tizhet gantañ, ha na ro gwrez ebet.

413.- An "**non serviam !**" ("ne servijin ket !") distaget gant Satan a zo bet frouezhus dreist-goñvor. Daoust ha ne santez ket ez kreiz al lusk emroüs da lavarout bemdez, gant ar youl da bediñ ha da oberiañ, ur bommlavar all "**Serviam !**" ("Servijout a rin !"): da servijout a rin, dit e vin feal, ur bommlavar ma tizho ar frouezhusted anezhañ dreist da hini ar c'harmadenn-hont a zarsave-rezh ?

414.- Nag ur ranngalon : un den-Doue brein ! Hogen, na brasoc'h ranngalon : un den-Doue klouar, na gred nemet er bed-mañ !

415.- Na ra ket kalz forzh eus pezh a zo e sell ar bed 'trec'h' pe 'zrouziwezh'. Na peged alies e vez faezhet an trec'hour !

416.- "**Sine me, nihil potestis facere !**" ("Hepdon ne c'hellit ober netra !") Ur sklerijenn nevez, gwelloc'h, splannderioù nevez, evit va daoulagad, o tont eus ar sklerijenn beurbadel-se, ez eo an Aviel Santel.

Daoust ha "va" aamoedajoù a c'hell ober din souezhiñ ?

Din da lakaat Jezuz em holl aferioù. Ha dre se ne vo mui a amoedajoù em c'hundu ; ha ma rankan komz gant grasoù azas, ne lavarim mui "va aferioù", hogen "hon aferioù".

KARANTEZ EVIT DOUE

417.- N'eus ket a garantez estreget ar Garantez !

418.- Ar segred evit reiñ stumm d'ar pep izelausañ zoken ez eo karout.

419.- Ur bugel. Ur c'hlañavour. O skrivañ ar c'homzoù-se, daoust ha n'out ket tentet da lakaat dezho lizherennoù-bras ?

Setu : evit un ene e karantez, ar vugale hag ar re glañv a zo Eñ e-unan.

429.- Na nebeut a dra eo ur vuhez, evit he c'hinnig da Zoue !

421.- Un teñzor eo ur mignon ? Ar Mignon avat ? E-lec'h emañ da deñzor, eno emañ da galon.

422.- Da vignon eo Jezuz. Ar Mignon. Gant ur galon a greud evel da hini. Gant daoulagad o selloù leun a garantez, a ouelas evit Lazar.

Ha kement ha Lazar e kar ac'hanout.

423.- Va Doue, da garout a ran, met kelenn din ar garantez.

424.- Kastizañ dre garantez, setu ar segred evit dibradañ da rez an dreistnatur ar boan sammet war neb en devez henn dellezet.

Dre garantez evit Doue, a vez ofañset, ra dalvezo ar boan da zic'haouadur ; dre garantez evit an nesañ dirak Zoue, ra dalvezo ar boan, nepred da zialadur, hogen da vezegadur yac'haus.

425.- Pa soñjan, va Doue, e'm c'harez kement, ha... n'on ket troet sot !

426.- Er C'hrist hon eus an holl uhelvennadoù ; rak Roue ez eo, karantez ez eo, Doue ez eo.

427.- Aotroù, bezet din kempouez ha muzul e pep tra, nemet er Garantez.

428.- Ma ro ar garantez, ar garantez denel zoken, kement a frealzidigezhioù amañ, petra 'vo ar Garantez en Neñv ?

429.- Kement a vez graet dre garantez, a dizh ar Gened, a zeu da vezañ meur.

430.- Jezuz, ra vin an hini diwezhañ e pep tra, hag an

hini kentañ er Garantez !

431.- Na zouj ket barnerezh Doue : ken estlammus ha ken hegarat ez eo ar barnerezh-se e Doue ha maz eo an drugarez ; o-div ez int prouennoù eus e garantez.

432.- Arvest ouzh ar pep kaerañ hag ar pep uhelañ war an douar... Ouzh kement a blij d'ar poell ha d'ar galloudezhioù all... hag ouzh kement a zo plijadur ar c'hreud hag ar skiantoù ; hag ouzh ar bed hag ar bedoù all a lugern e-kreiz an noz ; hag estreget se, ouzh follentezioù ar galon roet o gwalc'h dezho,... hama, netra ne dalvez kement-se ; netra ez eo, ha nebeutoc'h eget netra e-keñver an Doue-se a zo din, a zo dit, anezhañ un teñzor divent, ar berlezenn briziusañ a zo, izelaet, graet ur sklav anezhañ, kaset da get e stumm ur c'haezhiad er c'hraou, e-lec'h ma karas bezañ ganet ; e stal-labour Jozeb ; en e Basion, hag en e varv karget-rez a zismegañs... hag er follentez a garantez maz eo Kerrin an Aoter !

433.- Bev diwar ar Garantez, ha bepred e trec'hi, betek e-kreiz ar faezhidigezh, e-kerzh emgannoù 'Las Navas' (1) ha Lepante (2) da vuhez diabarzh.

434.- Lez ar garantez hag an anaoudegezh-vat da darzhañ ha d'en em fennañ e-kreiz da galon oc'h arvestiñ ouzh gras Doue az tieub bemdez diouzh an trapedoù stignet ouzhit gant an enebour.

435.- "Timor Domini sanctus !" Santel eo an aon rak Doue, un aon a zo doujañs ar mab evit e dad ; nepred aon ar sklav, rak da dad a zo da Zoue ; n'eo ket un tirant.

436.- Poan diwar garantez. Peogwir ez eo mat. Peogwir ez eo da vignon, e roas evidout e Vuhez. Peogwir ez eo dioutañ kement mad a zo ennout. Peogwir ec'h eus e c'hloazet kement... Peogwir en deus mazavet dit...! Eñ...! ha dit-te!!

Gouel, va mab, gant ar boan garantez.

437.- Ha ma vije marvet un den evit da zieubiñ eus ar marv !

Marvet eo Doue. Ha menel a ran diseblant.

438.- An hini foll ! Da welet em eus, - soñjal a raes e oas da-unan-penn, - er chapel eskobel, o lezel war

bep kalir ha patenn nevez kensakret, ur pok, evit m'en c'havo-Eñ, pa ziskenno evit ar wech kentañ el listri kevrardiezhel-se.

439.- Arabat disoñjal ez eo ar boan maen-korn ar garantez.

(1) "Las Navas de Tolosa". Bez' ez eo hemañ anv un emgann brudet a c'hoarvezas e 1212 e kreisteiz Spagn hag a voe gounezet gant armeoù rouaned kristen al Ledenez Iberat diwar goust Muzulmiz Andalouzia hag Afrika an hanternoz.

(2) "Lepante". Bez' ez eo hemañ anv ur vorgad a c'hoarvezas e 1571, er mor kreizdouarek etre ul lestraz turk hag ul lestraz kristen. Mont a reas an trec'h gant ar gristenion.

KARITEZ

440.- P'az pezh echu da labour, gra hini da vreur, o skoazel-lañ anezhañ dre garantez evit ar C'hrist, en un doare ken blizidik ha ken natur, ma ne veizo ket an hini harpet emañ oc'h ober mui eget ar pezh a zleez hervez ar reizhded.

Setu petra eo gwir vertuz ur mab da Zoue.

441.- Doaniet out gant digarantez an nesañ ez keñver. Pegement, neuze, e vezo doaniet Doue gant da zigarantez en e geñver ?

442.- Na bleg ket da wallsoñjal a-zivout neb, daoust ma rofe komzoù hag oberoù an hini ez eus kont anezhañ digarez da varn evel-se hervez ar furnez.

443.- Na varn ket en un doare nac'hus ; pa ne c'hellez ket meuliñ, tav.

444.- Na wallgomz gwech ebet eus da vreur, daoust m'az pefe abeg a-walc'h d'henn ober. Kerzh da gentañ davet an nevedlog ; goude-se, kerzh davet ar beleg, da dad ; ha dizolo dezhañ da boan.

Ha da zen all ebet.

445.- Bez' ez eo an hibouderezh ar fankigell ma sank ha ma sac'h enni an abostolerezh. Sevel a ra a-enep d'ar garitez ; lemel a ra an nerzh ; kas a ra kuit ar peoc'h ; hag e laka da goll an unaniezh gant Doue.

446.- Maz out ken reuzeudik, penaos souezhiñ e ve ar re all reuzeudik ivez ?

447.- Goude gwelout gant petra e vez karget kalz buhezioù tud penn-da-benn : uzañ teod, uzañ teod, gant kement a zeu da heul, e seblant an dilavar bezañ retoc'h ha dedennusoc'h. Ha kompren a ran mat-tre, Aotrou, e c'houlennfes kont diganeomp eus kement komz didalvez distaget ganeomp.

448.- Aesoc'h eo lavarout eget ober... Te hag ez eus dit un teod lemm e-giz ur gontell, daoust hag arnodet ec'h eus ur wech bennak (lakaet ez pije bet un dro bennak d'henn ober) seveniñ "mat" da-unan ar pezh na seven ket koulz ar re all, hervez da ali aotrouniek da-unan ?

449.- Eus kement-se e reer : hibouderezh, kuzulikerezh, marvailherezh, itrikerezh, brozennezh, lavarerezh-koñchennoù... Tamall e gaou ? Viloni ?

Gant neb n'en deus ket d'he c'hefleuniañ e tro "karg ar Varn" d'an drailhañ kaozioù, hep muiken ; diaes eo e c'hoarvezfe e-giz-all.

450.- Na pegen doaniet eo Doue gant "direizhdred ar re reizh", a ra kement a zroug da galz eneoù, hag a roas kement a santelidigezh da re all.

451.- Na glaskomp ket barn. Pep hini a wel an traoù diouzh e sellboent, ha gant e gompreneson, a zo bevannet strizh hogozik bepred, teñvalaet ha lusennet e zaoulagad gant dic'houlou e angerz, meur a wech.

Ouzhpenn-se, evel ma c'hoarvez gant al livourion vodernour-se, ez eo ken dangorel ha ken distrantell gweled hiniennoù hag a dres un nebeut linennoù tidel en ur asuriñ ez eus anezho ur poltred pe un daolenn ac'hanomp.

Na pegen didalvez ez eo barnadennoù an dud. Na varnit ket enta, hep kroueriañ ho parnadenn en ho pedenn.

452.- Grit ho seizh gwellañ, maz eo rekis, evit pardonin d'ar re ho kloaz, adal ar mare kentañ, pegen bras bennak ez eo ar gaou pe an anoaz a reont deoc'h ; muioc'h en deus Doue mazavet dit.

453.- Droukkomz a rez. Koll a rez enta ar spered mat, ha ma ne zeskez ket tevel, pep komz eus da berzh a zo ur gammed war-du an noz, er-maez eus an embregadenn abostolel ma labourez enni.

454.- Na varn ket hep bezañ klevet an div gostezenn. Aes-kenañ e vez ankounac'haet ar reolenn elfennel-se a evezhiegezh, gant lod a gav dezho ez int devot, zoken.

455.- Daoust hag e ouzout pebezh gwall ez out kiriek dezhañ o vannañ ur maen, unan hepken, pa ne ve ken, en ur zerc'hel serr da zaoulagad ?

Kennebeut all ne ouzout pebezh gaou a c'hellez ober ouzh unan o lezel da risklañ a-ziwar da deod pismigadennoù a hañval dit bezañ dibouez a-grenn, dre ma talc'hez da zaoulagad serr dre skañvadurezh pe vuanegezh.

456.- Burutellañ, distrujañ n'eo ket diaes ; an disterañ

piker a oar plantañ e bigell e mein hael ha kaer un Iliz-veur.

Adeiladiñ, setu, avat, ul labour hag a c'houlenn, groñs ha krenn, mistri !

457.- Piv out-te evit barn diwar-benn furnez da holour ? Daoust ha ne welez ket ez eus en e gerz muioc'h a elfennoù da varn ? Muioc'h a skiant-prenet ? Hag ez eus war e dro kuzulierion a zo reishoc'h, gouziekoc'h ha yenoc'h o spered ? Ha dreist pep tra, en deus muioc'h a c'hrasoù, hag ur c'hras arbennik, ur c'hras a stad, a zo sklerijenn ha skoazell c'halloudus a-berzh Doue ?

458.- O stekiñ ouzh emgarouriezh ar bed e teui da brizout muioc'h karitez kedvreurek da dud.

459.- Da garitez a glask mont dreist d'he nerzh ! A-bell e tedennez ; ur sklerijenn a zo ennout ; pa vezez tost avat, e kasez diwar da dro ; ar wrez an hini eo a vank. Nag un druez !

460.- "Frater qui adjuvatur a fratre, quasi civitas firma !" "Evel ur gêr-greñv ez eo ar breur a zo harpet gant ar breur !" Preder un herrad, ha gra da soñj bevañ diouzh ar gedvreuregezh-se, a erbedan atav dit.

461.- Ma n'az kwelan ket o pleustriñ ar gedvreuregezh-se a brezegant dit dalc'hmat, e tegasin da soñj dit ar c'homzoù kouvran-mañ eus sant Yann : "**Filioli mei, non diligamus verbo neque lingua, sed opere et veritate...**" "Va bugali-goù, n'en em garomp ket dre gomz na gant an teod, hogen dre ober hag e gwirionez..."

462.- Galloud ar garitez : ho sempladurezh ketep a zo ivez un harp hag ho talc'h sonn en ho sav evit kefleuniañ an dlead, ma vuhezit ho kedvreuregezh venniget ; evel m'en em skor kenetrezo ar c'hartoù oc'h en em harpañ an eil war eben.

463.- Muioc'h eget er "reiñ" emañ ar garitez ; er "c'hom-pren" emañ ivez. Rak-se klask un digarez evit da nesañ ; atav ez eus unan, ma rankez barn.

464.- Gouzout a rez emañ heñ-mañ-heñ e dañjer evit e ene ? A bell, dre'z spered a unvaniezh gant Doue, e c'hellez bezañ ur skoazell efedus evitañ. Kerzh 'ta, ha n'en em chal ket !

465.- Ar preder-se a santez evit da vreudeur a seblant din bezañ mat ; bez' ez eo ar preder-se ur brouenn eus ar garitez a zo kenetrezoc'h ; diwall avat na walldrofe ar preder-se d'un tregas bennak.

466.- Peurvuiañ ne vez ket an dud brokus tamm ebet gant o arc'hant, a skrivez din : drailhañ kaozioù, en em entanañ gant trouz e-leizh, ober promesaoù, sevel raktresoù. Da goulz an aberzh ez eo distank ar re "a ro un taol-skoaz" ; ha ma roont, ez eo da geñver un diduamant bennak : fest-noz, c'hoari-sac'h, ur film, un nozvezh-laouen, pe c'hoazh embannadur ur roll 'brefe-ion galonek' war ar gazetenn.

Trist eo an daolenn, met ne sell ket ouzh an holl gwitibunan ; bez, te ivez, e-touez ar re ha na lezont ket o dorn kleiz, pa reont an aluzen, da c'houzout petra a ra an hini dehou.

467.- Levrioù. Astennet em eus an dorn, evel ur paourig eus ar C'hrist, ha goulennet em eus levrioù, levrioù a zo magadurezh evit furnez katolik, apostolek ha roman kalz a dud yaouank er skolioù-meur.

Astennet em eus an dorn evel ur paourig eus ar C'hrist...! Hag ouzh kement kerseenn a zo em eus reuziet !

Perak, Jezuz, ne intenter ket, karitez kristen don an aluzen-se, efedusoc'h eget na vefe reiñ bara a winizh mat ?


468.- Betek re ez out didro. Na bihan eo niver ar re a bleustr ar garitez ! Ha neuze, n'eo ket diskouez karitez reiñ ur c'hozh pezh-dilhad bennak pe ur gweneg toull bennak...

Ha kontañ a rez din petra a zo c'hoarvezet ganit, ha pegen desevet ez out.

Ne zeu nemet ur soñj d'am spered : emaomp, te ha me, o vont d'en em reiñ hep arboellañ netra ; ha mirout a raimp ouzh ar re hon darempredo a brenañ ken doanius skiant ha ma rejout da-unan.

469.- "Kevarc'h d'an holl sent..." "An holl sent ho kevarc'h..." "D'an holl sent a zo o vevañ en Efez..." "D'an holl sent er C'hrist Jezuz hag a zo o chom e Filipi..."

Ha n'eo ket gwir ez eo fromus an anvadur-se a "sent" a veze implijet gant ar gristenion gentañ evit mont an eil ouzh egile ?
Desk daremprediñ da vreudeur.



AN ARAEZIOU

470.- Petra ? An araeziou ? Bez' ez int an hevelep re ha re Ber, Pol, Dominig, Frañsez, Ignad, Zavie : ar groaz hag an Aviel.

Nemet e seblantfe an araeziou-se dit bezañ dister ?

471.- En embregadennoù a abostolerezh ez eo mat, hag un dlead ez eo, - erverzout da araeziou 'denel' - $2+2=4$, -met na disoñj ket gwech ebet, e tleez kontañ, dre chañs, gant un elfenn all eus ar c'henstrolladur : Doue+2+2.

472.- Servij da Zoue gant eeunded ; bez feal dezhañ, ha n'en em chal gant netra, rak ur wirionez vras ez eus, penaos "ma klaskez rouantelezh Doue hag he c'hevionez," e roio Doue dit ar peurrest, an dafar, hag an araez, war ar marc'had.

473.- Taol pell diouzhit an dic'hoanag a sav ennout diwar anavezout da zistervez ; ar wirionez eo : evit pezh a zo eus da arwarzh war dachenn an armerzh, ne dalvevez mann ebet ; evit pezh a zo eus da arwarzh war dachenn ar gevredigezh, ne dalvevez mann kennebeut... Ha mann ne dalvevez adarre evit pezh a zo eus da vriwerc'hioù, ha kement-se holl evit pezh a zo eus da zonezonou. Met a-gleiz d'an dastumad 'mannou'-se emañ ar C'hrist ; ha kement-se a ra ur riñv divuzul.

474.- Lakaomp ned out netra hag o deus re all savet, hag e savont bremañ, aozadurioù marzhus a gazetennerezh hag a vruderezh, hag emañ en o c'herz an holl araeziou, tra ma n'eus hini ebet ez kerz-te...

Mat, az pezet soñj eus Ignad :

dizesk e-mesk gouizieion Alcalá ; paour, paour-kenañ e-touez ar studierion e Pariz ; heskinet, tamallet e gaou...

Setu an hent digor dit : kar ha kred ha gouzañv. Da garantez, da feiz, ha da groaz a zo an araeziou na c'hellont ket c'hwitañ evit lakaat e talvoud ha peurbadelaat an iziunadoù a abostol a zougez ez kalon.

475.- Kedanaout a rez ez out un den dister ; ha bez'

ez out. Hogen daoust da gement-se holl, kentoc'h zoken, en abeg da se end-eeun, e'z klaskas Doue.

Atav ez implij araezioù ha n'int ket diouzh ment e oberenn evit ma vo gwelet ez eo an oberenn-se e hini.

Diganit e c'houlenn hepken bezañ hesent.

476.- P'en em zaskori da Zoue ne vo diaester ebet hag a c'hello reiñ brall d'az kwellwelouriezh.

477.- Perak e lezez ar c'hornioù distro-se e-barzh da galon ? Keit ha n'en em roi ket penn-da-benn ne dalv ket ar boan asuriñ e tegasi dezhañ unan all bennak.

Nag ur paour-kaezh ardivink ez out !

478.- Hama, erru e-lec'h m'emaout, pezh a zo o vont da c'hoarvezout eo ec'h eus ezhomm eus kalonekadur, eus gred, hag eus kuzulioù an dud a-bouez evit kenderc'hel d'ober ar pezh a c'houlenn Doue.

Hedro ha distrantell e vez an dud a-bouez avat, ha te a rank bezañ start ez mennoz ! Bez anaoudek ma'z harpont ; ha kendalc'h hardizh ma'z tisprizont.

479.- Na ra ket forzh ! A-viskoazh o deus ar 'furiion' graet 'follentezioù' eus oberoù Doue. War-raok, dispont !

480.- Gwelout a rez ? Un neudenn hag unan all, hag ur bern anezho plezhet mat a ya d'ober ar fun-se, a zo gouest da zibradañ pouezioù pounner spontus.

Te ha da vreudeur, ur wech unanet ho youloù evit seveniñ hini Doue, a vo gouest da drec'hiñ an holl skoilhoù.

481.- Pa vez klasket Doue hepken e c'heller a-walc'h lakaat er pleustr, evit kas war-raok oberoù an neñv, ar bennaenn-mañ degemeret gant unan eus hor mignoned vat : dispignet e vez ar pezh a zo dleet, zoken ma vez dleet ar pezh a vez dispignet.

482.- Petra 'vern m'ac'h eus a-enep dit ar bed a-bezh gant e holl c'halloudoù ? Te, kae war-raok.

Adlavar komzoù ar Salm : "Va sklerijenn ha va silvidigezh eo an Aotrou : rak piv em bo aon ? "Si consistant adversum me castra, non timebit cor meum..." Goude ma savfent ur c'hamp a-enep din, n'he devo ket aon va c'halon..."

483.- Kalon ! Gellout a c'hellez. Daoust hag e welez

ar pezh a reas Gras Doue gant ar Per-se moredet, renavi ha kouart... Gant ar Pol-se heskiner, kasonius hag aheurtet.

484.- Bez un ardivink : en aour pe e dir, e platin pe en houarn, bras pe zister, blizidik pe deuc'h...

Talvoudus eo an holl anezho. Pep hini en deus e gefridi arbennik. Evel evit an traoù arbennik : piv a gredfe lavarout n'eo ket ken talvoudus heskenn ar c'halvez ha piñsetez ar surjian ?

Dav eo dit bezañ un ardivink.

485.- Hama ! Ha petra ? N'intentan ket penaos e c'hellez en em dennañ eus al labour-se war-dro an eneoù, ma n'eo ket dre ur seurt lorc'hentez kuzhet ; krediñ a rez ez out peurvat dre ma ro fo Doue, en tu-hont d'ar wrez az entanas, a-wechoù ivez un tamm moged o tont a-ziwar sempladurezh an ardivinkoù.

486.- Labour ? Bez' ez eus. Ne c'hell ket an ardivinkoù chom da verglañ. Reolennoù a zo avat evit mirout ouzh ar mergl a grignat anezho : a-walc'h eo o lakaat er pleustr.

487.- N'en em chal ket gant ar c'hudennoù armerzhel a zo o tostaat ouzh da embregadenn a abostolerezh. Bezet brasoc'h da fiziañs e Doue ; gra ar pezh a c'hell an den ober, hag e weli buan e paouezo an arc'hant a vezañ ur gudenn.

488.- Na chom ket hep ober an traoù dre ziouer a araezioù : kregiñ a reer evel ma c'heller. Ha neuze, an ar-c'hweladoù a grou ar benvegadoù. Lod ha na dalvezont mann, a ziskouez bezañ gouest ; war ar peurrest e kas ar surjian un oberatadenn da benn, goude ma rafe droug (surjianed vat eo bet ar sent), ha kenderc'hel a reer da vont war-raok.

489.- Ur feiz bev-buhezek hag a ya don, evel feiz Per. Pa vezo ar feiz-se ganit, - Eñ an hini eo en deus lavaret, - e vo dilec'hiet ganit ar menezioù ha lamet ar skoilhoù 'didrec'hadus' a vez o stankañ an hent dirak da embregadennoù a abostol.


490.- Ur galon eeun ha youl-vat ; gant an div elfenn-se, hag an devez a lakai da gefleuniañ youl Doue, e weli

da huñvreoù o tont da wir, ha roet e walc'h d'az sec'hed d'an eneoù.

491.- Nonne hic est fabri filius ? Nonne hic est faber, filius Mariae ? "Daoust ha n'eo ket hemañ mab ar c'halvez ?" "Daoust ha n'eo ket hemañ ar c'halvez, mab Maria ?"

Ar pezh o deus lavaret diwar-benn Jezuz, marteze a-walc'h henn lavarint diwar da benn, gant un tammig bihan a souezh hag un tammig bihan a c'hoap, pa glaski, hep distro, kefleuniañ youl Doue, bezañ un ardivink... Penaos, avat ? Daoust ha n'eo ket hennezh...?

Ro peoc'h, ha d'az oberoù kadarnaat da gefridi !



AR WERC'HEZ VARI

492.- Ar garantez evit hor Mamm a vo ur c'hwezhadenn a entano glaou-bev ar briwerc'hioù hag a droio da flam-moù bev glaou ar briwerc'hioù a chom kuzh e-barzh ludu da glouarded.

493.- Kar an Itron Varia ; hag hi a dizho kaout evidout grasoù a-fonn evit bezañ trec'h er stourm pemdeziek-se. Ha ne servijo da netra d'an Droukspered ar viltañsoù a laka da sevel ez kreiz, bervidant ha diarsav, ken e kinnigont beuziñ gant o breinadurezh frondus ar menna-doù meur, ar c'hemennoù uhel-dreist bet lakaet gant ar C'hrist e-unan e-barzh da galon. **"Serviam !"** "Servijout a rin !".

494.- Bez da Vari, ha bez' e vi deomp.

495.- Dre Vari atav ez eer da Jezuz hag e tistroer dezhañ.

496.- Pegen plijet e vez an dud o kounañ o c'herentiezh gant tudennoù 'zo eus al lennegezh, ar politikerezh, al Lu, an Iliz...

Kan dirak ar Werc'hez Dinamm en ur gounañ dezhi : Doue r'az salvo Maria, merc'h Doue an Tad ; Doue r'az salvo, Maria, Mamm Doue ar Mab, Doue r'az salvo, Maria, Pried Doue Spered Santel. Mui egedout n'eus nemet Doue.

497.- Lavar dezhi : "Va Mamm..." Dit ez eo peogwir ez out dezhi e meur a geñver ; r'am stago da garantez ouzh kroaz da Vab, ma ne vanko din nag ar feiz, nag ar gadarnded, nag an hardizhegezh, evit kefleuniañ youl hor Jezuz.

498.- Holl bec'hedoù da vuhez a hañval en em ziskouez en-dro. Na goll ket kalon. Er c'hontrol, galv da vamm, santez Vari, gant feiz hag emzilez ur bugel ; degas a raio ar sioulded ez ene.

499.- Mari Santel-meurbet, Mamm da Zoue, a renas he buhez hep ma vije taolet evezh outi, evel ur vaouez e-touez gwragez he farrez.

Desk diganti bevañ hep ober ardoù.
500.- Doug war da chouk skoazwisk santel ar C'harmez.

N'eus ket kalz devosionoù (devosionoù mat e-leizh a zo gouestlet da Vari), hag a zalc'h ken uhel renk e-touez ar gristenion, ha n'eus ket kalz hag a zo bet benniget kement gant ar Bibion; hag en tu-hont da gement-se, ar brient-se deroet ganti d'ar sadorn, se a zo kement diouzh spered ur vamm !

501.- Paz eo bet goulennet ouzhit peseurt skeudenn eus ar Werc'hez a roe dit ar muiañ deoliezh, ha p'ac'h eus respontet, evel unan a oar mat eus petra ez eus anv : an holl gwitibunan, neuze em eus komprenet e oas ur mab mat, rak brav e seblante dit bezañ kement poltred a zo eus da vamm, "dre ma roont karantez din," ac'h eus lavaret.

502.- Mari, mestrez war ar bedenn a galon ! Sell penaos e ped he mab e Kanna ; ha penaos e pouez hep fallgaloniñ, gant dalc'husted ; ha penaos e teu a-benn : kae d'ar skol ganti.

503.- Mari, en digenvez, hec'h-unan-penn... Gouelañ a ra, estrenvanet.

Te ha me a zle ambroug an Itron Varia, ha gouelañ ivez, rak dre hon nammoù holl eo ez eo bet staget Jezuz ouzh ar groaz, gant tachou.

504.- Ar Werc'hez santel Mari, Mamm ar garantez leun a gened, a sioulaio da galon, pa raio-hi dit santout ez eo graet a gig, - m'en em harpez warni gant fiziañs.

505.- Ar garantez evit an Itron Varia a zo ar brouenn eus ur spered mat, kerkoulz en dud hag en oberennoù.

Disfiziout a ranker diouzh an embregadenn ha n'eus ket enni an arouez-se.

506.- Ar Werc'hez c'hlac'haret. Pa arvestez outi, sell ouzh he c'halon. Bez' ez eo ur vamm gant daou vab, tal-ouzh-tal : Eñ... ha te.

507.- Pebezh uvelded, hini va mamm Santel Maria. N'he gwelot ket e-kreiz ar palmez hejet e Jeruzalem, na kennebeut, - hag hi bet war-dro da vare preveudi Kanna, - da goulz ar burzhodoù meur.

Hogen ne dec'h ket diouzh dizenor ar Golgota ; eno emañ "juxta crucem Jesu..." e-tal kroaz Jezuz, e vamm.

508.- Estlamm ouzh nerzh-kalon Santez Vari e-harz

ar Groaz, krog enni ar brasañ glac'har evit un den : n'eus glac'har ebet par d'he glac'har, hag hi leun a nerzh-kalon. Goulenn diganti an nerzh-kalon-se, evit ma ouezi ivez chom e-harz ar Groaz.

509.- Mari, kelennerez a aberzh kuzh ha didrouz. Sell outi, hogos bepred war-dreñv, o kenlabourat gant he mab : gouzout a ra, ha tevel a ra.

510.- Daoust ha gwelout a rez pegen didro ez eo ? **Ecce ancilla...** Hag ar Verb en em reas kreud.

Evel-se ez oberias ar sent : hep reiñ arvest ebet ! Ma rejont, en desped dezho eo e rejont.

511.- "**Ne timeas, Maria !**" Na zouj ket, Maria. Strafuilhet e oa bet an Itron Varia dirak an Arc'hael. Perak e klaskfen lezel a-gostez ar munudoù a ziskouez elevez ar Werc'hez, un elevez hag a zo ur voger-difenn d'am glanded.

512.- O Mamm, Mamm : gant ar gomz distaget ganit : "**Fiat !**" ec'h eus graet ac'hanomp breudeur Doue, hag hêred d'e glod. Benniget ra vezi !

513.- A-ziagent, da-unan-penn, ne c'helles ket ; bremañ avat ec'h eus erdroet ouzh an Itron Varia, ha ganti, na pegen aes ez eo !

514.- Az pezet fiziañs. Distro ! Galv war da dro an Itron Varia, ha feal e vezi.

515.- Da vare pe vare e ra an nerzh diouer dit ? Perak ne lavarez ket d'az mamm ? "**Consolatrix afflictorum ; auxilium christianorum...**" "**spes nostra, regina apostolorum...**" "Frealzerez ar re c'hlac'haret, skoazell ar Gristenion ; hor goanag, rouanez an ebestel..."

516.- Mamm ! Galv-hi kreñv, kreñv ! Da selaou a ra, da welout a ra, pa veze en dañjer marteze, ha dit e kinnig-hi, ar Werc'hez Vari, da Vamm, gant gras he Mab, dihuz he divrec'h, duster hec'h allazigoù ; hag en em santout a ri kennerzhet evit ar stourm nevez a zo ouzh da c'hortoz.

AN ILIZ

517.- "Et unam sanctam, catholicam et apostolicam Ecclesiam..." Kompren a ran e chomfes a-sav, pa vezez o pediñ, evit tañva ar c'homzoù-mañ : krediñ a ran en Iliz unan, katolik, hag abostolel.

518.- Pebezh levezeg gellout lavarout gant holl nerzh va ene : karout a ran va Mamm, an Iliz Santel.

519.- Ar garm-se : "Serviam !" a zo ar youl da servijout feal-kenañ, diwar goust da c'hlad, zoken, diwar goust da enor ha da vuhez, Iliz Doue.

520.- Katolik, apostolek, roman. Plijout a ra din e vefes roman-tre, hag ez pefe c'hoant d'ober ar birc'hirinded "videre Petrum", "evit gwelout Per".

521.- Na pebezh madelezh hini ar C'hrist o lezel d'e Iliz ar Sakramantoù ! Bez' ez int un diwall evit kement enkadenn a zo.

Kehel-int, ha bez anaoudek-meurbet ouzh an Aotrou hag ouzh e Iliz.

522.- Dav eo dit kaout azaouez ha revil evit liderezh santel an Iliz, hag evit he dasliadoù dibar ; kefleugn-int gant kalz a fealded. Daoust ha ne welez ket penaos ar paour-kaezh tud a zo ac'hanomp o deus ezhomm e teufe tre enno ar peb uhelañ hag ar peb haelañ, zoken, dre ar santadennoù ?

523.- Kanañ a ra an Iliz. Se a zo bet lavaret, peogwir ne vefe ket ar c'homz a-walc'h evit he fedenn. Te, ur c'hristen hag ur c'hristen eus an dibab, e tleez deskiñ kanañ hervez al liderezh.

523.- Ret eo dirollañ da ganañ, a lavare un ene en em roet d'ar garantez, goude gwelout ar marzhoù kaset da benn gant an Aotrou, dre e weinerezh-eñ.

Ha me a ro dit en-dro ar c'huzul-mañ : kan ! Tarzhet da entan anaoudek evit da Zoue e kanennoù heson.

525.- Bezañ 'katolik' a zo karout ar vammvro, hep asantiñ e ve unan trec'h dit evit pezh a zo eus ar garantez-se. Ha war un dro, kemer war da gont iziunadoù hael an holl vroioù. Nag a glodoù kristen eus Iwerzhon a zo


deomp ! Hag er memes doare, kalz abegoù da dennañ lorc'h diouto o deus kristenion Iwerzhon, Kembre, Euskadi ha broadoù bihan all, a zo mat a-walc'h deomp ivez.

Katolig : ur galon ledan, ur spered digor.
526.- Ma n'ec'h eus ket ar brasañ azaouez evit ar stad a veleg pe a lean, n'eo ket sur e karez Iliz Doue.

527.- Ar vaouez-hont a eoulias gant ur frond pinvidik, e ti Simon al Lovr, e Betania, penn hon Arloz, a zegas da soñj e tleomp rentañ da Zoue ur gouloc'h kaer-dispar.

Nebeut a dra e hañval din bezañ kement a zo lorc'hentez, meurbed ha kaered er bed.

Nemet a-enep d'ar re a bismig pinvidigezh al Listri Sakr, ar c'hinkladurioù, ar sternioù-aoter, e sav mouezh Jezuz o veuliñ : "Opus enim bonum operata est in me..." "Un oberenn vat eo he deus ar vaouez-mañ sevenet em c'heñver..."



AN OFERENN SANTEL

528.- Un azon pouezus-kenañ eus an den a abostolerezh ez eo karout an oferenn.

529.- Hir eo an oferenn, emezout, ha me a lavaro ouzh-penn : peogwir ez eo berr da garantez.

530.- Alies e c'hoarvez gant kristenion pozet ha parfet hogozik en o darempredoù gant o nesañ (n'eus ket mall warno mont diwar o zro), pe en un obererezh vicher, morzet a-walc'h evit gwir, ouzh taol pe o tiskuizhañ (n'eus ket mall warno neuze kennebeut) en em santout preset a-drumm hag int o terc'hel war ar beleg evit ma krennfe an oferenn, ha ma verrafe an amzer gouestlet da aberzh santel-meurbet an Aoter.

531.- "Grit outañ gant damant, grit outañ gant damant !" a lavare, a-greiz e zaeroù, ur Prelad kozh d'ar veleion nevez edo o paouez urzhiañ.

Aotrou, piv a roio din mouezh ha beli a-benn garmiñ en doare-se e skouarn hag e kalon kalz kristenion.

532.- Pegement e leñvas e-harz an aoter ar beleg santel-hont a zellezas ar verzherinti, peogwir en devoa soñj eus un ene en devoa tostaet da zegemer ar C'hrist e stad a bec'hed marvel !

Daoust hag ez eo evel-se ec'h eus E zigollet, te ?
533.- Izelegezh Jezuz e Bezhleem, e Nazared ha war ar C'halvar. Donoc'h avat e izeladur hag e netraidigezh en ostiv Santel-meurbet ; donoc'h eget e izeladur hag e netraidigezh er c'hraou, e Nazared pe war ar Groaz.

Rak-se, nag un dever evidon karout an oferenn.
("Hon" oferenn, Jezuz !)

534.- Nag a vloavezhioù m'em eus kedunet bemdez ! Unan all a vefe ur sant, ac'h eus lavaret ; ha me, n'eus kemm ebet ennon !

Mab, am eus respontet, kendalc'h gant ar c'hedunadur pemdeziek-se ha soñj : petra e vijen deuet da vezañ, ma n'am bije ket kedunet ?

536.- Kedunadur, unanadur, kelloadur, kедfiziadur : Komz, Bara, Karantez.

536.- Kedunadur, unanadur, kellodadur, kedfiziadur : Komz, Bara, Karantez.

536.- Kedun : se n'eo ket dizoujañs. Kedun hiziv dres m'emaout o paouez en em zizober eus ar chadenn-se.

Daoust hag ec'h eus disoñjet ar pezh a lavare Jezuz : ar re yac'h n'o deus ezhomm mezeg ebet, - ar re glañv, ne lavaran ket.

537.- Pa zenesaez ouzh an nevedlog, soñj penaos Eñ az kortoz seulabred abaoe ugent kantved.

538.- Eno en E gavez : Roue ar Rouaned, Arloz an Arlozed : emañ razh a-bezh er Bara. En em izelaat en deus graet betek ar penn-pellañ-se, dre garantez evidout.

539.- Chomet eo evidout. N'eo ket diskouez doujañs tremen hep keduniñ, maz out terkoniet mat. Dizoujañs eo hepken e zegemer hep bezañ dellezek.

540.- Nag ur vammenn a c'hrasoù ez eo ar c'hedunadur speredel. Pleustr-eñ alies-tre, hag e tizhi muioc'h bezañ Doue ha muioc'h an unvaniezh gantañ en oberoù.

541.- Ur sevended ez eus en deoliezh. Desk-hi. Poanius eo an dud devot-se ha na ouzont ket en em gavout en oferenn, daoust m'he c'hlevont bemdez, nag ober sin ar groaz, - un nebeut frapadennoù dibaot a reont, frapadennoù prim ha prim, - na plegañ ar glin dirak ar Sakramant, -goap e hañval bezañ o glinadennoù, - na soublañ o fenn gant doujañs dirak ur skeudenn eus an Itron Varia.

542.- Na roit ket da gehelañ skeudennoù graet a 'rum-madoù'. Gwell eo ganin ur Groaz en houarn goveliet gros eget ar c'hroazioù-se e plastr pentet a seblant bezañ e sukr.

543.- Va gwelet ec'h eus o lidañ an oferenn war un aoter dibourc'h, un daol, hag ur maen, hep stern ; ar groaz, bras ; ar c'hantolorioù, start, gant piledoù e koar, an eil dreist d'egile, uheloc'h e-tal ar groaz ; danter an aoter diouzh liv an deiz ; ampl ar c'hazul, ar c'halir diginkl e linennoù, ledan avat e droc'h ; n'oa ket a c'houlou tredan : n'hor boa ket ezhomm anezhañ.

Hag e koustas dit un tamm dont er-maez eus ar chapel ; ken mat edod eno. Gwelout a rez e vezer tostaet ouzh Doue gant pervezhded al liderezh.

UNVANIEZH AR SENT

544.- Unvaniezh ar sent ? Penaos henn lavarfen dit ? Gwelout a rez petra ez eo an treuzfennadurioù-gwad evit ar c'horf ? Hama, evel-se e teu da vezañ Unvaniezh ar Sent evit an ene.

545.- Bevit en un doare dreistpar Unvaniezh ar Sent, ha pep hini a santo, da vare ar stourm diabarzh, dres ar pezh a sant da goulz al labour-micher : drantiz ha nerzh, dre ma n'emañ ket e-unan-penn.

546.- Mab, na mat e vuhezez Unvaniezh ar Sent, pa skrivez din : dec'h em eus santet edoc'h o pediñ evidon !

547.- Unan hag a oar kalz diwar-benn ar boutineladur-se eus ar madoù speredel a lavar din : ar gartenn he deus graet mad e-leizh din ; anat eo emañ intret gant pedennoù an holl, ha kalz em eus ezhomm e pedfed evidon.

548.- Ma santez Unvaniezh ar Sent, ma vuhezez anezhi, e vi, gant goust, un den a binijenn ; ha kompren a ri ez eo ar binijenn "gaudium etsi laboriosum", ul levenez, eviti da vezañ poanius. Santout a ri ez out "kevredad" an holl eneoù pinijennus, a zo bet, a zo, hag a vezo.

549.- Aesoc'h e vo dit kefleuniañ da zlead o soñjal er skoazell a ro dit da vreudeur, hag en hini a baouezez a reiñ dezho ma n'out ket re feal.

550.- "Ideo omnia sustineo propter electos..." "Rak-se e c'houzañvan pep tra evit an dibabidi..." "... ut et ipsi salutem consequantur..." "... evit ma tizhint o-unan ivez ar silvidigezh..." "... quae est in Christo Jesu..." "... a zo er C'hrist Jezuz..."

Un doare mat da vuhezañ Unvaniezh ar Sent !
Ped an Aotroù, ma roio dit ar spered-se eus sant Pol !

DEVOSIONOU

551.- Tec'homp diouzh ar sodell evel diouzh an diaoul e-unan. Ar gwellañ tu da chom hep kouezhañ en islonk-se, anezhañ bez an deoliezh wirion, ez eo en em zerc'hel bepred dirak Doue a zo en hor c'hichen.

552.- Az pezet un nebeut devosionoù dibar, padus avat.

553.- Na disônj ket pedennoù da vugaleerezh ac'h eus desket marteze diwar ziweuz da vamm. Dibun-int bemdez, didro-kaer, evel gwechall.

554.- Na lez ket a-gostez ar weladenn d'ar Sakramant. Goude bezañ pedet dre gomz evel ma rez peurvuiañ, lavar da Jezuz, bezant e gwirionez en nevedlog, gant petra out nec'het e-pad an devezh-se; sklerijennet ha kalonekaet e vi evit da vuhez a gristen.

555.- E gwirionez ez eo karadek denelezh santel hon Doue. En em lakaet ez poa e-barzh gouli santel-meurbet da Aotrou, ha goulennet az poa ouzhin: "Ma vezer gwalc'het, pareet, sioulaet, kreñvaet, entanet gant ar garantez dre ur gouli hepken eus ar C'hrist, petra ne raio ket ar pemp gouli digor war ar Groaz?"

556.- Hent ar Groaz. Setu un devosion nerzhus ha frouezhus. Salv m'en em voazi da adkemer a spered ar pevarzek arsav eus Pasion ha Marv Hor Salver da Wener. Me 'nn asur dit, nerzh a denni eus se evit ar sizhunvezh penn-da-benn.

557.- Devosion an Nedeleg. Ne vousec'hoarzhan ket p'az kwelan o kenaozañ menezioù lich ar c'hinivelezh, hag o tazlec'hiañ ar boulomoù didro e pri, tro-dro d'ar c'hraou; biskoazh n'ec'h eus seblantet din bezañ muioc'h ur gour eget neuze, pa hañvalez bezañ ur bugel.

558.- Bez' ez eo ar Rozera santel un arm galloudus; gra ganti, ha berzh a ri, ur bam.

559.- Sant Jozeb, Tad ar C'hrist, a zo ivez ur mestr a vuhez diabarzh. En em laka dindan e baeroniezh, hag e santi pegen efedus eo e c'halloud.

560.- Hon Tad hag Aotrou, sant Jozeb, a zo mestr ar vuhez diabarzh. En em laka dindan e baeroniezh, ha

santout a ri efedusted e c'halloud.

561.- Diwar-benn sant Jozeb e lavare santez Tereza : "Ma n'ac'h eus mestr ebet da gelenn dit ar bedenn-a-galon, kemer ar sant glorius-mañ da vestr, ha ne zianki ket war an hent..." Bez' ez eo ar c'huzul-mañ hini un ene leun a skiant-prenet. Heuilh-eñ.

562.- Az pezet fiziañs ez ael mirer. Gra outañ evel ouzh ur mignon a galon ; sed pezh ez eo, ha bez' e ouezo hemañ rentañ dit mil servij en degouezhioù ordinal eus ar vuhez pemdeziek.

563.- Bez deuet mat da ael mirer an hini a garfes sachañ d'an abostolerezh ; bepred e vez ur 'c'henrienner' eus ar c'hentañ.

564.- Ma 'z pefe da ael mirer bezant dirak selloù da spered, ha bezant ivez aelez virerion da nesañ, e tec'hfes diouzh ar sotonioù droch en em sil en un emziviz bennak.

565.- Bamet out o verzout en deus da ael mirer rentet dit servijoù anat. Ha ne zlefes ket bezañ bamet : evit se eo en deus an Aotrou e lakaet ez kichen.

566.- Er metou-se ez eus tro alies da ziankañ. Mat. Hogen daoust ha ne vefe ket ivez aelez virerion ?

567.- En em harp war da ael mirer da vare an aprou, ha da zivall a raio a-enep d'an Droukspered, ha degas a raio dit awenadennoù santel.

568.- Laouen-bras, moarvat, e sevene an aelez virerion santel o c'harg e-tal an ene-se a lavare dezho : "Aelez santel, hoc'h engervel a ran evel Fried 'Kanenn ar C'han-ennou' "ut nuntietis ei quia amore langueo..." "evit ma kemennot ez eo hir an amzer din gant ar garantez..."

569.- Gouzout a ran e roin dit levenez oc'h eilskrivañ ar bedenn-mañ da aelez virerion santel hon nevedlogoù :

"Aelez speredel, c'hwil hag a zivall hon nevedlogoù e-lec'h emañ o venel gouestl azeuladoc ar Gevradiezh nevet ; difenn-hi a-enep d'an disakrerezh, ha mir-hi d'hor c'harantez..."

270.- Ev diouzh feunteun sklaer "Oberoù an Ebestel". Er pennad XII. Per digarc'hariet dre weinidegezh an Aelez, a ya en hent davit ti Mamm Mark. Hogen ne fell ket da dud an ti krediñ pezh a lavar ar vatezh vihan,

a asur emañ Per e toull an nor. "Angelus ejus est !" "E ael e tle bezañ !" emezo. Sell gant pebezh fiziañs ez ae ar gristenion gentañ ouzh o aelez virerion. Ha te ?


571.- Eneoù benniget ar Purgator ! Dre garantez, dre spered a reizhded en o c'heñver, ha dre un emgarouriezh aes da zidamall ! - ken bras galloud o deus dirak Doue, - dalc'h kont anezho ez aberzhoù hag ez pedennoù.

Salv ma c'hellfes lavarout, pa veze oc'h ober anv anezho : "Va mignoned vat, eneoù ar Purgator..."

572.- Dreben a betra, emezout, ez erbedan dit ober bemdez gant dour benniget. Kalz abegoù mat a c'hellfen reiñ dit. Bastus a-walc'h e vo, sur-mat, evidout, an hini roet gant santez Tereza a Avila : "Diouzh netra mui ne dec'h an diaouled, hep distro, eget diouzh an dour benniget..."

573.- Trugarez, va Doue, dreben a'r garantez evit ar Pab ac'h eus lakaet em c'halon.

574.- Piv en deus lavaret dit ne oa ket gourel ober navedoù ? Gourel e vo an devosionoù-se pa vezint pleustret gant ur gour, gant ur spered a bedenn hag a bened.



FEIZ

575.- Darn a dremen dre ar vuhez evel dre ur riboul, ha ne zeuont ket a-benn da gompren glanded ha surentez ha gwrez heol ar Feiz.

576.- Gant pebezh spiswelled divalav e vez Satan oc'h arguziñ a-enep d'hor feiz katolik.

Hogen, lavaromp dezhañ bepred, hep kregiñ da vreutaat gantañ : me a zo mab d'an Iliz katolik.

577.- Ur feiz ramzel a santez... An hini a ro dit ar feiz-se, a roio dit ivez an araeziou anezhi.

578.- Henn lavarout a ra dit sant Paol, un ene a abostol anezhañ : "**Justus ex fide vivit...**" "An den reizh a vev diwar ar feiz...".

Petra a rez-te o lezel an tan-se da vougañ ?

579.- Poaniet e vezer o welout pebezh lec'h ec'hon a gemer-hi e komzoù kalz a gristenion, ha pebezh lec'h enk a roont dezhi en o oberoù !

War a seblant ez eo ar feiz ur vertuz da brezeg, ha n'eo ket da bleustriñ.

580.- Ped ent-uvell an Aotrou evit ma kresko da feiz. Ha goude, gant ur sklerijenn nevez, e ri gwell an diforc'h etre gwenod ar Bed hag hent an abostol a heuliez.

581.- Gant pebezh uvelded ha gant pebezh eeunded e kont skrivagnerion an Aviel lod fedoù hag a ziskouez anat pegen klouar ha diasur e oa feiz an ebestel.

Perak, neuze, e kollfemp, te ha me, ar spi da dizhout ar feiz dihorjellus ha kadarn a voe, a-c'houdevezh hini an ebestel-se end-eeun ?

582.- Na kaer eo hor feiz katolik ! Reiñ a ra un diskoulm d'hon holl ankenioù ha sioulaat a ra ar poell en ur gargañ a c'hoanag ar galon.

583.- N'on ket pitilh gant ar burzhudoù. Lavaret em eus dit ez eo a-walc'h din ar burzhudoù a gaver en Aviel santel evit diogeliñ start ar feiz. Met doaniet on gant ar gristenion-se, reoù zevot en o zouez, en em roet d'an abostolerezh, a vez o vousec'hoarzhin pa glevont komz eus hentoù dreistordinal. Santout a ran ar c'hoant

da lavarout dezho : eo, hiziv ez eus c'hoazh burzhudoù, ha ni hon-unan, en o grafemp, m'hor befe feiz.

584.- Kenil da feiz. Ar C'hris t n'eo ket un dudenn a zo tremenet. N'eus ket anezhañ un eñvorad en em goll en Istor.
Bevañ a ra. "Jesus Christus heri et hodie; ipse et in saecula..." a lavar sant Paol. "Jezuz dec'h hag hiziv, Eñ e-unan evit ar c'hantvedoù!"

585.- "Si habueritis fidem, sicut granum sinapis..." "M'ho pefe feiz, evel ur c'hreunenn sezo..."

Nag a bromesaoù a zo endalc'het en estlammadenn-se eus an Aotrou!
586.- Doue a zo an hini a-viskoazh. Tud a feiz eo a vank; ha nevezet e vo ar moliac'hoù a lennomp er Skritur Santel. "Ecce non est abbreviata manus Domini..." "Setu, n'eo ket bet diverret dorn Doue; e c'halloud n'eo ket bet kuzhet..."

587.- Feiz n'o deus ket, met brizh-kredennoù o deus. An den galloudus-hont en deus hol lakaet da c'hoarzhin ha da gaout mezh, dre ma kolle peoc'h ar spered pa glev ur gomzenn 'zo, didalvez ha dinoaz drezi hec'h-unan, nemet evitañ, gwall ziouganus, pe neuze pa wele ur gador o treiñ war un troad.

588.- "Omnia possibilia sunt credenti..." "Da neb a gred ez eo gallus pep tra..." Komzoù ar C'hris t ez eo ar re-mañ.

Petra 'rez, pa ne lavarez ket gant an ebestel : "Aduge nobis fidem..." "Kresk deomp hor feiz."

* * * * *
* * * * *
* * * * *
* * * * *
* * * * *

UVELDED

589.- Pa glewi stlakadeg-daouarn ar gourdrec'h, dassonet ivez ez tivskouarn ar c'hoarzhadegoù ac'h eus lakaet da sevel gant da c'hwitadennoù.

590.- Na glask ket bezañ evel ar wiblenn alaouret-se eus an adellad meur : pegen skedus ha pegen uhel bennak ez eo, n'he deus pouez ebet evit lakaat sonn an oberenn.

Salv ma vi, kentoc'h, evel ur maen-benerezh kuzh e-kreiz ar simant, dindan an douar e-lec'h na vi gwelet gant den ebet; en abeg dit ne gouezho ket an ti en e boull.

591.- Seul vui m'am gorreor, va Jezuz, seul vui r'am izelai, o reiñ din da c'houzout pezh ez on bet, ha pezh e vefen, m'am dilezfes.

592.- Na disoñj ket ez out... ar sailh-blotoù. Rak-se, m'az tibab al liorzhour doueel, m'az frot, m'az luf, m'az karg a vleunioù kaer-dispar... nag ar frond, nag al liv a zo o fichañ da fealded ne zleont reiñ lorc'hentez dit.

En em izela : daoust ha ne ouzout ket ez out ur sac'h-reputailhoù ?

593.- P'en em weli evel maz out, e teui da gavout natur bezañ disprizet.

594.- N'eo ket p'en em izelai e vi izelek, met pa vi izelaet ha pa anduri kement-se evel ar C'hris t.

595.- M'en em anavezfes en em laouenafes e-kreiz an dispriz, ha leñvañ a rafe da galon dre ma vefed ouzh da uhelsevel hag ouzh da ganmeuliñ.

596.- N'en em chal ket dre ma weler da walloù; anoazañ Doue ha bezañ kiriek d'ar wallskouer, sed gant petra e tleez en em chalañ.

Evit ar peurrest, ra ouezo an holl peseurt ez out, ha r'az tisprizor : ne vi ket doaniet, rak evel-se e ranko Jezuz lakaat pep tra ennout.

597.- M'en em zougfes hervez al luskoù a santez ez kalon hag ar re a zo kemennet dit gant ar poell, e vefes ingal stag da ziweuz ouzh an douar, a-c'hwen da gorf,

SENTIDIGEZH

614.- En oberoù a abostolerezh, n'eus ket a zisentidigezh dister.

615.- Temz da youl, gourela da youl, ma vo, gant rad Doue, evel ur c'hentr dir.

N'eo nemet dre gaout ur youl nerzhus e ouezi chom hep derc'hel dezhi evit sentiñ.

616.- Diwar-bouez an daleerezh-se, diwar-bouez an dizamanterezh-se, diwar-bouez an eneberezh-se eus da berzh p'az pezh da sentiñ, pebezh gaou ouzh an abostolerezh-se, ha pebezh levez evit ar gelen !

617.- Sentit, evel ma sent etre daouarn an arzour, ur benveg ha na glask ket imbroudiñ perak e ra an dra-mañ pe egile, sur maz oc'h ne vo goulennet biken diganeoc'h kas da benn un dra bennak ha na vo ket durc'haet penn-da-benn war-du klod Doue.

618.- An enebour : sentiñ a ri betek er munudoù c'hoarzh-us-se ? Te, gant gras Doue : sentiñ a rin betek ar munud harozek-se.

619.- Kentodoù. Kemer kentodoù e framm ar bevennoù a glot gant ar garg a zo bet fiziet ennout.

Ma teuont er-maez eus ar bevennoù-se, pe m'ac'h eus un douetañs bennak diwar o fenn, goulenn kuzul gant an holour, hep reiñ da soñjoù da anaout da zen all ebet.

Na disoñj ket ec'h eus hepken da 'erounit' !
620.- Ma ne ro ket ar sentiñ peoc'h dit, kiriek da se eo da lorc'h.

621.- Na pebezh gwasterezh pa ne ro ket skouer-vat an hini a zo e penn, hogen daoust ha sentiñ a rafes outañ evit e berzhioù personel ? Pe neuze ar sturienn : "Obedite praepositis vestris..." "Sentit ouzh hoc'h holourion..." diwar gomzoù sant Paol, a droez, evit ma vo aesoc'h dit, gant un atodadenn ijinet ganit a denn da lavarout... Atav, gant m'en devo briwerc'hioù a blij din.

622.- Na mat ec'h eus meizet ar sentidigezh p'ac'h eus skrivet din : "Sentiñ dalc'hmat a zo bezañ merzher hep

mervel."

623.- Goulenn a reer diganit un dra a zo, d'az soñj, diaes ha difrouezh. Gra-eñ, ha gwelout a ri ez eo aes ha frouezhus.

624.- Urzhaz. Pep tra en e lec'h. Petra a chomfe eus un daolenn eus Velasquez, ma tibabfe pep livadenn e andred, maz afe kuit eus he zu pep neudenn eus al lien, m'en em zistagfe diouzh ar re all pep tamm koad eus ar stern ?

625.- Da sentidigezh ne zellez ket an anv-se ma n'out ket mennet da sellout evel mann da labour personel ar muiañ bleunius, pa gemer an diviz-se an hini en deus galloud d'henn ober.

626.- Ar wirionez eo, 'keta, Aotrou, e roe dit kalz a frealz ar "soutilded"-se eus un den kaezh a lavare dit a vouezh izel, pa sante an nec'hamant a vez lakaet da sevel en unan gant ar sentidigezh en un dra displejus ha doñjerus d'e natur : "Jezuz, ra vin gouest da dalañ dispont, da vihanañ !"

627.- Mut e tle bezañ da sentidigezh. A, an teod-se...

628.- Hiziv, pa goust dit sentiñ, az pezet soñj eus da Aotrou : "Factus obediens usque ad mortem, mortem autem crucis..." "Deuet eo da vezañ sentus betek ar marv, hini ar Groaz, a zo gwashoc'h..."

629.- A, galloud ar sentidigezh. Lenn Genezared a nac'he daskoriñ he fesked ouzh rouedoù Per. Un nozvezh penn-da-benn en aner !

Neuze, o sentiñ, en deus taolet ar roued en dour, hag e pakjont "piscium multitudinem copiosam..." "Forzh pegement a besked..."

Kred ac'hanon : bemdez e vez nevezet ar burzhud-se !

PAOURENTEZ

630.- Na disoñj ket : neb en deus nebeutoc'h a ezhommoù en deus muioc'h a zanvez ivez. Arabat eo ijinañ ezhommoù dit.

631.- En em zistag diouzh madoù ar bed. Dav eo dit karout ar baourentez a spered, hag he lakaat er pleustr ; bez laouen gant ar pezh a ro an tu da dremen dic'hoant ha didro.

Anez, ne vi biken un abostol.

632.- Ne c'hoarvez ket ar baourentez wirion eus chom hep kaout, hogen eus bezañ distag, eus dilezel a youl vat ar vestroni war an traoù.

Rak-se ez eus peorion a zo, e devoud, pinvidion ; hag ar c'hontrol.

633.- Maz out un den-Doue, laka an hevelep aheurtrezh da zisprizout ar binvidigezh hag a laka tud ar bed da berc'hennañ anezho.

634.- Ken bras doug da draoù an douar ! Prestik ez aint a dre da zaouarn, rak ar binvidigezh ne ziskenn ket gant ar pinvidig e-barzh ar bez.

635.- N'eus ganit spered a baourentez ebet, ma ne zibabez ket evidout lodenn ar paour pa vezez war-nes dibab hep ma vefe taolet pled ouzh da zibab.

636.- "Divitiae si affluent, nolite cor apponere..." "Ma kouezh ar binvidigezh a-fonn ez parlenn, na stag ket da galon outi..." Gra da wellañ evit ober un implij brokus anezhi. Ha ma vez rekis, gant harozerezh. Bez paour a spered.

637.- Ne garez ket ar baourentez ma ne garez ket kement a ya a-unan ganti.

638.- Nag a duiou-mat santel er baourentez ! Soñj ac'h eus ? Te da-unan ac'h eus roet d'ar mare ma oa un enkadenn armerzhel o reuziañ un embregadenn abostolek, kement a oa ez kerz, betek ar gwenneg diwezhañ.

Hag e lavaras dit, ur beleg eus Doue : "Me a roio dit kement am eus." Ha te da zaoulinañ ha... "Bennozha an Doue hollec'halloudek, Tad, Mab ha Spered Santel,

diskennet warnout ha manet da viken" a voe klevet.

Daoust da se e pad ennout ar gredenn start e chomez paeet mat.

AVIZDED

639.- Nepred n'ez po keuz da vezañ tavet ; da vezañ komzet, meur a wech, ne lavaran ket.

640.- Penaos e kredez pouezañ evit ma vo miret ur sekred,... pa ziskouez an aked-se n'ec'h eus ket gouezet e virout.

641.- Avizded n'eo na kuzuterezh na sekrederezh ; bez' ez eo hepken un doare da vezañ natur.

642.- Bez' ez eo an avizded... blizidigezh. Daoust ha ne santez ket un tamm tregas, un tamm diaezamant ez kreiz, pa dec'h aferioù uhel ha dister da diegezh eus gwrez an oaled evit kouezhañ e diseblanted pe e ranellder an dud war leurioù kêr ?

643.- Na ziskouez ket d'an holl war ar prim ar pep kuzhtañ eus da abostolerezh. Daoust ha ne welez ket ez eo leun ar bed a emgarourion ha na vennont ket kompren.

644.- Tav. Na disoñj ket ez eo da uhelvennad ur c'houlaouennig a-boan enaouet ; a-walc'h e c'hell bezañ ur c'hwezhadenn evit he mougañ ez kalon.

645.- Na frouezhus eo an dilavar. An holl nerzh a gollez gant da vank a avizded a zo un nerzh a lamez kuit diouzh efedusted da labour.

Bez avizet.

646.- Ma vijes bet muioc'h avizet, ne vijes ket o klemm ez kreiz en abeg d'ar blaz fall ez kenou a ziaeze ac'hanout abaoe nouspet diviz.

647.- Na glask ket bezañ komprenet. Diwar Ragevezh-Doue eo an digomprenerezh-se, evit ma tremeno da aberzh hep bezañ merzet.

648.- Ma roez peoc'h, e tizhi muioc'h a efedusted ez embregadennoù a abostol, - nag a dud a lez o nerzh da vont dre ar genou, - hag e tec'hi evel-se diouzh nouspet tro d'en em fougeal.

649.- Atav ar c'hoariva ! Goulenn a rez luc'hskeudennoù, krommennoù, stadegoù !

N'em eus ket kaset dit an dafar-se, peogwir - daoust ma seblant din ar mennoz kontrol bezañ da zoujañ kenañ - e rofe se din da soñjal e ran ul labour war-wel en

em c'horren war an douar ; hag e-lec'h ma fell din en em c'horren, ez eo en neñv.

650.- Kalz a dud ez eus, ya, tud santel anezho, ha na gomprenont ket da hent. Arabat bezañ e chal d'ober dezho kompren se ; da amzer a gollfes, ha lec'h a rofes d'an diavizded.

651.- N'eus ket tu da vezañ diaz ha lein, - nemet o vezañ sev, spered e ve, - un dra hag a ya en diabarzh..."

Da vignon, an hini a skrive ar gerioù-mañ, a ouie e oas tragerc'hek en un doare hael. Ha deskiñ a ra dit an hent : an avizded, an aberzh, mont dre an diabarzh.

652.- Avizded : ur briwerc'h hag a zo da nebeut a dud. Pebezh dismegañs a reer d'ar merc'hed o lavarout ned eo ket an avizded ur vertuz merc'hed !

Nag a wazed, barvek mat, o deus d'henn deskiñ !

653.- Pebezh skouer a avizded a ro deomp Mamm Doue. Da sant Jozeb zoken ne ro ket ar mister da c'houzout.

Ped an Itron Varia evit na vanko ket dit ar briwerc'h-se.

654.- Gant an desped ez eo bet lemmet da deod : ro peoc'h enta !

655.- Biskoazh n'em boa da lakaet, gant aked a-walc'h, da brizout pouez an avizded.

Ma n'eo ket dremm da gleze, e lavarinn dit ez eo an dornell anezhi.

656.- Tav bepred, pa santez ez tiabarzh ar vuanegezh o virviñ, ha kement-se daoust dit bezañ brouezet gant reizh.

Peogwir, pegen avizet bennak e ves, e lavari atav muioc'h eget a garfes.

- 107 -
LEVENEZ

657.- Ar vertuz wirion n'eo na trist na displijus, met laouen hag hegarat.

658.- Ma tro mat an traoù, bezomp laouen, en ur vennigañ Doue a laka ac'hanomp d'ober berzh. Treiñ a reont da fall ? Bezomp laouen, en ur vennigañ Doue dre m'holl laka da berzhiañ en e groaz dous.

659.- Al levenez a zleez kaout, n'eo ket an hini a c'hallfemp ober anezhi ul levenez korfek, hini ul loen yac'h, hogen unan all, dreistnatur a ziwan diouzh en em zilezel etre divrec'h karantezus hon Tad a zo Doue.

660.- Biken ne golli kalon maz out un abostol. N'eus skoilh ebet ha na c'hellfes trec'hif. Perak ez out trist ?

661.- Un dremm hir... Doareoù reut... un tres lu... un diavaez erezus... Daoust hag ez eo evel-se ec'h eus spi da vroudañ ar re all da heuliañ ar C'hrist ?

662.- N'eus ket a levenez ? Soñj : bez' ez eus ur skoilh etrezout ha Doue. Hogozik bepred ez po kavet ar wirionez.

663.- Evit gwellaat d'az tristidigezh e c'houlennet un ali. Setu ez an da reiñ dit ur rekipe a zeu eus un dorn mat : hini an abostol sant Jakez. "**Tristatur aliquis vestrum ?**" "Unan ac'hanoc'h a zo trist ?" "**Oret !**" "**Pedet !**". Klask gwelout.

664.- Arabat dit bezañ trist. Bezet dit ur welidigezh eus an traoù a zo muioc'h diouzh hon doare-ni... muioc'h kristen.

665.- Fellout a ra din e vefes seder atav, rak al levenez a zo ul lodenn gevanus eus da hent. Goulenn al levenez-se end-eeun evit an holl.

666.- "Laetetur cor quaerentium Dominum..." "Laouenaet kalon kement hini a glask an Aotrou..." Kement-se a ro sklerijenn evit ma klaskfes gouzout peseurt arbennoù a zo d'az tristidigezh.

BRIWERC'HIOU ARALL

667.- Ar greadoù a feiz, a c'hoanag hag a Garantez a zo an norioù ma'n em strink drezo an eneoù a vev buhez Doue.

668.- Gra kement-se penn-da-benn, hep deur ebet, dre garantez rik, e-giz pa ne vije na garedon, na kastiz. Hogen kenil ez kalon goanag klodus an Nefiv.

669.- Mat eo e servijfes Doue evel ma rafe ur mab, hep gopr, brokus a bep hent, hogen n'en em chal ket ma soñjez ur wech bennak er gopr.

670.- Lavarout a reas Jezuz : "Neb en devo kuitaet e di pe e vreudeur, pe e c'hoarezed, pe e dad, pe e vamm, pe e bried, pe e vugale, pe e beadra, en abeg d'am anv, a resevo kant gwech muioc'h hag a biaoou ar vuhez peurbadel."

Kerzh da welout hag-eñ e keji war an douar gant unan hag a bae gant kement a vrokusted.

671.- Jezuz... a dave. "Jesus autem tacebat." Perak e komzez-te ? Evit en em frealziñ pe evit en em zidamall ?

Tav. Klask al levenez en dismegañs ; graet e vo nebeutoc'h dit eget a zellezez.

Daoust ha bez' e c'hellez, da skouer, goulenn : "**Quid enim mali feci ?**" "Peseurt droug am eus graet ?"

672.- Sur eo e vi un den-Doue ma c'houzañvez an direizhder, laouen ha dilavar.

673.- Kaerat respont an hini a reas an den doujus-hont d'an den yaouank a glemme en abeg d'an direizhder en doa gouzañvet :

- Nec'het out ?" a lavare dezhañ. "Hama, na glask ken bezañ mat !"

674.- Na ro nepred da ali ma ne c'houlenner ket diganit henn ober, daoust ma soñjez ez eo da vennoz-te an hini asurañ.

675.- Ar wirionez eo ez eo bet ur pec'her. Hogen na zalc'h ket d'ur varnadenn diazgalv diwar e benn. Bez tuet da druezziñ, ha n'ankounac'h ket e c'hell, evelato,

bezañ un Eosten, tra ma ned ez-te ket en tu-hont d'an distervez.

676.- Holl draoù ar bed-mañ ned int nemet pri; gra anezho ur bern dindan da dreid; ha tostoc'h a se e vi evel-se d'an neñv.

677.- Aour, arc'hant, bragerizoù... Pri, bernioù a deil. Joaioù, plijadurioù ar skiantoù, gwalc'hadur ar c'hoante-gezhioù... evel ul loen, evel ur vul, evel ur c'hilhog, evel un tarv.

Enorioù, medalennoù, titloù: klogorennoù, c'hwezhadennoù ar vrazoni, gevier... netra.

678.- Na laka ket da garantezioù amañ war-draoñ; karantezioù emgar ez int. Ar re a garez en em zispartio diouzhit gant aon ha doñjer un nebeut eurvezhioù goude m'en devo Doue da c'halvet d'e ouezvoud; re arall ez eo ar c'harantezioù a beurbad.

679.- Ur si fall divalav ez eo al lontegezh. Daoust ha ne ro ket dit un tammig c'hoant c'hoarzhin, hag un tammig doñjer ouzhpenn, gwelout an aotrounez sirius-se, azezet tro-dro d'un daol, parfet e-giz pa sevenjent ul lid, o sankañ druzoni en o bouzellou, evel pa vije se ur finvez ennañ e-unan?

680.- Ouzh taol, na gomz ket eus boued; se a zo un dra gwall zispled, ha na zere ket ouzhit. Komz eus un dra bennak uhel, eus an ene, eus ar reiz, hag uhelsevel a ri an dlead-se d'en em vagañ.

681.- An deiz ma savi diouzh taol bep bezañ graet un aberzh bihan, ez po debret evel ur pagan.

682.- Peurvuiñ e tebrez muioc'h eget n'ec'h eus ezhomm; ha kaout da walc'h, - pezh a zegas dit meur a wech losk-kalon ha diaezamant, - a vir ouzhit ivez a dañva ar madoù dreistnatur, hag a laka da spered da gousket. Pebezh vertuz vat, evit an douar-mañ zoken, ez eo an emreizh!

683.- Da welout a ran, te, kristen, - hag e lavarez ez out, - o pokat d'ur skeudenn, o vouslavarout ur bedenn dre gomz, o c'harmiñ a-enep d'ar re a dag Iliz Doue, ha zoken, o pleustrif ar sakramantoù santel.

Met n'az kwelan ket oc'h ober sakrifiz ebet, nag o tec'hout

diouzh divizoù 'zo... bedel, lakaomp (un anv-gwan all a c'hellfen stagañ outo), na bezañ brokus e-keñver ar re a zo dindanout, nag e-keñver an Iliz-se eus ar C'hrist, nag o c'houzañv an disterañ sempladurezh en unan, nag o waskañ war da lorc'hentez evit mad an holl, nag o teurel diwar da choug an emgarouriezh a zo ouzh da wiskañ, na kement a draoù all ouzhpenn... Da welout a ran ha n'az kwelan ket...hag e lavarez ez out ur c'hristen... Nag ur soñj dister ac'h eus eus ar C'hrist!

684.- Da ampartiz, da c'halloud da zedennañ an dud, da berzhioù-mat... Ne servijont ket, emezout: n'az lezer ket da dennañ mad diouto. Soñj ervat er c'homzoù-mañ eus ur skrivagner speredel: "Ne vez ket kollet an ezañs a vez kinniget da Zoue; muioc'h enoret eo an Aotrou gant da ampartiz gwasket eget gant un implij fall anezhi.

TRUBULHOU

685.- Mat eo bouilhard an heskinerezh ! Petra a vez kollet ? Ne vez ket kollet ar pezh a oa kollet a-gent. Pa ne vez ket diframmet ur wezenn betek ar wrizienn, - hag an Iliz n'eus avel na korventenn a c'hellfe he diframmañ, -ne gouezh nemet ar brankoù sec'h ; hag ar re-se a oa kouezhet, e gwirionez.

686.- Dav eo dit keñveriañ : an den-mañ-den a zo bet fall ez keñver. Hogen daoust ha n'out ket bet gwashoc'h e-keñver Doue ?

687.- Jezuz : e kement lec'h maz out tremenet, ne lezjout kalon den ebet diseblant ; pe e'z karer, pe e'z kasaer.

Pa vez ur gwaz, un abostol anezhañ, ouzh da heuliañ en ur gefleuniañ e zlead, daoust ha souezhiñ a rin, - peo-gwir ez eus anezhañ un eil Krist, - ma sav en-dro dezhañ an hevelep hiboud a heugerezh pe a gouvranterezh ?

688.- Ur wech c'hoazh, nag a draoù o deus lavaret, nag a draoù o deus skrivet... a-du, a-enep...gant youl-vat, ha gant nebeutoc'h a youl-vat ; traoù roet da intent, tamalloù e gaou, meulbrezegoù, megedareizhoù, sotonioù ha gwirievezhioù.

Amoet, hag amoet-mik ! Petra 'vern dit, pa skoez war-eeun etrezek ar pal, da benn ha da galon mezvet gant Doue, pe c'harm an avel, pe gan ar skrilh, pe ar blejerezh, pe ar grumuzerezh, pe ar grizinkerezh ?

Ouzhpenn-se : didec'hus eo se ! Na glask ket lakaat dorioù d'ar maezioù.

689.- Distagellet eo bet an teodoù, ha gouzañvet ec'h eus flemmadennoù o deus da bistiget seul grisoc'h ma ne oas ket en gortoz anezho.

Da ersav dreistnatur a zle bezañ mazaviñ, - ha, zoken, goulenn bezañ mazavet, - hag ober da vad eus an arnod-se evit en em zistagañ diouzh ar c'hrouadurioù.

690.- Pa zeuio ar boan, an dispriz, ar Groaz, e tleez en em stagañ ouzh ar soñj-mañ : petra eo kement-se e-keñver pezh a zellezan.

691.- Emaout o c'houzañv e-kreiz ur bras a drubuilh.

Enebiñ a reer ouzhit. Lavar, gorrek-kenañ, evel o saourin anezhi, ar bedenn-mañ, nerzhus ha gourel :

"Bezet graet, bezet kefleuniet, bezet meulet ha da virviken uhelsavet youl Doue, reizh-meurbet ha karus-meurbet, war gement tra a zo ! Amen, amen !"

Asurifiñ a ran dit e tizhi ar peoc'h.

692.- Gouzañv a rez er vuhez-mañ war-draoñ... hag a zo un huñvre... verr.

Bez laouen : rak da garout a ra da Dad-Doue, ha, ma ne skoilhez ket anezhañ, en tu-hont d'an huñvre fall-se, e roio dit-te un dihun mat.

693.- Doaniet out dre ma n'o deus ket diskouezet anaoudegezh-vat dit evit ar servij-se.

Respont din war an daou c'houlenn-mañ : daoust hag ez out ken anaoudek-se ouzh ar C'hrist Jezuz ? Gouest e vijes bet da rentañ ar servij-se o klask anaoudegezh-vat war an douar ?

694.- N'ouzon ket perak e souezhez. Biskoazh n'eo bet gwall boellek enebourion ar C'hrist. Pa voe dasorc'het Lazar e tlejent bezañ en em zaskoret, ha kedanavet doueelezh Jezuz. Hama, nann ! Lazhomp, emezo, neb a ro ar vuhez.

Hag hiziv, evel dec'h.

695.- Da vare ar stourm hag an enebiezh, pa glask "ar re vat" stignañ skoilhoù war da hent, sav da galon a abostol ; selaou Jezuz o komz eus ar c'hreunenn sezo hag ar c'hoell. Ha lavar dezhañ : "**Edissere nobis parabolam...**" "Diskleir din an dameg."

Ha levezet a santi, hini arvestiñ ouzh an trec'h da zont : laboused an neñv e goudor da abostolerezh o kregifi bremañ ; hag an holl doaz o c'hoiñ.

696.- Ma tegemerez an trubuilh oc'h aoniñ, e kolli al levezet hag ar peoc'h, hag emaut war var da chom hep tennañ gounid eus an aprou-se.

697.- An darvoudoù politikel o deus da enket en ur sklotur a-youl-vat, gwashoc'h marteze, en abeg d'an ampegadoù anezhañ, eget sklotur an toull-bac'h. Gouzañvet ec'h eus ur 'fallaenn' eus da bersonelezh.

N'ec'h eus ken egor ebet en-dro dit : emgarantez, ranell-

der, digomprenerezh, hag hibouderezh. Mat. Ha petra c'hoazh ? Daoust hag ankounac'haat a rez da vennentez dieub a-grenn, ha da c'halloud a 'vab' ? An diouer a zeliou hag a vleunioù (an ober diavaez) ne gas ket diwar da dro liesadur hag oberiantiz ar gwrizioù (buhez diabarzh).

Labour. Kemm a raio red an traoù, ha reiñ a ri muioc'h a frouezh eget a-ziagent, ha saourusoc'h e vint.

698.- Da skañdalat a reer. Na vroc'h ket, evel maz out aliet d'henn ober gant da lorc'hentez. Sofj : pebezh karitez o deus em c'heñver ! Nag a draoù m'o deus tavet warno !

699.- Kroaz, labourioù, trubuilhoù : diouto ez po keit ha ma vi bev. Dre an hent-se e tremenas ar C'hrist, ha n'eo ket an diskibl brasoc'h eget ar Mestr.

700.- A-du : kalz a eneberezh ez eus en diavaez, ha kement-se az tigarez, evit lod ; hogen bez' ez eus kalz a genwallerezh en diabarzh, sell mat, hag e kement-se ne gavan digarez ebet.

701.- Daoust ha n'ec'h eus ket klevet diwar ziweuz ar Mestr dameg ar winienn hag ar barroù ? Bez frealzet ; goulenn a ra kalz diganit, peogwir ez out-te ur barr hag a zoug frouezh ; da ziskoultrañ a ra "**ut fructum plus afferas...**" "evit ma roi muioc'h a frouezh..."

Sklaer eo : droug a ra dit ar benerezh-se, an diframmerez-se. Hogen goude, pebezh freskter er frouezh, pebezh azvder en oberoù.

702.- N'out ket sioul ; c'hoarvezet a c'hoarvezo ez puhez diabarzh pe er bed a c'hronn ac'hanout, n'ankounac'h nepred ez eo keñverel pouez ar berzh-mat hag an tudennoù. Bez dinec'h : lez an amzer da redek ; ha goude-se, o welout a-bell ha dic'hoant a-grenn an darvoudoù hag an dud, e tapi un diabell-weled, e lakai pep tra en e lec'h hervez e vent wirion.

Dre ober er mod-se, e vi reishoc'h hag espern a ri ouzhit kalz nec'hamantoù.

703.- Un nozvezh fall en un ostaleri fall. Evel-se e voe termenet ar vuhez douarel-mañ, war a lavarar, gant ar Vamm Tereza a Jezuz. Daoust ha n'eo ket

gwirionez ez eo ur c'heñveriadur azas ?

704.- Ur weladenn en ur manati anvek. An itron-se, un estrañjourez, a santas he c'halon o vont bihan en he c'hreiz o verzout pegen paour e oa ar savadur. "Bez' e tleit gouzañv ur vuhez gwall galet amañ, n'eo ket gwir ?" Hag ar manac'h, laouen an tamm anezhañ, da respont : "Fellet en deus dit-te bezañ manac'h, ha bez' ez out ?"

Se a glevis un den santel o lavarout gant levenez, a rankan lavarout dit gant poan, pa gontez dit n'out ket evurus.

705.- En em chalañ a rez ? Nepred ! Se a zo koll ar peoc'h.

706.- Diskaret out a gorf ? ... Dic'hwezhet out ? Diskuizh ! Paouez gant an obererezh diavaez-se, kemer kuzul gant ar mezeg.

Sent ha paouez a en em drechalañ.

Emberr e tistroi d'az puhez, hag e vo gwelloc'h, ma vezez feal, da oberoù abostolel.

STOURM DIABARZH

707.- Arabat dit bezañ strafuilhet o prederiañ diwar-benn marzhoù ar vuhez dreistnatur, ma klevet ur vouezh all, en em silet e don da voud, hini an den kozh.

Bez' ez eo ar 'c'horf a varv' a c'houlenn e wirioù kollet. A-walc'h eo dit ar c'hras ; bez feal, ha trec'hiñ a ri.

706.- Ar bed, an Droukspered hag ar C'hreud a zo paotred an avañtur a ra o mad eus sempladurezh ar gouezad a zo o chom ez kreiz en ur glask reiñ bitrak ur blijadur bennak, - ha na dalv netra, - en eskemm, evit ma vo daskoret dezho an aour fin, ar perlezennou hag ar ruzvein soubet e gwad bev ha dasprenus da Zoue, a zo priz ha teñzor da beurbadelezh.

709.- Klevout a rez ? En ur stad all, en ul lec'h all, en ur graz hag en ur gefridi all, e rafes kalz muioc'h a vad. Evit ober ar pezh a rez, n'eus ket ezhomm bezañ donezonet.

Ha neuze, e lavaran dit : e-lec'h ez out bet lakaet e plijez da Zoue... Hag ar soñj a zo o paouez dont d'az spered a zo broudet, sklaer eo, gant an Droukspered.

710.- Nec'het ha doaniet ez out en abeg d'az kedunadurioù a zo yen ha leun a grinder. Paz ez da gomuniañ 'ta, lavar din : en em glask a rez, pe glask Jezuz ? M'en em klaskez, abeg a-walc'h ac'h eus da vezañ trist ; ma klaskez ar C'hrist, avat, evel ma tleez, daoust ha bez' e c'hellez klask un arouez suroc'h eget ar Groaz evit gouzout ec'h eus kejet gantañ.

711.- Lamm adarre... ha pebezh lamm ! Dic'hoanagiñ a ri ? Ne ri ket, en em izelaat a ri hag en em erbediñ ouzh Mari, da vamm, ouzh karantez trugarezus Jezuz. Ur "Miserere", sav da galon ha loc'h en-dro.

712.- Izel-kenañ ez out kouezhet. Krog gant an diazezoù adal aze, en traoñ. Bez uvel. "**Cor contritum et humilitum, Deus, non despicias.**" "Ne zisprizi ket, Doue, ur galon azrec'het hag emizelaet."

713.- Ned ez ket a-enep da Zoue. Dre vreskadurezh e pakez lammoù evel-se. A-du ; hogen ken stank eo

ar barradoù breskadurezh-se ! N'ouzout ket tec'hout diouto, - ma rankin tremen ac'hanout d'un den fall ha diot war un dro, ma ne fell ket dit e sellfen ouzhit evel ouzh un den fall.

714.- Ur youl hep youl eo da hini ; keit ha ne zilezi ket da vat an dro da bec'hiñ. Na glask ket en em douellañ o lavarout din ez out simpl... Laosk ez out, ar pezh n'eo ket an hevelep tra.

715.- Ar strafuilh-se e-barzh da spered, an tentadur-se az kronn, a zo evel ur mouch war zaoulagad da ene.

Emaout en deñvalijenn. Na chom ket aheurtet o vale da-unan. Kerzh da welout da gariad-ene, da holour, hag eñ a raio dit klevout ar c'homzoù-se eus an Arc'hael Rafael da Dobiaz :

"Forti animo esto : in proximo est ut a Deo cureris !" "Kemer kalon : emberr e'z pareo Doue." Bez sentus : diwar da zaoulagad e kouezho ar skantennou, e kouezho ar mouch, ha Doue az kargo a c'hras hag a beoc'h."

716.- N'ouzon ket en em drec'hiñ, a skrivez din. Ha dit e respontan : daoust avat ha klasket ec'h eus arverañ araezioù da dizhout hevelep pal ?

717.- Gwenvidikat gwallreuz ar vuhez ! Paourentez, daeroù, kasoni, direizhded, dizenor. Pep tra a c'helli avat en Hini az kennerzho.

718.- Gouzañv a rez... Ha ne garfes ket klemm. Ne vern ket e klemmfes, - ersav hor paour-kaezh kreud ez eo, - gant ma venno da youl ennout bremañ ha bepred ar pezh a venn Doue.

719.- Na goll goanag nepred. Marv e oa Lazar, ha lizet e gorf : "Jam foetet : **quatruiduanus est enim.**" "Flaeriañ a ra dija ; setu pevar devezh emañ beziet," a lavar Marta da Jezuz.

Ma klevaz awenadur Doue ha m'en heuliez : "**Lazare, veni foras !**" "Lazar, deus er-maez !" e tistroi d'ar Vuhez !

720.- Pegement e koust dit ! Me 'oar. War-raok avat : nikun ne vo gopret, - pebezh gopr avat, - nemet neb en em gann gant kardeded.

721.- Ma horjell da adeilad speredel, ma hañval pep

tra en em gavout er c'houmoul, en em harp, gant fiziañs ur mab, e Jezuz hag e Mari, ar garreg start ha diogel ma tlejes bezañ savet warni adal an deroù.

722.- Hir eo an aprou ar wech-mañ. Marteze, hag hep marteze, n'ec'h eus ket gouzañvet anezhañ mat betek-henn... peogwir e klaskes atav frealzidigezhioù denel. Ha Doue, da Dad, en deus o diframmet diganit betek ar gwrizioù, evit n'ez pije netra er-maez anezhañ e-unan ?

723.- Pep tra a zo ingal dit, emezout. Na glask ket en em douellañ. Bremañ zoken, m'az atersfen e sigur tud pe embregadennoù ma 'c'h eus enouestlet da vuhez enno evit Doue, e respontfes din, gredus, gant an deur a gav unan en un afer a zo dezhañ e-unan.

Pep tra n'eo ket ingal dit, nemet, setu, skuizhañ a c'hellez ; hag ezhomm az po muioc'h a amzer evidout... Un amzer a vo ivez evit da oberoù, peogwir, a-benn ar fin, ez out an araez anezho.

724.- Lavarout a rez din ec'h eus ez askre tan ha dour, rev ha gwrez, c'hoantegezhioù dister ha Doue... Ur piled war-enaou evit Sant Mikael, hag unan all evit an diaoul.

Bez dinec'h. Tra ma venni stourm, ne vo ket daou biled war enaou ez kalon, hogen unan hepken : hini an arc'hael.

725.- An enebour, evel bepred, a ya war-raok e-giz-se gant an eneoù a vez o herzel outañ : pilpouz, c'hwek : arbennoù... Speredel ! Hep lakaat war evezh.

Ha neuze, pa n'eus mui remed ebet, war a hañval, - bez' ez eus atav, - hep en em guzhat, evit ma c'hoarvezo un dic'hoanag, diouzh giz Judaz, hep azrec'h ebet.

726.- Diwar goll ar frealzidigezhioù denel, ez eus manet ennout ur merzad a zigenvez, e-giz pa vijes istribilhet ouzh un neudennig, a-us da c'houloder an islonk du. Ha da c'harmadennoù, da c'halvadennoù d'az sikour, n'eus den ouzh o c'hlevout, war a seblant.

A-walc'h ec'h eus dellezet an estrenvan... Bez uvel ; n'en em glask ket da-unan ; na glask ket da aezamant ; kar ar groaz, - nebeut a dra eo he dougen, - hag an

Aotrou a glevo da bedenn ; ha sioulaat a raio da skiantoù ; ha da galon a yelo war gleizennañ ; ha peoc'h az pezo.

727.- Betek ar bev ! Evel-se eo emañ. Pep tra a ra dit gouzañv ez kalloudezhioù hag ez trivliadoù ; ha pep tra a zo tentadur dit.

Adarre : bez uvel. Gwelout a ri e vi tennet prim eus ar stad-se ; hag ar glac'har a droio da levez ; hag an tentadur, da started diogel.

Hogen, o c'hortoz, kenil da feiz ; en em garg a c'hoanag ; ha gra ingal greadoù a garantez, daoust ma kav dit en o grez a c'henou hepken.

728.- Prestet ez eo deomp hon holl nerzh.

729.- O va Doue : bemdez ez on nebeutoc'h sur ac'hanon, ha muioc'h sur ac'hanout.

730.- Ma n'En dilezez ket, n'az tilezo ket.

731.- Gortoz kement a zo digant Jezuz ; n'ec'h eus netra ; ne dalvezez netra ; ne c'hellez netra. Oberiañ a raio, ma rez an dilez ac'hanout dezhañ.

732.- O Jezuz, ennout e tiskuizhan.

733.- Az pezet fiziañs e Doue bepred : ne goll emgann ebet.

* * * * *

FINVEZIOU DIWEZHAÑ

734.- "Houmañ eo hoc'h eur, ha galloud an deñvalijenn..." Neuze en deus an den pec'her e eur ? Ya, ha Doue e beurbadelezh.

735.- Maz out un abostol, e vo ar marv evidout ur mignon mat a aesay dit an hent.

736.- Daoust ha gwelet ac'h eus, d'un abardaevezh trist a ziskar-amzer an delioù marv o kouezhañ ? Evel-se e kouezh an eneoù bemdez er beurbadelezh : un deiz e vi-te un delienn varv.

737.- Daoust ha n'ec'h eus ket klevet gant pebezh mouezh trist e vez tud ar bed o kunuc'hañ dre maz eo "pep deiz a dremen ur marv bihan."

Hama, me a lavar dit : bez laouen, ene abostol, rak pep deiz a dremen az laka nesoc'h d'ar Vuhez.

738.- Ar 're all', gant ar marv e vezont harzet ha seizet ; ha ni hon-unan, avat, gant ar marv, - gant ar Vuhez, - e vezomp kenilet ha kaset war-raok.

Evito ez eo an Diwezh ; evidomp ez eo an Deroù.
739.- Arabat kaout aon rak ar marv ; degemer-eñ, adal bremañ, a galon vat, pa garo Doue.

Bez dinec'h : dont a ray er mare, el lec'h hag en doare a zereo ar gwellañ, kaset gant an Doue a zo ivez da Dad. Bezet deuet mat hor breur, ar Marv.

740.- Peseurt pezh eus ar Bed a vo diwikereet, ma teuan da vankout, ma varvan ?

741.- Gwelout a reer penaos, ent-danvezel, e vez disgraet e dourennoù flarius kelan an hini karet ? Hama, setu aze ur c'horf kenedus ! Arvest ouzh kement-se, ha dastum diouzh se kement a zo da zastum !

742.- An taolennou-se eus Valdes Leal; gant gagnou cheuc'h, eskibion, marc'heion o vreinañ ez vev... N'eo ket posubl ne vefes ket fromet ganto.

Ha ne vi ket gant ar c'hlemmvan laosket gant an Dug a Gandie : arabat mui din servijout un aotrou a c'hell mervel diganin ?

743.- Komz a rez din eus mervel evel un haroz. Daoust ha ne gredez ket ez eo 'harozekoc'h' mervel hep degas

an evezh warnout, en ur gwele mat, evel ur bourc'hiz, met gant kleñved ar garantez ?

744.- N'eo ket mervel az po-te d'ober maz out un abostol ; kemm ti, ha netra ken.

745.- "Dont a zle da varn ar re vev hag ar re varv," a lavaromp er C'hredo.

Salv ma ned ay ket a-ziwar-wel dit ar varnedigezh-se, hag ar gevionez,... hag ar Barner-se.

746.- Daoust ha ne zev ket e-kreiz da ene ar c'hoant e tiskleirfe Doue, a zo da Dad, ez eo laouen ganit p'en devo d'az parn.

747.- Gwall dechet eo an eneoù 'bedek' da gounañ trugarezusted an Arloz ; hag evel-se en em atizont da heuliañ pelloc'h o dizurzhioù.

Ar wirionez eo ez eo Hor Salver trugarezus, hep muzul ebet, hogen bez' ez eo reizh ivez hep muzul ebet.

Ha bez' ez eus ur varnedigezh, hag Eñ an hini eo a zo ar barner.

748.- Kemer kalon. Daoust ha ne ouzout ket petra a lavar sant Paol da Gorintiz, penaos "pep unan a zegemero e c'hopr e-unan, muzuliet diouzh e labour" ?

749.- Un Ifern ez eus ; diogeliñ se a zo, evidout, a seblant bezañ ur wirionez sklaer evel an deiz. Emaon o vont da lavarout dit en-dro avat : un ifern ez eus.

Gra din heklez, e koulz mat, e pleg skouarn ar c'hama-lad-mañ, pe unan all.

750.- Selaou-me, den beuzet er ouziegezh betek an diskouarn : da skiant ne c'hell ket nac'hañ obererezh an Diaoul. Va Mamm, an Iliz Santel, e-pad kalz bloavezhioù (ha bez' ez eo bepred un devosion brevez da veuliñ) he deus graet d'ar veleion, e-harz an aoter, engervel sant Mikael bemdez "**contra nequitiam et insidias diaboli...**" "a-enep da fallagiezh ha da widreoù an Diaoul."

751.- An neñv : "n'en deus lagad ebet gwelet, na skouarn ebet klevet, ha n'eo ket deuet da spered mab-den kement en deus Doue ragaozet evit ar re En c'har..."

Daoust ha ne vi ket broudet da stourm gant an diskulia-dennoù-se eus an Abostol ?


752.- Atav, evit atav. Komzoù amoet evit ar c'hoant-se

a-berzh an den da badusaat, - da beurbadusaat, -ar pezh a blij dezhañ.

Komzoù gaouiat amañ war an douar, e-lec'h m'en devez pep tra un diwezh.

753.- Kement a zo ac'han a ya d'e zibenn, hep astal.

A-boan ez eo kroget ar blijadur, ha seulabred ez eo echu.



YOUL DOUE

754.- Hemañ ez eo an alc'houez evit digeriñ an nor ha mont tre e Rouantelezh an Neñvoù : "Qui facit voluntatem Patris mei, ipse introbit in regnum coelorum." "Neb a ra youl va Zad, hennezh a zeuio tre e Rouantelezh an Neñvoù."

755.- Diouzh m'en em zougimp, te ha me, evel ma fell da Zoue, - n'henn disoñj ket, - e tibenn kalz traoù meur.

756.- Mein-benerezh ez omp, dezho lusk, santerezh, hag ur vennentez dieub a-grenn.

Bez' ez eo Doue ar bener-mein a gompez ar pezhioù-ker, a gempenn hag a zaskemm ac'hanomp, hervez an ezhomm, a daolioù morzhol ha kizell.

Na glaskomp ket achap dioutañ ; na glaskomp ket diflipout diouzh e youl, rak, n'eus forzh penaos, ne c'hel-
limp ket tec'hout diouzh an taolioù. Muioc'h hag en
aner e c'houzañvfemp, hag e-lec'h bezañ mein kuñv
hag azas ouzh an adeiladerezh, e vefemp ur yoc'h distumm
a grogailh, a vo kalemarc'het d'an dud gant dispriz.

757.- Kenasantiñ ? Kemplegañ ? Klask youl Doue !

758.- An asant daskoret da youl Doue a zegas gantañ,
dre ret, levezet ha peoc'h : gwenvidigezh ar Groaz.
Dre se e weler ez eo kempouezet ar samm a laka war
hor choug.

759.- "Peoc'h, peoc'h," a lavarez din. Bez'ez eo ar peoc'h
evit an dud a youl "vat".

760.- Sed ar boellatadenn a gas d'ar peoc'h, hag a zo
bet graet gant ar Spered Santel evit ar re a glask youl
Doue. "Dominus regit me, et nihil mihi deerit." "An
Aotrou am ren ha netra ne vanko din."

Petra a c'hell trubuilhañ un ene a adlavar a wir galon
ar c'homzoù-se ?

761.- Den rez, emsuj diouzh ur sklavelezh a youl evit
ma n'en devo ket Jezuz da lavarout ez keñver ar pezh
a lavaras, war a gonter, e-keñver re all d'ar Vamm
Tereza : "Tereza, fellet en deus din, met an dud n'eus
ket fellet dezho !"

- 762.- Gread a emunanidigezh gant youl Doue : "Se a fell dit, Aotrou ? Se ivez a fell din-me !"
- 763.- Arabat dit arvariñ : salv ma savo eus da galon d'az tiweuz ur "Fiat !" "Bezet graet !" a gaso da benn da aberzh.
- 764.- Seul nesoc'h emañ an abostol da Zoue, seul vuioc'h en em sant hollvedel : ledanaat a ra ar galon evit briata kement hini ha kement tra a zo; gant ar c'hoant da lezel an hollved e-harz treid Jezuz.
- 765.- Muioc'h e fell din da youl, va Doue, eget ar c'hlod end-eeun, gant ma sevenin ar youl-se, avat (lakaet e c'hellfe bout hevelep diboellegezh !)
- 766.- An emzilez da youl Doue a zo ar Sekred evit bout evurus war an douar. Lavar neuze : "Meus cibus est ut faciam voluntatem ejus." "Va boued ez eo ober youl Doue."
- 767.- An emzilez a zo dres an ampegad a ra diouer dit evit chom hep koll da beoc'h erziwezh.
- 768.- Ar "gaudium cum pace", "al levenez gant ar peoc'h", a zo frouezh asur ha saourus an emzilez.
- 769.- Ar galon sec'h n'eo ket an digasted ez eo : sec'h n'oa ket kalon Jezuz.
- 770.- Nebeutoc'h evurus ne vi ket dre an diouer eget dre ar reveur.
- 771.- Uhelsevel a ra Doue ar re a gefleugn e youl e kement m'en deus o izelaet.
- 772.- En em c'houlenn alies bemdez : "Daoust hag ober a ran er mare-mañ dres pezh a zlean ober ?
- 773.- Jezuz, ar pezh a fell dit a garan-me.
- 774.- Derezioù : soublañ da youl Doue ; kemplegañ da youl Doue ; mennout youl Doue ; karout youl Doue.
- 775.- Arloz, maz eo da youl, gra eus va c'hreud paour danvez ur c'hroazstagad !
- 776.- Na gouezh ket en ur c'helc'h-bac'h. Soñjal a rez : pa vo bet reizhet an dra-mañ-tra evel-se pe evel-henn e vin brokus-kenañ gant va Doue. Daoust avat ha n'emañ ket Jezuz o c'hortoz e ves brokus hep mirout netra, evit ma reizhfe-eñ an traoù gwell eget pezh a faltaziez ?

- Mennad start, heuliad kempoell : bemdez, da bep mare, e klaskin kefleuniañ, kalonek, youl Doue.
- 777.- Da youl dit-te, da varn dit-te : setu pezh a drubuilh ac'hanout.
- 778.- Ur gudenn a eilvedennoù ez eo : soñj, a-raok kregiñ gant un afer bennak : petra a c'hortoz Doue diganin en degouezh-mañ.
Ha gant gras Doue, gra-eñ.

KLOD DOUE

779.- Mat eo reiñ klod da Zoue, hep kemer preveudi ebet (gwreg, bugale, enorioù) diwar ar c'hlod-se a voinimp, klok, a-gevret gantañ er Vuhez.

Ouzhpenn-se, brokus eo : reiñ a ra kant evit unan ; ha kement-se a zo gwir betek er vugale, - kalz a ziouer anezho evit e glod, - miliadoù a vugale diwar o spered o deus ; bugale, evel maz omp-ni re Hon Tad hag a zo en Neñv.

780.- "Deo omnis gloria". Evit Doue an holl glod. Kement-se a zo anzav groñs hon netra. Eñ, Jezuz, a zo pep tra ; ni hon-unan, heptañ, ne dalvezomp netra : netra !

Hor brizh-klod a vefe kement-mañ : ur c'hlod goullo ; bez' e vefe ul laeroñsi disakr ; ar "me" ne zle en em ziskouez e neb lec'h.

781.- "Hepdon, netra ne c'helli ober," en deus lavaret an Aotrou. Ha se en deus lavaret evit ma ne lakjemp ket war hor c'hont ar perzhioù-mat a zo E re. "Sine me, nihil..." "Hepdon, n'out netra !"

782.- Penaos e revegez implijout an elfenn-se o tarzhañ eus meizerezh Doue, a zo da skiant, en un dra all estreget reiñ klod d'az Aotrou ?

783.- Ma n'he dije ket ar vuhez da bal reiñ klod da Zoue, e vefe da zisprizout : gwashoc'h c'hoazh, da euzhiñ outi.

784.- Ro an "holl" glod da Zoue. Gant da youl, harpet gant ar c'hras, gra ar skarz da bep unan eus da oberoù, evit ma ne chomo netra a denno d'al lorc'h denel pe d'an emvourrezezh er "me".

785.- "Deus meus es tu, et confitebor tibi... Deus meus es tu, et exaltabo te." "Va Doue ez out-te, ha da c'hourbonnañ a rin ; va Doue, ha da uhelsevel a rin." Setu ur c'haer a steuñv... evit un abostol kement ha te.

786.- Arabat da gouvranteriezh ebet da stagañ ouzh an douar, paneve ar c'hoant doueek da reiñ klod d'ar C'hris, hag evitañ hag ennañ, d'an Tad ha d'ar Spered Santel.

787.- Dazreizh, dazreizh ! Ken dister buzad a vefe en

drec'hadenn-se a vo chomet didalvez dre maz int aet war-raok evit arbennoù denel !

788.- Glanded ar mennad. Kinnigadennoù al lorc'h ha kefluskoù ar c'hreud a anavezi buan... Stourm a ri, ha gant ar c'hras, e trec'hi.

Hogen an arbennoù az toug d'oberiañ, er greadoù ar muiañ santel, ne seblantont ket dit bezañ sklaer... Ha klevout a rez ur vouezh ez tiabarzh a ra dit gwelout abegoù denel. Soutil evel maz eo ar vouezh-se, en em sil ez ene an tregas, pa vezez o soñjal ne labourez ket evel ma tleez henn ober, dre garantez rik, netra nemet hag hepuiken, evit reiñ da Zoue an holl glod.

Kerkent ha bep gwech, harz ouzh an tregas-se, ha lavar : Aotrou, evidon ne glaskan netra ; pep tra evit da glod, ha dre garantez.

789.- Hep mar ebet ec'h eus glanaet mat da vennad p'ac'h eus lavaret : an dilez a ran eus anaoudegezh-vat ha pep garedon a-berzh mab-den.

*11*11*11*11*11*11*11*11*11*11*11*11*

ABOSTOLATAEREZH

790.- Daoust ha ne c'harmfec'h ket a galon vat d'ar yaouankiz a vez o tifretañ war ho tro : "Diskianted, lezit an traoù-se eus ar bed a vez o skoanañ ar galon hag o vilaat anezhi meur a wech... Lezit kement-se, ha deuit ganeomp-ni etrezek ar garantez.

791.- An trid a vank dit. Aze emañ an abeg ma sachez war da lerc'h ken nebeut a dud : lavaret e vefe n'out ket sur a-grenn eus pezh a c'hounezez o tilezel traoù ar bed evit ar C'hrist.

Dit eo keñveriañ : kant evit unan, hag ar vuhez peurbadel ! Dister e seblant dit bezañ an afer ?

792.- "Duc in altum !" "Sko ar vag d'an donvor..." Kas diwar da dro an digalon, a ra dit bezañ kouart. "Et laxate retia vestra in capturam." "Ha taol da rouedoù da bakañ pesked."

Daoust ha ne welez ket e c'hellez lavarout evel Per : "In nomine tuo, laxabo rete." Jezuz, e'z anv e taolin va roued, e tapin eneoù..."

793.- Tuta danvez ebestel, "ebestela" : bez' ez eo an azon asur eus ar gred.

794.- Hadañ. Dont a reas er-maez an hader. Had a-vriaoù, ene a abostol ! Avel ar c'hras a gaso kuit pelloc'h da c'hreun, ma n'eo ket dellezek anezho an ervenn e-lec'h ma kouezhjont.

Had, ha bez sur ez egino an had hag e taolo frouezh. **795.-** Dre reiñ skouer vat e vez hadet greun mat ; ha dalc'het omp holl, dre ar garitez, da hadañ.

796.- Gwall zister eo da garantez ma ne santez ket ar gred evit silvidigezh an holl eneoù.

Ur paour kaezh karantez eo da hini ; ma n'out ket entanet gant ar c'hoant da lakaat da follentez da begañ er re all.

797.- Gouzout a ran n'eo ket sklaer da hent ; ha ma n'eo ket, ez eo drebenn ma chomez en deñvalijenn o tremen hep heuliañ Jezuz a dost.

798.- Arguzennoù ? Peseurt arguzennoù en dije roet

ar paour-kaezh Ignad d'ar gouizieg Zavier ?

799.- Pezh az laka da estlammiñ a hañval din bezañ poellek, penaos ez eo aet Doue d'az klask pa oas oc'h ober war-dro da vicher.

Evel-se e klaskas ar re gentañ : Per, Andrev, Yann ha Jakez, e-tal o rouedoù ; ha sant Mazhev, azezet ouzh e vurev, gant an dastumerion delloù.

Hag ar pep marzhusañ, Pol, en e aheurtterezh o klask dont a-benn eus gouenn ar gristenion.

800.- Bras eo an eost, ha dister niver ar vederion. "Rogate ergo !" Goulennit enta ma kaso mestr an eost e vicherourion d'e barkeier.

Bez' ez eo ar bedenn an araez efedusañ evit an ebestela.

801.- Bepred e tassion er bed ar garm doueel-se : "An tan on deuet da zegas d'an douar, ha petra 'fell din, nemet e krogfe..." Ha padal e welez : hogos marv ez eo e pep lec'h.

Daoust ha n'ec'h eus ket c'hoant da skignañ an tanguall ?

802.- Karout a rafes degas d'az abostolerezh an den gouizieg-mañ, hag egile, un den pouezus, hag un trede leun a furnez hag a vertuzioù.

Ped, kinnig aberzhoù, klask reiñ dezho da soñjal, dre skouer ha dre gomz. Ne zeuont ket ? Na vez ket nec'het : n'eus ket ezhomm anezho.

Daoust ha krediñ a rez ne oa ket, en amzer Per, tud evezhiek, pouezus, vertuzius, er-maez eus abostolerezh an diskibion gentañ.

803.- Lavaret ez eus bet din ez poa ur c'hras, ur stek evit sachañ an eneoù war da hent.

Trugareka Doue evit an donezon-se : bezañ un araez da glask araezioù.

804.- Skoazell ac'hanon da c'harminñ : Jezuz, eneoù ! Eneoù a ebestel ! Bez' ez int evidout, evit da glod !

Gwelout a ri penaos hor selaouo, a-benn ar fin.

805.- Klev 'ta : du-se, n'eus ket unan pe zaou a intent ac'hanomp mat ?

806.- Lavar se dezhañ, da hennezh, penaos em eus ezhomm eus hanter-kant den a gar Jezuz dreist pep

tra.

807.- Lavarout a rez din diwar-benn an den-se, da vignon, e pleustr ar sakramantoù, e ren ur vuhez 'voull' ha roet d'ar studi. Hogen n'eus krog ebet ennañ : ma komzez dezhañ eus aberzh hag abostolerezh, e teu teñval e benn ha kuit ez a.

N'en em chal ket. N'eo ket un droukverzh evit da c'hred ; bez' ez eo, ger evit ger, an abadenn a zo kontet gant an Aviel : ma fell dit bezañ peurvat, gwerzh kement a zo dit, ha ro anezhañ d'ar beorion ("aberrzh")ha goude-se, deus d'am heul ("abostolerezh").

Hag an den yaouank "abiit tristis", "a yeas kuit, tristi-dik..." Ne c'helle ket klotañ gant ar c'hras.

808.- "Ur c'helou mat : un istrogell nevez evit ti ar re sod."

Ha pep ger a zo sichant e-barzh lizher ar pesketaer.

Karget Doue da rouedoù a efedusted.

809.- Abostolataerezh... Piv n'en deus ket sec'hed da beurbadusaat e abostolerezh ?

810.- An angerz-se da abostolata, a zebr da ziabarrzh, a zo un arouez diogel eus da emzaskoradur da Zoue.

811.- Ha soñj ac'h eus ? Edomp, te ha me, oc'h ober hor pedenn pa oa an noz o serriñ. Tro-dro e kleved hiboud an dour. Hag e sioulded ar gêr gastilhat e teue betek hon divskouarn mouezhioù fraezh a fistilhe e kant yezh, o c'harminñ deomp, ankeniet, n'anavezent ket c'hoazh ar C'hris.

Poket ec'h eus d'ar c'hroazstagan hep muzul, ha goulennet ec'h eus digantañ bezañ abostol an ebestel.

812.- Kompren a ran e karfes kement da vammvro ha da dud, hag ivez, penaos, daoust d'al liammoù-se, e c'hedez, mall warnout, ar mare da dreuziñ douar ha mor, - mont da bell, - peogwir out devet gant c'hoant an eost.

TRAOU DISTER

813.- Gra pep tra dre garantez. Evel-se n'eus ket a draoù dister : pep tra a zo meur. Harozerezh ez eo an dalc'husted en traoù dister, dre garantez.

814.- Un ober dister, graet dre garantez, na pebezh talvoudegezh dezhañ !

815.- Bez' e fell dit e gwirionez bezañ ur sant. Seven an dlead dister da bep mare ; gra ar pezh a zleez ha bez er pezh a rez.

816.- Faziet ec'h eus war da hent, ma tisprizez an traoù dister.

817.- Emañ ar santelezh "vras" e kefleuniadur an dleadoù bihan da bep mare.

818.- An eneoù meur a zalc'h kont, kenañ, eus an traoù bihan.

819.- Peogwir ez out "in pauca fidelis", "feal evit nebeut a dra," - "deus tre e levenez da Aotrou !" Ar re-mañ eo komzoù ar C'hrist. Ha fae a ri bremañ war an traoù dister, ma vez grataet ar c'hlod d'ar re a vir anezho ?

820.- Na varn ket diouzh distervez an derou. Ur wech ez on bet lakaet d'evzhiañ n'eus diforc'h ment ebet etre ar greunenoù a roy louzaouenoù bloaziek hag ar re a zo o vont da genderc'hañ gwezennoù kantvedek.

821.- N'ankounac'ha ket, mar plij, ez eo bet pep tra dister en e c'hanedigezh, abaoe derou an douar. Euzhus eo kement a vez ganet bras, ha mervel a ra.

822.- Lavarout a rez din : p'en em gavo un dro d'ober un dra bennak bras... neuze avat ! Neuze ? Karout a rafes, a-zevri, va lakaat da grediñ e c'helli trec'hiñ er c'hoariadegoù olumpek, hep en em brientiñ bemdez, hep en em c'hourdoniñ ?

823.- Gwelet ec'h eus penaos e savjont an adeilad meurde-zus-mañ ? Ur privaen, ha neuze, unan all. Miliadoù anezho ; hogen unan hag unan. Ha sac'hadoù simant, unan hag unan. Ha mein, hag a ziskouez bezañ nebeut a dra e-keñver tolz ar c'hevanad. Ha barrennoù houarn. Ha micherourion o deus labouret, deiz goude deiz, kement

a eurvezhioù bemdez.

Gwelet ec'h eus penaos o deus batiset an adeilad meurdeuz-mañ ? War-bouez traoù dister !

824.- Gwelet ec'h eus e pebezh traoù dister emañ ar garantez denel ? Hama, en traoù dister ivez emañ ar garantez doueel.

825.- Kendalc'h da gefleuniañ pizh endalc'hoù an eur-mañ. Al labour-se, uvel, undoare, dister, - a zo ur bedenn fetisaet en oberoù hag az laka e-tailh da zegemer gras al labour all, bras, ledan ha don, ma huñvreez ennañ.

826.- Kement a emellomp-ni ennañ, ni, paour-kaezh tudigoù, ar santelezh zoken, a zo steuet gant munudoù dister, a c'hell mont d'ober, - hervez eeunded ar menad, -un tabezerezh splann a harozelezh pe a zispledoni, a vriwerc'hioù pe a bec'hedoù.

Dezrevell a ra an arourgerzi bepred avanturioù ramzel, kej-mesk avat gant perzhioù dister pemdeziek ar gouron. Salv ma roi bepred, - sed an hent reizh, - pouez d'an traoù dister.

827.- Ha poan ac'h eus kemeret da gantverzout ar bern dreistgoñvor a c'hell tizhout 'kalz traoù dister' ?

828.- Kalet eo ar skiant bet prenet ganit ; ne zisoñji ket ar gentel. Da laoskentezioù bras a hiziv, - se a zo sklaer, - a zo kenstur gant da laoskentezioù bihan pemdeziek.

"N'ec'h eus ket gellet" trec'hiñ en traoù bras, peogwir "n'eus ket fellet dit" trec'hiñ en traoù dister.


829.- N'ec'h eus ket gwelet sell Jezuz o lugerniñ pa lez ar paour-kaezh intañvez hec'h aluzen dister en Templ ?

Ro dezhañ, te, ar pezh a c'hellez reiñ : n'emañ ket an dellid en nebeut pe er c'halz, hogen er youl m'henn roez ganti.

830.- Arabat dit bezañ... ur beulke : gwir eo e talc'hez, d'ar muiañ, roll un ibilh-houarn dister en embregerezh meur-se eus ar C'hrist.

Hogen daoust ha bez' e ouzout petra a dalvez un ibilh-houarn ha n'eo ket stardet a-walc'h, pe a zo lammet kuit eus e lec'h ? Diempret e vo pezhioù a vent vrasoc'h,

pe e kouezho ar rodaouegoù en o foull, krignet.
Gwallaozet e vo al labour. Marteze e teuo didalvez an holl wikefre.
Na pebezh tra vras ez eo bezañ un ibilh-houarn bihan.



KADEREZH

831.- Bez' ez out, e-touez da re, ene a abostol, ar maen kouezhet el lenn. Dedaol, gant da skouer ha da gomz, ur c'helc'h kentañ, ha neuze un all, hag un all hag un all... bep gwech ledanoc'h.

Daoust ha kompren a rez bremañ pegen bras eo da gefridi ?

832.- Na pebezh c'hoant ez eus er bed da zont er-maez eus al lec'h m'emeur. Petra a c'hoarvezfe koulskoude, ma fellfe da bep askorn, da bep kigenn e korf an den derc'hel ul lec'h diforc'h diouzh an hini a aparchant outo ?

N'eus abeg all ebet da ziaezamant ar bed. Kendalc'h da chom el lec'h m'emaout, va mab ; alese, na pegement e c'helli labourat evit ma reno, e devoud, Hor Salver.

833.- Renerion ! Gra eus da youl hini ur gour, evit ma raio Doue ac'hanout ur rener. Ne welez ket penaos ez a war-raok ar c'hevredigezhioù gwarguzh milliget ? Nepred n'o deus gounezet ar yoc'hoù. En o mougeviou e stummont tud-diaouled a vez o tifretañ hag o kefluskañ an engroeziou, ouzh o lakaat da bennfollin, evit ober dezho mont war o lerc'h betek islonk an holl zizurzhiou... hag an Ifern. Teurel a reont un had milliget.

Ma fell dit-te... e tougi komz Doue mil ha mil gwech benniget, ha na c'hell ket mankout. Ma vefes brokus... Ma respontez d'ar c'hras, gant da santelidigezh personel, e tizhi hini ar re all : Ren ar C'hrist. "Omnes cum Petro, ad Jesum, per Mariam" : "An holl a-gevret gant Per, betek Jezuz, dre Varia."

834.- Daoust hag ez eus ur follentez vrasoc'h eget hadañ en douar ar gwinizh alaouret a-dro-vriad evit ma vreino ennañ ? Hep ar follentez emrouis-se, ne vefe eost ebet !

Mat, penaos emañ kont gant da emrouisted ?

835.- Lugerniñ evel ur steredenn, c'hoant da sevel ha da lintrañ, entanet, en neñvoù ?

Gwell : chom evel un etev war enaou, kuzhet, o lakaat da dan da gregiñ e kement a dizhez. Hemañ eo da

abostolerezh : evit se emañ war an douar.

836.- Talvezout da uhelgomzer d'an enebour a zo droche-rezh rik ; ha maz eo an enebour un enebour da Zoue, ez eo ur pec'hed bras ; rak-se, war dachenn ar vicher amañ war-draoñ, ne veulin biken gouiziegezh neb a ra ganti, evel gant ur gador-brezeg, evit tagañ an lliz.

837.- Galoupat, galoupat ! Oberiañ, oberiañ ! Terzhienn, follentez ar fiñval. Adeiladoù danvezel marzhus.

Ent-speredel : plenkennoù prenn gwenn, kotoñsennoù livet, kartoñsennoù adlivet... Galoupat, oberiañ. Ha kalz tud da redek : mont ha dont.

Se a zo peogwir e labouront war-wel ar mare hiziv. "Emaint" atav en "amzer-vremañ". Te avat, ret eo dit gwelout an traoù gant daoulagad ar beurbadelezh, "o lakaat er bremañ" an dazont hag an tremened...

Sioulded. Peoc'h. Buhez doues ez tiabarzh. Hep galoupat, hep albac'henn ar c'hemm lec'h, a-ziwar an andred a glot gant da vuhez, e vi evel ur mekanig galloudus a dredan speredel : da begement a dud e roi sklerijenn ha nerzhusted ! Hep koll da greñvder ha da sklerijenn.

838.- N'ec'h eus ket da gaout enebourion ; az pezet mignoned hepken, a-zehou, ma rejont vad dit, pe ma fellas dezho ober ; hag a-gleiz, m'o deus graet gaou ouzhit, pe glasket henn ober.

839.- Na gont ket traoù eus da abostolerezh, nemet evit mad da nesañ e ve.

840.- Bezet diverz ho kendere, evel ma voe hini Jezuz e-pad tregont vloaz.

841.- Jozeb a Arimatea ha Nikodemos a ra gweladenn da Jezuz dre guzh da goulz ar pemdez evel da goulz ar gourdec'h.

Hogen kadarn int oc'h embann o c'harantez evit ar C'hrist dirak ar pennadurezhioù, - **audacter** - gant hardizhegezh da goulz ar gouardiz. Kemer kentel.

842.- Arabat deoc'h bezañ nec'het m'hoc'h 'anavezer' dre hoc'h oberoù. Se a zo frond ar C'hrist. Ouzhpenn-se, o labourat atav evitañ nemetken, en em laouenait dre m'emañ kefleuniet ar c'homzoù-mañ eus ar Skritur : "Gwelent hoc'h oberoù mat ha roent klod d'ho Tad hag

a zo en Neñvoù."

843.- "Non manifeste, sed quasi in occulto..." Ne rae ket gant brud bras, hogen dre guzh ; evel-se ez a Jezuz da "Ouel ar Pabellou".

Evel-se ez aio war hent Emmaüs, gant Kleofaz hag e genseurt. Evel-se En gwelas, dasorc'het, Mari-Madalen.

Hag evel-se "non tamen cognoverunt discipuli quia Jesus est..." Padal ne ouezas ket an diskibion e oa Eñ an hini e oa ; evel-se en em ziskouezas da goulz ar besketadenn vurzhudus a zo kontet deomp gant sant Yann.

Ha muioc'h kuzh c'hoazh, dre garantez evit an denion, emañ en Ostiv.

844.- Sevel adeiladoù meurdeuz ? Batisañ palezioù meurgoustus ? Savent-int ! Batisent-int !

Eneoù ! Buhezekaat an eneoù evit an adeiladoù-se hag evit ar palezioù-se !

Na pebezh annezioù kaer emeur o tanzen deomp !

845.- Na pegement ec'h eus va lakaet da c'hoarzhin, ha pegement ec'h eus va lakaet da brederiañ ivez pa c'h eus lavaret didro ar wirionez anat-mañ :

- Me... atav e sankan an tachoù dre ar beg.

846.- Az pezet soñj : gwell labour a rez dre an diviz-se, e korn an oaled, pe o tiskargañ da galon e-tal unan, eget oc'h ober marvailhoù, - arvest, arvest kement-se ! - en ur vodadeg foran dirak miliadoù a dud.

Padal, ma ranker ober marvailhoù, gra !

847.- Strivoù pep hini ac'hanoc'h, en e bart e-unan, a vez diefed a-benn ar fin. Pa vezit unanet gant karitez ar C'hrist, e viot bamet gant an efeedusted anezho.

848.- Merzher a fell dit bezañ ? Kinnig a rin dit ur verzherrinti a chomo ez krog : bezañ abostol hep lavarout ez out ; bezañ misioner, gant ur mision, ha chom hep ober ur misioner ac'hanout ; bezañ ur gwaz-Doue, ha tremen evit un den eus ar bed, - tremen hep bezañ merzet !

849.- Gra al lu gantañ, paotr ! Lavar dezhañ n'eo ket mui se diouzh ar c'hiz ; ne c'hell ket bezañ gwir, a soñjo unan, e vefe, evelkent, tud a zo o krediñ bepred, aheurtet, ez eo ar 'brimwetur' dre gezeg ar gwellañ araez-

BUHEZ A VUGELIEZH

875.- N'ankounac'ha ket, bugel drochik, he deus ar Garantez graet ac'hanout unan hollc'halloudek.

876.- Bugel, na goll ket ar boaz karantezus a en em deurel e-harz an nevedlog.

877.- Pa ran ac'hanout "bugel mat," na soñj ket e'z kwelan evel unan abaf pe aonik. Ma n'out ket gourel ha... kant-reol, - e-lec'h bezañ un abostol, e vi ar skeudenn-lu anezhañ, hag a raio d'an holl c'hoarzhin.

878.- Bugel mat : lavar se alies bemdez da Jezuz : da garout a ran, da garout, da garout.

879.- Pa vez da reuzeudigezh ouzh da nec'hiñ, arabat dit en em reiñ d'an dristidigezh. Dit tennañ lorc'h diouzh da sempladurezh, rak d'ar vugale e vez aotreet, hep dezho doujañ bezañ lu, drevezañ ar re vras.

880.- Arabat eo d'az faziou ha d'az nammoù dister, d'al lammoù grevus a bakez, zoken, da zispartiañ diouzh Doue. Ar bugel dinerzh, ma vez avizet, a aked chom en e sav e-tal e dad.

881.- Na vez ket nec'het maz a imor ennout pa rez an traoù bihan-se a c'houlenn-Eñ diganit : evit gwir, a-benn ar fin e vousec'hoarzhin.

Daoust ha ne welez ket gant pebezh grad-fall e ro ar bugel eeun d'e dad, a zo ouzh e aprouiñ, ar madig a zalc'he etre e zaouarn ? Hogen, ma ro, trec'h eo bet ar Garantez.

882.- Pa fell dit ober an traoù mat, mat-tre, e c'hoarvez ganit ober anezho gwashoc'h. En em izela dirak Jezuz en ur lavarout dezhañ : "Gwelout a rez penaos e ran fall pep tra ; neuze, ma n'am skoazellez ket kalz, e rin anezho gwashoc'h zoken."

Az pezet truez ouzh da vugel, sell penaos e fell din skrivañ bemdez ur bajenn vras e levr va buhez... Hogen ken dizampart ez on ! Ma ne grog ket an Aotrou em dorn, e-lec'h 'garennoù' mistr e teuy eus va fluenn kozh tort traoù kamm ha distripadennoù, ha na c'hellint kaout ster ebet evit nikun.

Rak-se, diwar vremañ, Jezuz, e skrivimp atav etrezomp hon-daou."

883.- Anzav a ran ez on diakuit. Va c'harantez, na pegen diakuit ez on, pegen diakuit ! Kement, ma ran droug pa glaskan ober allazig, zoken. Laka doareoù va ene da vezañ flour ; ro din, me 'fell din e rofes din, e framm ar c'hourelezh nerzhus-se a zo hini ar vuhez a vugeliezh, ar vlizidigezh-se hag ar garusted-se o devez ar vugale evit mont ouzh o c'herent, pa vez o c'houvrantiezh oc'h en em fennañ eus don o c'halon.

884.- Leun a reuzeudigezh ez out ; sklaeroc'h bemdez e verzez houmañ ez kreiz. Hogen arabat dit bezañ spontet ganti ; gouzout mat a ra-Eñ ne c'hellez ket reiñ muioc'h a frouezh.

Al lammoù a bakez en desped dit, lammoù ur bugel, a ray da Zoue, da Dad, teurel muioc'h evezh ha d'az mamm, Mari, chom hep dizerc'hel da zorn eus he dorn karantezus. Tenn mad eus kement-se, ha pa'z tastumo an Aotrou bemdez diwar al leur, briata-Eñ gant da holl nerzh ha laka da benn reuzeudik war e askre digor, evit ma'z lakay talmadennoù E galon hegarat-meurbet da sodiñ da vat.

885.- Ur flemmadenn, hag unan all, hag unan all. Gouzañv anezho, paotr ! Daoust ha ne welez ket ez out ken dister ma ne c'hellez kinnig en da vuhez, en da hentig, nemet ar c'hroazioù bihan-se.

Ouzhpenn-se, taol evezh : ur groaz war-c'horre unan all, ur flemmadenn, hag unan all, pebezh menez bras !

A-benn ar fin, bugel, ec'h eus gouezet ober un dra bras-meurbet : karout !

886.- Pa vez un ene bugel o tegas dirak an Aotrou ar c'hoant en devez ma ve damantet dezhañ, e tle bezañ sur e vo kefleuniet prim ar c'hoant-se. Jezuz a ziframmo diouzh an ene-se ar samm kailharek a zo ouzh e strobañ diwar-bouez e reuzeudigezhioù tremenet ; tennañ a raio kuit ar pouez marv a chom diwar an holl zic'hlanderioù a ra dezhañ menel peg ouzh al leur ; teurel a raio pell diouzh ar bugel holl lastr douarel e galon, ken na vo dibradet betek an Doue Meurdezus ha ma vo teuzet

en tantad bev a garantez ez eo-Eñ E-unan.
887.- An digalon-se a c'hoarvez diwar da vankoù a emro-
iisted, diwar da zrouklammoù, da giladennoù - da welout
hepken, marteze, - a ro dit alies ar soñj ec'h eus ankouna-
c'haet un dra bennak a dalvoudegezh vras (da santelidi-
gezh).

N'en em chal ket ; sav betek ar vuhez dreistnatur
an doare avizet a vez gant ar vugale didro evit diskoulmañ
ur gudenn a seurt-se.

Torret o deus, dre sempladurezh hogozik bepred,
un draezenn brizet-meurbet gant o zad ; kompren a
reont an dra-se ; marteze e leñvont ; met mont a reont
da glask frealz d'o glac'har gant mestr an draezenn
wastet dre maz int bet amparfal ; ha disoñjal a ra an
tad an dalvoudegezh-se eus an draezenn distrujet, pegen
bras bennak e ve ; ha leun a denerded, n'eo ket mazaviñ
hepken a ra, hogen frealziñ ha kalonekaat ar gouspin
bihan. Kemer kentel gant se.

888.- Bezet gourel ho pedenn ; bezañ bugel n'eo ket
treiñ d'ur vaouezig.

889.- Da neb a gar Jezuz, ar bedenn, gant krinder zoken,
a zo ar balzam a laka fin bepred d'e boanioù ; mont a
ra d'ar bedenn gant ar c'hoantegezh en devez ar bugel
evit al limigoù, goude bezañ euvret un evaj c'hwerv.

890.- Dievezh e vezez o pediñ : laka da aked da chom
hep bezañ ; met n'en em chal ket ma chomez dievezh
daoust da bep tra.

Ne welez ket penaos, er vuhez naturel, ar vugale
ar furañ a bled gant kement a zo war o zro, oc'h en
em ziduiñ ganto, hep teurel reiz alies ouzh evezhiadennoù
o zad. Kement-se ne dalvez ket e ra diouer dezho ar
garantez nag an doujañs ; kement-se a zo, hepken, reuzeu-
digezh ha gwanded, a zo piaouel d'ar vugale.

Neuze, sell : bez' ez out ur bugel dirak Doue.
891.- Pa vezez oc'h ober ar bedenn a galon, kas larkoc'h
a-ziwar da dro, ar mennozioù digoulz, e-giz pa vefe
ac'hanout ur gward-polis o reizhañ ar monedone. Evel-se
emañ ez kerz ar youl nerzhus a glot ennout gant da
vuhez a vugel. Harz a-wechoù ar soñjezon-se evit erbediñ

tudennoù a zo stag ouzh an eñvorad digoulz-se.

Ha neuze, war-raok ! Ken na sono an eur. Pa seblanto ur bedenn a seurt-se bezañ didalvez, en em laouena ha kred ec'h eus gouezet plijout da Jezuz.

892.- Nag un dra vat bezañ ur bugel ! Pa vezer o c'houlenn un dreistro, ez eus ezhomm degas ur roll eus an dellidoù war un dro gant ar goulenn e-unan.

Paz eo un avrelod an hini eo a vez o klask kaout un dra bennak, - evel ma n'o deus ar vugale dellid ebet, - ez eo a-walc'h dezhañ lavarout : me a zo mab da heñ-mañ-heñ.

A, Aotrou ! Lavar se dezhañ gant da holl ene : me a zo... mab da Zoue !

893.- Derc'hel ganti betek ar penn. Ur bugel a c'halv e toull an nor, ur wech, div wech, meur a wech... ha kreñv, ha pell, gant divergontiz. Hag an hini a zeu da zigeriñ, feuket, a vez digounnaret o welout pegen didro eo ar bugel torr-penn. Bezet heñvel an traoù etrezout ha Doue.

894.- Daoust hag evezhiet ec'h eus penaos e vez ar vugale o trugarekaat ? Gra evelto, en ur lavarout, e-giz ma reont : "A, Jezuz, dirak ar berzh-mat hag an drouk-verzh, na mat ez out, na mat !"

Ar frazenn-mañ, santet mat, a zo hent ar vugeliezh, a gaso ac'hanout d'ar peoc'h, gant ur muzul bennak a c'hoarzhoù hag a leñvoù moarvat, hep muzul ebet er garantez avat.

895.- Sammet eo da gorf gant al labour, ha ne c'hellez ket ober ar bedenn-a-galon. Chom a rez atav dirak da Dad. Ma ne gomzez ket outañ, sell outañ bep an amzer, evel un avrelodig... ha mousc'hoarzhin a raio ouzhit.

896.- Lakaomp : a-greiz dit ober da c'hread a drugaregezh goude keduniñ, - ar c'homzoù a zeu da gentañ d'az tiweuz, hep ma c'hellfes herzel ouzh kement-se, a zo komzoù ur goulenn : "Jezuz, ro din an dra-se.. Jezuz, an ene-se... an embregadenn-mañ ?"

N'en em chal ket ha na zalc'h ket warnout. Ne welez ket penaos, pa vez mat an Tad, didro hag hardizh ar

bugel, e laka ar gouspin e zaouarn e-barzh chakodoù e dad, o klask madigoù, a-raok reiñ dezhañ ur pok a zonemat.

Neuze 'ta...

897.- Hor youl, gant ar c'hras, a zo hollc'halloudek dirak Doue. Evel-se, ma lavaromp da Jezuz gant ur youl efedus, o welout pegement e vez ofañset an Aotrou, - lakaomp, pa vezer o vont gant an tram : "Va Doue, karout a rafen ober kement a c'hreadoù a garantez hag a zic'haou, ha ma ra a droioù pep rod eus ar c'harbed-mañ..." - d'ar mare-se dres, hon eus, e gwirionez, e garet hag e zic'haouet, hervez hor c'hoant.

Ar vibiliezh-se ne zeu ket er-maez eus ar vibiliezh speredel ; bez' ez eo an emziviz peurbadel etre ar c'hrouadur dinoaz hag an tad a zo pitilh gant e vab.

- Pegement e karez ac'hanon ? Lavar din." Hag an avrelod a zistilh : kalz milionoù a wechoù !

898.- Ma'c'h eus ur vuhez a vugeliezh, peogwir ez out ur c'hrouadur, e tleez bezañ lipous ent-speredel.

Az pezet soñj, evel ar re eus da oad, eus an traoù mat a zo miret gant da Vamm.

Ha kement-se, meur a wech e-pad an deiz. Un afer a eilvedennoù ez eo... Maria... Jezuz... An nevedlog... ar gomunion... ar garantez... ar boan... eneoù benniget ar Purgator... ar re a stourm : ar Pab, ar veleion, ar fideled, da ene, eneoù da re... An aelez virerion... ar bec'herion.

899.- Pegement e koust dit an emwanadenn dister-se. Stourm a rez. Evel pa vefe lavaret dit : perak e rankez bezañ feal d'ur steuñv-buhez, d'ur roll-eurioù. Sell ! Daoust ha gwelet ec'h eus pegen aes e vez touellet an avrelodet ? Ne fell ket dezho kemer al louzoù c'hwerv, hogen, dal, e lavarer dezho : al loiadig-mañ evit tadig, hag houmañ all evit da vamm-gozh ; hag evel-se, ken n'o devez euvret ar c'hementad penn-da-benn.

Kement-all evidout : padout ur c'hardeurvezh muioc'h gant ar gouriz-penediñ evit eneoù ar purgator ; pemp munutenn evit da gerent ; pemp munutenn all evit da vreudeur en abostolerezh... Ken na vo kefleuniet an

amzer a zo merket war da euriaoueg.

Graet en doare-se, da emwanerezh, na pebezh talvoud-
egezh en deus !

900.- N'out ket da-unan. Gouzañv an trubuilh gant sederni.
Ne santez ket ez torn, paour-kaezh bugel, dorn da Vamm,
moarvat. Hogen daoust ha gwelet ec'h eus mammoù
an douar, astennet o divrec'h, o heuliañ o re vihan, pa
gredont, o krenañ, ober o c'hammedoù kentañ hep sikour
den ebet ?

N'out ket da-unan-penn. Maria a zo e-tal dit.

901.- Jezuz, biken ne baein, ha pa varvfen dre garantez,
ar c'hras ac'h eus pourchaset din dre ober ac'hanon unan
bihan.

~~*~*~*~*~*~*~*~*

GALVEDIGEZH

902.- Perak e chomez hep en em reiñ da Zoue ur wech
evit mat, e gwirionez, adal bremañ.

903.- M'emañ sklaer an hent dirazout, heuilh anezhañ.
Perak ne zistaolez ket al laoskentez a zalc'h ac'hanout ?

904.- "It, prezegit an Aviel... Chom a rin ganeoc'h..."
Setu pezh en deus lavaret Jezuz, ha dit henn lavaran.

905.- Entan ar vrogarourion, a zo da veuliñ, a zegas
kalz gwazed da ober eus o buhez "ur servij", "ur vilou-
riezh !"

Na disoñj ket, mar plij, en deus ar C'hrist, ivez, e
'vilouriezhoù', ha tud dilennet evit e servij.

906.- "Et regni ejus non erit finis..." "Ha d'e rouantelezh
ne vo fin ebet..."

Ne ro ket dit levezet labourat evit ur seurt rouante-
lezh ?

907.- "Nesciebatis quia in his quae Patris mei sunt oportet
me esse." "Ne ouiec'h ket ez eo ret din bezañ war-dro
traoù va Zad ?"

Setu respont Jezuz krennard d'ar c'houlz-se. Ur respont
avat d'ur vamm evel e Vamm, hag a zo war E glask
abaoe tri devezh, o krediñ e oa kollet. Ur respont hag
a zo klokaet gant ar c'homzoù-mañ eus ar C'hrist, bet
treuzskrivet gant sant Mark : "Neb a gar e dad pe e
vamm muioc'h egedon, n'eo ket dellezek ac'hanon !"

908.- Dreist ez a da dro-spered didro pa varnez talvoude-
gezh an embregadennoù abostolel, diouzh a weler diouto.
Diouzh ar merk-barn-se, e rankfes kavout gwell ur
sac'had glaou eget un dornad diamantoù.

909.- Bremañ ma'c'h eus en em ouestlet, goulenn digantañ
ur vuhez nevez, ur "siell" evit kadarnaat dilested da
gefridi a waz Doue.

910.- An dra-se, da uhelvennad, da c'halvedigezh, a
zo... un amodaj, hag ar re all, da vignoned, da vreudeur,
a zo tud amoet.

Daoust ha n'ec'h eus ket klevet ar garm-se ez kreiz
ur wech-bennak ? - Respont, krenn-ha-krak, e trugare-

kaez Doue evit an enor a aparchantiñ ouzh an "ti-ar-resod"-se !

911.- Skrivañ a rez din : "Ar c'hoant ken bras-se hon eus holl e 'kerzhfe' hag en em ledfe 'an dra-se' a zo, war a seblant, o vont da dreiñ d'an dibasianted. Pegoulz e tarzho 'an-dra-se', peur e strinko... Pegoulz e welimp ar bed en hor c'herz ?

Hag ez ouzhpennet : "Ar c'hoant ne vo ket didalvez m'en eztaolomp war-bouez gwaskañ war an Aotrou, war-bouez e dregasiñ : dre an hent-se hor bo gounezet amzer, ur spont ! "

912.- Displegañ a rez din da boan pa verzez, ha te rediet da chom vak, an trevell a chom da ober. Ne gav ket da galon he muzul er voull-douar, ha ret eo dit terriñ da c'hoant ... gant ul labour burev disterik-kenañ.

Hogen evit pe vare e viromp ar "Fiat" ?

913.- N'az pezet douetañs ebet : bez' ez eo da c'halvedigezh ar c'hras kaerañ en deus gellet an Aotrou ober dit.

Trugareka-Eñ evit se.

914.- Pebezh doan a ro ar steudadoù a dud diniver, re ar c'hrec'h, re ar c'hreiz, re an diaz, hep uhelvennad ! Reiñ a reont da soñjal ne ouzont ket o deus un ene. Bez' ez int bandennadoù, engroezioù, tropelladoù.

Jezuz, ni, eus hon tu, gant skoazell da garantez trugarekus, a droio ar bandennadoù e bezenoù, an engroezioù e luoaz, hag eus an tropelladoù e tennimp kuit, glanaet, kement hini na venno ket bezañ hudur.

915.- Oberoù Doue ned int na loc'henn na lañsenn.

916.- Aotrou, hol laka da vezañ foll, diouzh ar follentez pegus-se a zedenno kalz d'az abostolerezh.

917.- "Nonne cor nostrum ardens erat in nobis dum loqueretur in via." "Daoust hag hor c'halonou ne oant ket o leskiñ en hor c'hreiz tra m'edo o komz ganeomp war an hent ?"

Ar c'homzoù-se eus diskibion Emmaus a zlefe tarzhañ drezo o-unan, - maz out un abostol, - diwar ziweuz da genseurted vicher, goude bezañ kejet ganit war hent ar vuhez.

918.- Tennañ a ra an abostolerezh da reiñ pep tra, hep klask netra douarel.

919.- O vennout e ves un abostol, en deus an Aotrou degaset dit da goun, evit n'henn disoñji biken, ez out ur "mab da Zoue".

920.- Pep hini ac'hanoc'h a zle akediñ bezañ un abostol evit ebestel all.

921.- Holen ez out, ene a abostol. "Bonum est sal." "Un dra vat eo an hollen," a lenner en Aviel Santel. "Si autem sal evanuerit..." "Ma koll an hollen e vlaz, avat..." ne dalv netra, nag evit an douar, nag evit an teil ; taolet e vez kuit, evel un dra didalvez.

Holen ez out, ene a abostol... Ma kollez da vlaz avat...
922.- Va mab : ma karez da abostolerezh, bez sur e karez Doue.

923.- En deiz ma 'santi' mat da abostolerezh, e vo an abostolerezh-se evidout un 'hobregon' e-lec'h ma kollo o lañs holl arsailhoù da enebourion a-ziwar an douar pe an Ifern.

924.- Goulenn dalc'hmat ar beurzalc'hegezh evidout hag evit da geneiled a abostolerezh, rak hon nañv, an Droukspered, a oar re vat ez oc'h e enebourion vras ; hag unan o pakañ lamm en ho renkoù, na pegement e vourr e kement-se.

925.- Evel maz aked al leaned c'hredus gouzout pe vod e veve ar re gentañ eus o urzh pe o breuriez a-benn kempenn o c'hundu diouzh o hini, aked anavezout ha drevezañ buhez diskibion Jezuz, a ambrougas Per, Pol ha Yann, hag a voe, hogozik, an testoù eus marv ha dasorc'hidigezh an Aotrou.

926.- Va aters a rez ha respont a ran dit : Emañ da eswelded er bevañ difistur el lec'h, er garg, hag er renk m'en deus Doue da lakaet dre hanterouriezh ar re o deus beli.

927.- Pedit an eil re evit ar re all : hemañ a zo o plegañ ? ...egile, kement-all ? Kendalc'hit da bediñ hep koll ar peoc'h. Kuit ez eont ? Da goll ez eont ? An Aotrou en deus ho kontet en e dragouezelezh.

928.- Ar gwir a zo ganit. Adal lein ar menez, a skrivez

din, e kement a c'heller merzout, war-hed kilometradoù ha kilometradoù tro-dro ne spurmanter ket an disterañ plaenenn ; en tu all da bep menez, unan all... Ma seblant ar gweledva dont da vezañ flouroc'h en un andred bennak, en em ziskouez un tarroz hag a oa chomet kuzh, pa vez steuziet an nivlenn... Evel-se eo, evel-se e tle bezañ dremmwel da abostolerezh : rekis eo treuziñ ar bed ; hogen n'eus ket a hentoù graet evidoc'h hoc'h-unan : graet e vint ganeoc'h, diouzh lusk ho kammedoù.



AN ABOSTOL

929.- Ar groaz war da vruched ? Hogen ar groaz war da zivskoaz, ar groaz e-barzh da greud, ar groaz e-barzh da vez. Evel-se e vevi evit ar C'hrist ; evel-se e vi un abostol.

930.- Ene a abostol : te, da gentañ ! Lavaret en deus an Aotrou dre sant Mazhe : "Kalz a lavarado da zeiz ar Varn : Aotrou, Aotrou, daoust ha n'hon eus ket diouganet e'z anv, ha kaset kuit, dre'z anv, an diaouled, ha graet kalz burzhudoù ? Neuze avat e respontin dezho : biskoazh n'em eus hoc'h anavezet evit va re ; it diwar va zro, oberourion ar fallagriezh !

Ne servij ket, eme sant Paol, e teufe din bezañ distaolet goude bezañ prezeget d'ar re all.

931.- Ijin milourel sant Ignad a ziskouez deomp an Droukspered oc'h ober ur galv eus an holl ziaouled diniver, hag o tasparzhañ anezho dre Stadoù, rannvroioù, kêrioù ha kêriadennoù, goude bezañ graet dezho ur 'sarmon' evit o annoug da deurel an holl en ereoù hag er chadennoù, hep lezel hini ebet dinask en e bart e-unan.

Lavaret ec'h eus din e felle dit bezañ ur rener, hogen da betra e servij ur rener chadennet ?

932.- Sell : an ebestel gant o holl gaezhnezioù anat, na c'heller ket nac'hañ, a oa eeun, didro... treuzwelus.

Te ivez a zo e dalc'h kaezhnezioù, na c'heller ket nac'hañ... Salv na vanko dit an eeuned !

933.- Komz a reer eus un ene a oa o lavarout d'an Aotrou en e bedenn : "Jezuz, me az kar !" hag a glevas ar respont-mañ eus an neñv : "An ober eo a zo karantez, ha n'eo ket an arbenn mat eo a zo."

Sofij ervat hag-eñ, marteze a-walc'h, ne zellezez ket ar rebech kouvrant-se eus Jezuz.

934.- Bez' ez eo ar gred albac'henn douevel an abostol ; an albac'henn eo a hetan dit, hag a zalc'h an azonou-mañ : hiraezh da zaremprediñ ar Mestr, preder diastal gant an eneoù, dalc'husted ha na vez horjellet gant netra.

935.- Na chom ket moredet war da gurunenn.

Maz eo an emzalc'h-se - da gomz evel ma ra an dud, - un emzalc'h diaes ha digadarn, petra a c'hoarvezo pa n'eo ket dit, evel en degouezh-mañ, ar gurunenn, - da Zoue, ne lavaran ket.

936.- D'an abostolerezh ez ez evit en em sujañ, en em gas da netra ; ha n'eo ket evit rediañ ar re all da zegemer da varnadenn bersonel.

937.- Na vezit ket gwazed pe vaouezed a obererezh lark, hag a bedenn verr.

938.- Diwall da vevañ e seurt doare ma ouezi, a youl gaer, dioueriñ an hoal-vat hag ar gletadurezh ma kavfes abeg enno e doare-bevañ ur gwaz-Doue all.

Sell penaos ez out ar c'hreunenn winizh ma komz an Aviel anezhi : ma n'en em zouarez ket, ha ma ne varvez ket, ne zougi ket a frouezh.

939.- Bezit gwazed ha maouezed eus ar bed ; na vezit ket avat gwazed ha maouezed bedel.

940.- Na disoñj ket ez eo an unaniezh un azon a vuhez : dizunaniezh a zo lizadurezh, un arouez sur o tiskouez ez eus ur c'helan.

941.- Sentiñ... un hent asur. Sentiñ ouzh an holour, hep sellout : un hent a santelezh. Sentiñ evit da abostolerezh, an hent nemetañ ; rak en un oberenn diwar Doue, ar spered a zle bzeañ : sentiñ, pe mont kuit.

942.- Dalc'h soñj bepred, va mab, n'out ket hepken un ene en em unan gant eneoù mat evit ober un dra bennak mat.

Kalz ez eo... Nebeut avat ez eo ivez.

Bez' ez out un abostol a gas da benn ur gefridi gour-c'hemennet dit gant ar C'hrist.

943.- Salv na vo ket tu da leuskel ar bomm-lavar-mañ a oa distaget gant unan bennak, abeg a-walc'h dezhañ : "Dreist va fenn, betek aze, em eus gant an dud a-zoare !" Hag e stoke e zorn ouzh e dal.

944.- Bez' e tleez degas d'ar re all ar garantez evit Doue hag ar gred evit an eneoù, evit maz entano ar re-mañ d'o zro kalz muioc'h a eneoù, da bep unan eus ar re ziwezhañ-mañ entanañ o c'henseurted war o micher.

Nag a wrezenoù speredel ac'h eus ezhomm ! Ha

pebezh kiriegezh, mar yenaez ! Ha, - ne fell ket din soñjal, pebezh torfed, ha pegen hirisus, m'az pije roet gwallskouer !

945.- Gwallderconi ez eo klevout komz Doue gant ur spered-burutellañ.

946.- Ma karit en em ouestlañ da Zoue er bed, kentoc'h eget bezañ gouizieion (ar merc'hed n'o deus ket ezhomm bezañ gouziek ; a-walc'h eo e vefent avizet), e rankot bezañ speredel, unanet muioc'h ouzh an Aotrou Doue dre ar bedenn ; bez' e rankot dougen ur vantell diwelus a c'holoio ho holl skiantoù ha galloudezhioù, ha pep unan anezho : pediñ, pediñ ha pediñ atav ; dic'haou, dic'haou ha dic'haou atav.

947.- Saouzanet e oas dre ma kaven mat an diouer-se a undoare en abostolerezh-se, e-lec'h ma labourez-te. Ha lavarout a ris :

"Unaniezh ha liesseurtiezh. Bez' e tleit bezañ ken liesseurt ha maz eo liesdoare sent ar baradoz ; pep hini anezho en deus e verkoù arbennik a-grenn ; ha kerkoulz all e tleit bezañ kenstumm an eil ouzh egile evel ar Sent, ha na vijent ket sent ma n'en dije ket pep hini anezho en em gevelebet ouzh ar C'hrist.

948.- Te, mab karet-dreist da Zoue, dav eo dit santout ha buhezañ ar gedvreuregezh, hep brizh-kenevinderioù avat.

949.- Hiraezhiñ da zerc'hel ur garg en embregadennoù a abostolerezh a zo un dra didalvez er vuhez-mañ ; hag evit ar vuhez all ez eo un arvar. Ma fell da Zoue e vi galvet ; ha neuze e ranki asantiñ. Hogen na disoñj ket e c'hellez hag e tleez en em santelaat en holl saviadoù ; rak evit se eo ez out deuet.

950.- Ma soñjez, ha te o labourat evit ar C'hrist, ez eo ar c'hargoù estreget sammou, neuze, nag a c'hwervoni a zo ouzh da c'hortoz !

951.- En em gavout e penn un oberenn a abostolerezh ez eo bezañ darev da c'houzañv pep tra a-berzh pep hini gant ur garitez divuzul.

952.- El labour abostolel n'eus tu ebet da bardoniñ nag an disentidigezh, nag ar c'hoari dre zindan. Dalc'h soñj

Nag un druez m'az po graet, a-benn ar fin, da abostolerezh ha n'eo ket E abostolerezh.

968.- Laouen e'z pennigan, mab, evit ar feiz-se ez mision a abostol a reas dit skrivañ :

"N'az pezet douetañs ebet ; diogel eo an dazont, marteze en desped deomp. Hogen ezhomm ez eus e vemp unan hepken gant ar Penn : "ut unum omnes sint", dre ar bedenn hag an aberzh.

969.- Ar re a bed hag a c'houzañv en ur lezel an ober d'ar re all, ne skedont ket amañ ; na pegement avat e lugerno o c'hurunenn e rouantelezh ar vuhez. Bezet benniget abostolerezh ar boan !

970.- Gwir eo em eus graet eus da abostolerezh "ur mision didrouz ha gweredus." Ha n'eus netra da reizhañ.

971.- Ken mat e hañval din bezañ an devosion-se evit ar gristenion gentañ ma rin va seizh gwellañ evit he herouezañ, evit ma pleustri, evelto, bemdez gant muioc'h a entan, an abostolerezh efedus-se a avizded hag a emziskulierezh.

972.- Pa lakai da dalvezout an abostolerezh-se a avizded hag a emziskulierezh, na lavar ket din ne ouzout ket petra lavarout. Rak, gant ar Salm e lavar din dit : "**Dominus dabit verbum evangelizantibus virtute multa...**" "Lakaat a ra an Aotrou e genou e ebet komzoù leun a efedus-ted."

973.- Ar c'homzoù-se silet, e ken reizh poent, e skouarn ar mignon a zo o horjellañ ; an emziviz-se gouest da ziskouez an hent, ec'h eus gouezet reiñ tro dezhañ e koulz vat ; an ali-se e par ar vicher, a ray dezhañ gwellaat e labour er Skol-veur ; hag an diavizded-se avizet a ra dit damvenegiñ dremmweliadoù a emroüsted diemouezet outo : kement-se a zo "abostolerezh a emziskulierezh".

974.- "Abostolerezh ar pred" a zo herberc'herezh kozh an ezhec'h-veur gant kalon domm gedvreurek Vetania ; pa vez pleustret, e vefe kredet emañ Jezuz o kadoriañ evel e ti Lazar.

975.- Mall bras eo adkristenañ ar gouelioù hag ar c'hustumoù poblek. Mall bras eo diwall n'en em gavfe an arvestoù

foran en dazeilad-mañ : pe bezañ milis, pe bezañ pagan. Ped an Aotrou evit m'en em gavo unan o labourat en trevell mallus-mañ a c'hellfemp ober anezhañ "abostolerezh an amzer vak".

976.- E sigur an "abostolerezh dre lizher" e rez din ur veulbrezegenn vat. Skrivañ a rez : "N'ouzont ket penaos duañ ar paper en ur gomz eus traoù a c'hell bezañ talvoudus d'an hini a resevo ar valad. Pa grogan em pluenn e lavaran d'am Ael mirer ez eo a-benn ma servijo d'un dra bennak eo e skrivan ; ha bout ma ne lavarfen nemet abuzetez, den ebet ne c'hell lemel diganin, na digant egile, an amzer am eus tremenet o c'houlenn ar pezh a ouzon ez eo ar muiañ rekis d'an ene m'emañ daveet va lizher dezhañ."

977.- "Degouezhout a reas al lizher-se ganin p'edon en ur prantad a dristidigezh hep abeg ebet, ha broudet e voen gentañ, da sabatoù, o c'houzout penaos e labourer ar re all." Unan all a skriv din : "Sikouret on bet gant ho lizhiri ha gant ar c'heleier diwar-benn va breudeur, evel gant un huñvre wenvidik dreist da werc'helezh kement a stokomp outañ." Hag unan all : "Pebezh levezeg degemer al lizhiri-se ha gouzout ez on mignon ar vignoned-se !" Hag unan all, ha mil a re all : "Resevet em eus ul lizher digant X., ha mezhañ am eus o soñjal em diouer a spered en o c'heñver-int." Daoust ha n'eo ket efedus an abostolerezh dre lizher ?

978.- "**Venite post me et faciam vos fieri piscatores hominum.**" "Deuit war va lerc'h hag e rin deoc'h bezañ pesketourion dud." N'eo ket hep mister ez implij an Aotrou ar gerioù-se : an dud, evel ar pesked, ret eo o fakañ dre ar penn.

Pebezh diazez avielek en deus "abostolerezh ar preder" !

979.- Diouzh natur mab-den ez eo tremen da zister, dres, ar pezh na goust netra. Evit an abeg-se ez alian dit "abostolerezh an na reiñ".

Na chom morse hep diarc'hañ ar pezh a zo kevion o plediñ gant da vicher, maz eo da vicher benveg da abostolerezh.

980.- Daoust ha n'hon eus ket aotre da gas er beajoù ur vaouez bennak, ur c'hoar e Jezuz-Krist, evit m'hor skoro, - evel ma rae an ebestel all, hag ar re a gar an Aotrou, ha Per end-eeun ?

Se a lavar sant Paol en e lizher kentañ da Gorintiz : n'eus ket tu d'ober fae war genlabour ar merc'hed en abostolerezh.

981.- "Ur pennad amzer goude," a lenner e-barzh eizhvet pennad Aviel Sant Lukaz, "ez ae Jezuz dre gêrioù ha bourc'hadennoù, o prezeg hag oc'h embann Rouantelezh Doue, war e dro an daouzek hag un nebeut maouezed a oa bet dieubet eus an drouksperedoù ha pareet eus kleñvedoù liesseurt, Maria, lezanvet Madalen, m'en doa kaset seizh diaoul diouti, Chann, maouez Kouza, melestrour ar roue Herodez, Suzanna, ha re all a harpe anezhañ gant o madoù."

Eilskrivañ a ran. Ha pediñ a ran Doue, - kenkas e lennfe ur vaouez pezh a skrivan, evit ma vefe karget he c'halon gant un avi santel, leun a efedusted.

982.- Startoc'h eo ar vaouez ha fealoc'h da goulz ar boan : Maria Madalen, ha Maria Kleofas, ha Salome.

Gant ur bagad maouezed kadarn evel ar re-se, unanet da vat gant ar Werc'hez en he foan, na pebezh labour a vefe graet evit an eneoù dre ar bed !

DERC'HEL BETEK AR PENN

983.- Kregiñ a zo e galloud pep hini ; derc'hel avat e galloud ar sent.

Arabat eo e ve da beurzalc'hegezh un heuliad dall d'az lañs kentañ, frouezh an dilusk : bezet-hi unan brederiek.

984.- Lavar dezhañ : "Ecce ego quia vocasti me." "Amañ emañ, peogwir ec'h eus va galvet."

985.- Aet e oas diwar an hent, ha ne zistroes ket, peogwir e roe se mezh dit.

Poellekoc'h e vefe e rofe mezh dit tremen hep kemer an hent mat en-dro.

986.- "Ar wirionez eo n'eo ket dav bout un haroz", a lavares din e kuzulig, "evit gouzout, hep ardoù nag orbi-doù, en em zigenvezañ kement ha ma ranker hervez an degouezh, ha derc'hel krog." Hag ez ouzhpennet : "Keit ha ma virin ar reolennoù ac'h eus roet din, ne vin ket chalet gant an itrikoù hag ar marvailhoù tro-dro ; ar pezh a rofe aon din e vefe doujañ seurt disterveziou." Dispar !

987.- Kenil ha mir an uhelvennad-se hael-meurbet a zo o paouez kellidañ ez kreiz ; soñj e vez kalz bleunioù o tiglorañ en nevez-amzer, hag ez eo dister niver ar re a daol frouezh.

988.- Bez' ez eo an digalon enebour d'ar beurzalc'hegezh ; ma ne stourmez ket ouzh an digalon, e kouezhi ez wazhwelouriezh, da gentañ, hag er glouarded, da c'houde. Bez gwellwelour enta !

989.- Lavaromp krenn : goude kement a "Ar groaz, Aotrou, ar groaz !" e weler e oas o klask ur groaz diouzh da vlaz !

990.- Bezañ divrall hep bezañ divarc'het gant tra, - sed pezh ac'h eus ezhomm. Goulenn se digant an Aotrou, ha gra pezh a c'hellez evit henn tizhout, rak un araez galloudus ez eo evit chom hep distreiñ diwar an hent frouezhus ez out aet gantañ.

991.- Ne c'hellez ket "pignat" ? N'eo ket souezhus, paket

ganit hevelep lamm !

Dalc'h ganti, hag e "pigni".

Az pezet soñj eus pezh a lavare ur skrivagner speredel : da baour-kaezh ene a zo ul labous maz eus c'hoazh fank ouzh e zivaskell.

Pezh a zo diank ez eo heolioù an neñv hag ar strivadenoù personel, dister ha pennek, evit en em zizober diouzh an techoù-se, ar faltaziennou-se, al loes-se : ar fank-se peg ouzh da zivaskell.

Ha dieub en em weli. Ma peurzalc'hez, ez "i war-grec'h".

992.- Rent gras da Zoue en deus da skoazellet, hag en em laouena gant da drec'h. Daoust hag ez eus donoc'h levenez, an hini a sant da ene goude bezañ klotet ouzh ar c'hras ?

993.- Mat e prezegennez,... yen, avat, ivez. Nag a arbennoù evit dilezel an dachenn ! Hag hini ebet anezho, war a seblant, pouezus-dreist.

Gwelout a ran, hep mar ebet, ec'h eus abegoù gwir ; met n'emañ ket ar gwir ganit !

994.- "Torret eo din an entan," ac'h eus skrivet din.

N'ec'h eus ket da labourat dre entan, hogen dre garantez : emouez ouzh da zlead, a zo emzilez.

995.- Divrall : evel-se e rankez bezañ. Ma ra da zistervezioù da-unan pe re da nesañ d'az peurzalc'hegezh horjelañ, e teu d'am spered ur meizad trist eus da uhelvennad.

Gra da soñj ur wech evit mat hag evit atav.

996.- Ur soñj gwall izel eus da hent ac'h eus, pa gredez ec'h eus e gollet p'en em santez yen ; pred an aprouez eo, rak da guitaet o deus frealzoù ar gizidigezh.


997.- Ezvezañs, digenvezder ; aprouennoù d'ar beuzalc'hegezh. Oferenn santel, pedenn ar galon, kerrinoù, aberzhoù, kenunvaniezh ar sent : armoù evit trec'hiñ pa vezer aprouet.

998.- Benniget ra vezo ar beuzalc'hegezh, hini an azen en-dro d'ar puñs, bepred war-bouez an hevelep kammed ; bepred an hevelep troioù ; un deiz hag egile ; an holl ingal.

Anez-se, ne vefe nag azvder evit ar frouezh, na freska-

durezh el liorz, hag ar jardrin n'en defe ket frondoù.
Laka ar soñjezon-se da dalvezout evit da vuhez dia-barzh.

999.- Pehini eo segred ar beuzalc'hegezh ? Ar Garantez !
Kouezh e karantez ar Garantez, ha ne golli ket Anezhi !



Roll-dezrannañ

ABAFTEDE d'en em ziskouez kristen

185, 353, 387-392, 466, 491, 541, 680, 787 ; herrded
401, 479, 482, 841.

ABOSTOL

Adal 929 betek 959 ; un abostol eo ar c'hristen : 7, 16
24, 833, 921, 933, 942 ; kendasprener gant ar C'hrist
1, 109, 687 ; sec'hed d'an eneoù, gred abostolel : 32
315, 796, 804-806, 810, 934 ; en em santelaat a ra evi
santelaat ar re all : 284, 835, 837, 930, 940, 960, 961 ;
un ene a bedenn hag a emaberzh ez eo : 89, 105, 108,
232, 528, 937, 938, 946, 969 ; feiz : 315, 489, 695, 785,
794, 912, 968 ; goanag : 19, 255, 473, 490, 660, 774,
802, 911 ; karitez : 412 459 464 806 839 948 951 955-
957 ; uvelded : 365, 474, 830, 834, 932, 935, 959 ; bezañ
ur benveg : 360, 475, 484-486, 491, 909 ; didro ha diardoù
ez eo : 379, 840, 841, 843, 848, 939, 958 ; skouer a ro :
11, 342, 371, 372, 383, 411, 661, 795, 842, 943 ; herrded :
35, 380, 387-390, 850, 877, 982 ; mignoniezh : 807,
831, 838, 846, 970-977 ; dre al labour : 344, 353, 358,
359, 373, 407, 799, 832 ; vertuzioù arall : 129, 631,
931, 936, 940, 947 ; abostol da c'hounit ebestel : 791,
793, 803, 808, 809, 811, 920.

Abostolerezh

Adal 883 betek 851, hag adal 960 betek 982.
Santelaat ar bed : 1, 121, 376, 831, 833, 844, 911, 944 ;
gorren ar C'hristen e lein obererezhioù Mab-den : 301,
347, 764, 914 ; feiz : 137, 175, 255, 317, 471, 489, 583,
595, 649, 695 ; karitez hag unded : 192, 550, 830, 847,
940, 955, 957, 962 ; sentidigezh : 315, 488, 614, 616,
619, 629, 915, 941, 949-954 ; hollveziadelezh : 7, 812,
928, 947, 963-966, 968 ; ar frouezh anezhi : 28, 129 ;
199, 473, 697, 794, 916, 968 ; araezioù dreistnatur :
82, 89, 105, 108, 470, 546-549, 837, 960, 869, 982 ;
skoazell digant an Aelez-virerion : 563-566 ; abostolerezh
dre ar vignoniezh : 846, 850, 971-975 ; bezañ natur

ha didro en abostolerezh ; 380, 643, 835, 842, 970 ; dre al labour : 347, 353, 799, 832, 979 ; dre ar studi : 335, 336, 340, 346, 782, 978 ; dre gelenn ar feiz : 338, 344, 349, 467, 582, 836, 849 ; abostolerezh dre lizher : 312, 547, 976, 977 ; ar Werc'hez Santel Mari : 494, 505, 515, 982.

ALUZEN

466-468, 636, 638.

ANAON ar purgator

571, 898.

ARAEZIOU

Adal 470 betek 491 ; arabat bezañ pizh ganto : 82, 317, 324, 345-347, 404, 471-473, 480 ; fiziañs en araezioù dreistnatur : 365, 433, 470, 474-483, 489, 577, 585, 586 ; youl-vat : 350, 362, 484-486, 490, 491, 716.

ARVARIÑ

316, 491, 643, 797, 902, 909, 910, 995 ; feiz ha diarvariñ : 1, 515, 757, 798, 964, 985.

AZREC'H

200, 244, 436, 712, 725 ; glac'har diwar garantez : 246, 378, 403, 439, 441 ; Ar Werc'hez Vari : 503, 506.

AZVDER spered, parfeted

2, 3, 43? 49-51, 55, 427.

